

# DISKULIADUR ARES

## *Kentskrid*

### **Mammenn**

#### **1974, e Ares, kumun vihan eus arvor Jirond, Bro-C'hall.**

Eus ar 15 a viz genver d'an 13 a viz ebrel, war dro pep eil deiz, e kreiz an noz dalc'hmat, e vezan dihunet, galvet da vont d'ul lec'h ag an ti pell mat diouzh ma c'hambur. Eno en em gavan e-keñver Jezuz, lugernus, n'eo ket evel ur spes anezhañ avat, an hini adsavet a varv da vev eo, dasorc'het en e gorf a-bezh treuzneuziet. M'er gwel hag er selaouan 39 pe 40 gwezh. En entremar on diwar-benn an niver resis a weladennoù dre na voe marteze nemet ur Veilhadenn eus ar re 2 ha 3.

Dic'hortoz a-walc'h eo al lec'h m'ema deuet Jezuz : ur chanter en un ti m'emaon o reneveziñ, e doare ur Yann a vil vicher ma'z on. Deskiñ a rin *Jezuz nad eo ket Doue*, n'eus anezhañ nemet ur *C'hannad* d'an Tad (32/1-2), met perak 'ta an Tad en dave e kreiz dafar-chanter, benveger, atredoù, din-me test kentoc'h dijaoj, den a-feiz sur a-dra daoust n'on ket tamm douget da gevrenezh an neñv avat ?

Marse 'walc'h e venn ar C'hrouer degas soñj m'ema-eñ an hini dic'hortozet a-viskoazh, an direnkour meur, dishañval a-grenn diouzh ar pezh a vez adijinet gant ar relijion evel ma adijin ar sirk an *olifant* (36/10) dre e embregiñ hag e ginkliñ evit lakaat d'ankouaat noblded frank ha digabestr e anien *wirion*.

An noziou kentañ, diampart, e skrivan ar pezh a lâr din Jezuz war sec'hier plastr gant ur c'hreion kalvez. « An Aviel roet e Ares » e anvin ar C'hemenn-mañ anat deoc'h, pan'd eo Jezuz an harod anezhañ.

Nerzhus eo, bras kenañ, ker bras hag un nor e vez-eñ en e sav e-tal dezhi a-wezhioù. Muzuliñ a rin an nor : 2,05 metr. War-dro 1,90 metrad e rank bout ment Jezuz neuze. Fiñval a ra, daoust n'er gwelan gwezh ebet a-ziadreñv-kein. Gwiskiñ a ra ur sae hag a beg d'e gorf evel glep e vije. Eus ar reter ema neuze e zremm. Staget eo e vlev a-dreñv d'e boull-kil moarvat, berrig e varv ha teñval. An taol kentañ e soñjan en un arab, un haroz biblek eus an dezerzh : Abraham ? Dre welet merk ar goulloù, unan ouzh kreiz pep arvrec'h hag unan ouzh ur c'har, a-hanter d'ar gribenn-c'har, e komprenan ez eo Jezuz anezhañ. Eus ar 15 a viz genver d'an 13 a viz ebrel e lako da stokiñ e veud dehoù div wezh ouzhin, ur wezh war an diweuz, ur wezh all war an tal. Komz a ra ur galleg reizh ha plaen, gant ur vouezh reizh ha razh.

Trelatus bras eo an amprou-hont ha betek ar fin e vanan mut, hogen soñjal a ran avat ha Jezuz a dap ma freder. Lenn a ra ar pec'hed ennin hag ar soñjoù sot a dreuz ma spered e-korf an noziou-hont a drefu, lec'h ma vije re all a dailh gant an darvoud moarvat, met me nand on ket. An amsellerezh pizh-se eo an amprouadur startañ evidin, ha Jezuz neoazh da ma « furchal » gant karantez ha dinded. Ker meurdeus eo anezhañ ma lâran un deiz da Christiane : « kompren a ran perak o deus eñ krusifiet. Bras meurbet e tlee bout ar c'hreñv mestronius en deveze Jezuz war an engroeziou tud. Ouzh savboent ar galloudoù e veze danjerus anezhañ ken-ha-ken ha dic'houzañvus.

Deskrivet eo kement-se donoc'h dre ar munut er « Skrid-digor » emb. 1974, hag en embannadurioù da c'houde.

#### **1977.**

Eus an 2 a viz here d'an 22 a viz du ag ar bloaz-se, e Ares dalc'hmat, en ur chapel, savet darn anezhi diwar bouez ma daouarn, tregont metrad diouzh al lec'h ma en em ziskouezas Jezuz e 1974,

e teu ar C'hrouour d'e dro pemp gwezh en un doare dreistnatur e kreiz ur pikol a entanadur marzhus, dre glevet ha gwelet.

Teofaniezh e rer ag un degouezh en-eeun er seurt-se gant Doue. Lâret a oa bet din gant Jezuz : *Gallet a ri lavaret : « gwelet am eus Doue » (37/3)*, mes da lâret gwir, ne soñjen nemeur er gerioù-se. Ur souezh a-grenn eo evidin ha garvat un darvoud, kement ma seblant din dousig e-keñver ar from ha treboul am boa gouzañvet pevar bloaz kent gant emziskouez Jezuz.

Luc'hediñ ha dassonal a ra an aer hag an oabr tro-dro d'ar chapel evel ma vije stokoù klezeier ha skoedoù anezho. Hag eñ a vije arme an droug o skoiñ ouzh arme ar mad diskennet diwar an Neñv ? A-hed magerioù ar chapel, tu diabarzh ha diavaez, goustadig e tiver un doare lava gwenn. Er chapel e stlak ha strak ur spont framm-koad an doenn ; hañval ganin ema hennañ endan darzhiñ, ouzh en em zispenn, en arvar da ma flastriñ kent pell, ha dindan ar framm-se, en he sav en em zalc'h sonn ur bann gouloù n'eo ket brasoc'h anezhañ eget ur vazh met dezhañ ur gwenn hag ur sked nend on ket evit keñveriñ ouzh tra ebet anavet ganin. eus ar vazh-se pe a-dost e teu ur vouezh. He c'hemennadenn, meurdeus ha dezhi un nerzh deskriv dreist dibar, e rin « Al Levr » anezhi, en-arbenn ma lavar din : *Serr al levr eus mab-den. Skriv al Levr (gwirion), ta lagad digor ! (I/9-10)*. Intent a rin ez eo *Tad an Hollved (12/4)* e-unan a zo o komz, an hini a vev c'hoazh da-c'houde an heoleier aet divi ha troet da fank ha eñ redek dre an anfin prest atav da *grouiñ mil heol nevez* pe stered (XXI/12-13), ar C'hrouour divent a zo en em vihanaet, dre garantez evit mab-den, da vent disterig un *tach* bras (II/21) o komz.

Neuze enta, ar vazh c'houlou zo dirazon eo ar *bod lugermus* tremenet eus strouezh garrig roc'hellek *an Horev (Ermaeziadeg 3/1-2)* da garrelladur pri-krag ul lec'h pediñ dister eus Bro C'hall. Bez' e vo ag an hevelep c'hoarvoudoù dreistnaturel-hont e-doug pep hini eus ar pemp teofaniezh. A-brantadoù e vin lakaet ivez da c'houzañv amprouennoù arall : prosesion diouganourion varv, dibunadeg ar spesoù, pounnerded ar bed e-skourr ouzh an Neñv e-doare un tour a-ere e vlein, ma marv-me en a-raok hag ur pezh mell pavad zoken.

Deskrivet eo an holl-draoù-se e-barzh e « Danevelloù, Notennoù ha Prederiadennoù an Test » (gwelet an embannadurioù 1987, 1989 ha 1995).

## An Aviel Roet e Ares

**D'an eur na sonjit e teuy Mab an Den evel ul laer.  
(Mazhev 24/43-44)**

**Noz ar 14-15 a viz genver 1974 e Ares, Jirond, Bro C'hall.**

Dihunet eo Michel Potay gant ur vouezh : « Sav ! Deus ! » Hogosik noazh, ez a a-dastorn a-dreuz stlabez chanter e di da reneveziñ, hep gouloù na tommerezh. Ha eñ d'en em gavout, a-daol trumm, gant un den splann da welet en un doare dreist-bedel e teñvalded an noz. Braz, kreñv, gant bri meur ha tres ar sav-heol warnañ. Da gentañ e tegas soñj dezhañ, ar gweladennour, ag un den eus ar stepoù e-giz Abraham, buan avat e kompren an **test**, kalvez Nazared eo, Jezuz (gw. 2/15).

**Eur ar wirionez hag an neveziñ**

**1**/1. *Adsav*, den Mikael (Michel), ez-sav !

*Paouez gant da ouelerezh, gant da grenerezh !*

Ra baouezo da vezh ! Az lakan noazh evit da wiskiñ gant ur vantell nevez.

### **Touellerezh ar relijion dogmatek ha kloerel**

2. Kreniñ a rez hiziv ; dec'h edos azezet Em Anv, sur ac'hanout ; komz a res Em Anv, sur a gomzoù diazezet gant *gouiziegezh* a-hed ar c'hantvedoù gant ar veleion,

en ur brezegiñ diwar levroù Ma C'hannaded

ha re a dremen da Gannaded Din,

3. ouzh da grediñ e peoc'h Ganiñ,

e gwasked ar fals furnez roet meurdez dezhi gant ar c'hantvedoù,

a laka war ar bobl da zoujiñ skiant he breutaerion,

4. deuet diwar tron priñsed al lid, engehenterion ar veleion

hag o c'hoskor abaoe Filip, Ma Zest (gwir),

5. o krediñ kerzhet Em raok da zougen war an aoter kinnig ar bobl

evel ma kerzhas-eñ e-unan, met er Reizhted,

6. o krediñ roiñ Ma C'homz ha seveniñ promesa Ma Diougan,

o klevet pedenn ar bec'herion,

ouzh da grediñ benniget dindan Ma Brec'h astennet,

7. o krediñ selaou ouzh Ma Gouestloù,

douget da galon ned eo ket da sentiñ ouzh Ma Chomz na ouzh Ma Oberoù,

met ouzh re da noueañs-priñs,

a zo *perc'hennet* Ma Bodadegoù ganti war an douar a-bezh.

8. Rak aes eo komz Em Anv pell Diouzhin, evel ar paotr

yaouank en em gav goudoret en e wele,

e peoc'h an noz,

pell diouzh an tad hag e gastiz a zeuy gant tarzh an deiz, e

splannder ar gouloù.

### **An neb digredenn zoken a gompren ar pezh a lâr an Tad**

9. Paouez gant da grenerezh, torr da leñverezh !

Te oar piv a gomz ouzhit.

Kement den, zoken an hini n'en deus biskoazh resevet Ma C'homz, e kreiz ar

*gwez hag al loened gouez*, e kreiz ar c'heodedoù savet gant *gouiziegezh*,

zoken an hini en deus Ma distaolet kent Ma anvout, a oar Piv On pa

Gomzan outañ,

10. rak ned eus ket bet kement a viliadoù a heoleier o sevel war an denion a-zrebi

o zad, Ma Mab kentañ, n'o deve gant Galloud an

C'hwezh a Zianalan warne dalc'het soñj Ac'hanon,

11. rak ken tost On oute ma c'hallint chom hep Ma gwelet, met

moulet int Ouzhin evel ar wezenn kresket ouzh mur an Templ en em

voul ouzh tro e vein, a gromm hervez gwareg e borched.

12. Hogen an Templ nad eus ket a zistruj dezhañ,

a pa ne c'hall beviñ ar wezenn nemet e gwasked e vogerioù.

C'hwezho Ma C'hounnar dindan e borched,

hag ar wezenn a zisec'h ha kouezh evel dindan ar barr-amzer !

**2/1.** Me zo an Hini En deus komzet dre Adam, Ma Map kentañ, en deus choaset bezout mestr d'an tir ha paeñ truj Din diwarnañ en un dremen dre c'houlïoù Job ha dre poull ar foz,

### **Adam a gav gwell dezhañ e reizhiad-eñ evit steuñv ar C'hrouour**

2. en deus choaset bezout mestr war ar gwez hag o frouezh, en ur ziviz war e benn e-unan pehini a vo plantet, pehini a vo diskaret, pezh frouezh a vo eostet, pere a vo debret gant e vugalez,

pere a vo debret gant e dropelloù,

3. pehini a geneil Hava, en deus choaset dont da vezout mestr warni, he lakaat da blegiñ d'e reuziadoù *rud*, hep ranniñ ken ar joaïoù miret Ganin d'ar priedoù, oc'h ober eus Hava ur gañvalez vrasesz bepred

evit brasaat renkadoù e armeïoù hag e servijerion, evit pourveziñ d'e *geginou* ha d'e avoultrou,

4. a felle dezhañ bout mestr war an hoarn en deus goveliet evit digor an douar, dindan e zalc'h, d'ar greun ha d'ar mammennou, evit armiñ e vrezelerion, evit diskar e wez, mestr war an aour, war gloan an deñved, war livioù ar rec'hier evit kinkliñ anezhe e vaouezi kaerañ, evit sevel dezhe war valed o stummoù a laouena e selloù ha bouzelloù *traoñ* e gof, evit o gwastiñ ha gwastiñ an holl re e tenn korvo ha levenez diwarne, galloudegezh ha sentidigezh,

5. en deus choaset bezout mestr war ar vein,

savet gantañ a-benn bezout en o goudor, bev pe varv,

kerkoulz e-barzh korf e *c'hlebor meizh* ha klouar

hag e-barzh ar gwisk eskern sec'h ka yen a *felle* dezhañ d'Am

gortoz e kleuz an douar.

### **Ar re o deus graet, kousto pe gousto, war-dro d'ar mammennou**

6. Me zo an Hini En deus komzet dre Azor,

en deus roet d'Am anavout en tu-hont d'ar meurvor, o tougen Ma C'hemenn e-pad daou ugent deiz evel a-dreuz d'ur gouelec'h, en un dremen dre boanioù ar sec'hed, ankenioù an digenvez hag (euzh) al *leviatan*, a renoz e eskern, mab d'Adam, e-harz ar pikernioù braz, en gortoz d'Am Deiz.

### **Azor e Amerika, Noah ha nad eo ket bet selaouet, Abraham, Moizez**

7. Me zo an Hini En deus komzet dre Noah, en e c'hourvez mab d'Adam e douar *Kerak*, kent na selaouo ouztañ e vibion-eñ zoken, a saveteas evel-kent diouzh Ma C'hounnar, hogen achu a rejont *brevet* (beuzet) avat.

8. Me zo an Hini En deus komzet dre Abraham ha dre vMoizez a ehan o eskern, mibion d'Adam, goude bezout sevenet taolioù-kaer o c'hurioù ha lezet promesa Ma Diougan d'o diskennidi, an eil e *kev* Makpela, hag egile e *Rabba*, en gortoz d'Am Deiz.

### **Mouhamad (Mahomed), diouganour fur ha selaouet**

9. Me zo an Hini En deus komzet dre vMouhamad an torrou-idoloù, muiañ selaouet Ma C'hannaded, ar furañ, n'en deus ket lakaet e bobl da zaoublegiñ dindan ar reolioù ha n'en deus ket o lakaet da stouiñ dindan urzhiadurioù

prñsed al lid, hag a-gement-se zo savet dezhañ diskennidi ker fonnus  
evel traezh an aodoù men e skoont o *bagoù* a-benn pediñ,  
evel traezh an dezerzhioù Am eus lakaet da strinkiñ dioute  
pinvidigezh ha *galloudegezh* evite,  
ar mab d'Adam a renoz e Yatrib, en gortoz d'Am Deiz.

### **Elia, diouganour e gorf treuzneuziet pignet d'ar beurbadelezh**

10. Me zo an Hini En deus komzet dre Elia,  
kentañ-holl tec'het diouzh gouestl Adam, e dad, d'Am gortoz e douar,  
o troiñ kein d'herezh an douar, o tioueriñ paeiñ truj Din anezhañ,  
o tec'hel diouzh poull ar foz,  
ha eñ da vezout ar c'hentañ dre splannder ar bez en dize savet dezhañ  
e bobl, a gavas gwell bezout en diwezhañ Em lec'h,  
ur *preñv dister* tommet da viken da sked Ma *Gloar*, un huanenn douget gant Ma Aelez  
en Annez ma Choman n'harz sterenn erbet,  
na sav-heol na kuzh-heol Dezhañ,  
ur wenedd-holl Dezhañ e hañval an heoleier Outañ bezout morlivetoc'h evit kann al loareier.

### **Jezuz, un diouganour arall pignet d'ar beurbadelezh en e gorf**

11. Me zo an Hini En deus komzet dre Jezuz, Ma eil Mab, an hini,  
goude Elia, gorroet c'hoazh d'ar *Gloar*,  
en deus dioueret glouestr Adam bout mestr d'an douar  
ha d'ar broadoù  
evit gwerzh ur bez yen-sklas d'*Am gortoz*  
12. ha eñ gorroet d'ar *Gloar* uheloc'h *c'hoazh*.

### **Jezuz a garas mab-den, en un nac'hiñ lezennoù hemañ avat**

An Hini Am eus olevet Ma-unan.  
An hini Am eus lamet an *namm* dioutañ  
en arbenn ag e gurioù kaer evit lakaat e gammedoù Em C'hammedoù, evit kariñ  
Ma Fobl,  
dre ziverkiñ eus kaieroù Sezar  
e anv-eñ  
hag anv e vamm eus kaieroù an templ,  
na ve-eñ mui a *rummad* ebet,  
ma chomo merc'h yaouank e vamm,  
na chomo roll-dimezioù ebet,  
13. evit e deniñ diouzh kement diagentiezh  
hag e lakaat da zont tre Em Zi Roueel,  
ober un Doue anezhañ  
ouzh e deuziñ Ennin hep distro  
14. evel argant o kendeuziñ gant aour,  
da roiñ stumm d'ur melezour hag a vije  
trellusoc'h eget mil heol  
keneve ma tremenin Ma C'hwezh warnañ  
da zilufriñ e sked  
hag e lakaat da vezout *gouzañvadus* d'an aeled ha d'ar re zilennet,  
Ma C'hwezh a *Zianalan* evit roiñ tro d'Am gwelet.

## Jezuz eo, end-eeun, a gomze e Ares e 1974

15. Komzet Am eus dre Jezuz  
hag e Komzan c'hoazh drezañ  
dit-te hiziv.

### Dismantr gwastus an diouganerion aonik pe vinellet

16. Me felle Din komz dre un niver bras a re all,  
hogen int a zo en em laeret kuit.

Aonik, n'o devez ket gallet mont er-maez ag ar bed,  
en em ziforc'hiñ diouzh ar bed, pignat war Ma *Leurenn*  
evit komz outañ Em Any,

17. gant aon rak ar re ziskredik hag ar re c'hoapaus,  
priñsed al lid hag o doktored,  
penndiarned ar broadoù hag o *justis*,  
ar vreutaerion a bep seurt ;

18. peotramant n'o devez ket roet Ma C'homz, o tevel war ar pezh a zisplij d'ar bed.  
Ha deuet ar gwalleur warne ha war ar bed,

19. rak pa baouez Ma C'hwezh,  
evel an avel a dav, en ul leuskel da gouezhel er mor an had a zouge,  
ar glav a vounte en e raok, ar gouelec'h a chom ar gouelec'h  
hag an nebeud a vuhez a vane ennañ a varv.

### An diouganour eus Ares, dic'h ortoz-kaer anezhañ, dister red e vuhez tremenet

20. Te, den Mikael, da anavet Am eus kent ma'z i eus da dad  
da gof da vamm.

Da viret Am eus d'Am Servij.

Pellaet Am eus diouzhit profoù hag enorioù ar bed,  
ar renkoù hag ar *glodoù* a gas dezhe ar bed,

21. evit na ves ket temptet gant an c'hoant tec'hiñ Diouzhin,  
dont da vout trist gant Ma Galv.

Da ouestlet Am eus. Astennet Am eus Ma Brec'h davedout  
evit oleviñ da c'henoù gant Ma Dorn,  
fiziañ Ma C'homz ennañ,  
evit ma ves Ma C'hannad,  
ha neket ur priñs eus al lid,

Ar C'hrouour na lâre ket e voe distaotet ar vuhez speredel gant Adam, hogen hemañ a **choazas** he sujiñ d'ar vuhez danvezel ar pezh he lakaas troiñ da **vrizhkredenn** pe relijion (21/1) ha disperedelaat mab-den. Gwalleur, poan, aet ar vuhez war verraat hag ar **marv** a zo dilec'hioù naturel kement-se. Distro ur **restadig** (26/1) d'ar **Vuhez** speredel (24/3-5) graet didro-kaer eus eeunder, **karantez**, **pardon**, **peoc'h** ha **frankiz** (10/10), a viro ar bed holl ouzh ar goashañ razh da zont c'hoazh (38/2). Ned eo ket kastiz an Neñv eo a vo ar goashañ (hini ebet ne vez kastizet gant ar C'hrouour), met disoc'h oberiantiz naturel an **droug**. Ar **restadig**, galvet gant An Diskuliadur eus Ares, a lako da sevel an **Deiz** war ar bed (31/8-13) lec'h n'en do mab-den na da c'houzañv na da vervel ken.

**Jezuz** e Ares ne denn tamm ebet d'ar skeudennoù relijiel hengounel anezhañ. Da gentañ e kav d'an test en em gavout gant un hini a-gozh bras eus ar Bibl, balc'hoc'h ha rustoc'h e-giz Abraham. Ne vo nemet pa lâro ar C'hrouour dre hantererzh genoù ar c'hannad-mañ : « **Komzet Am eus dre Jezuz hag e Komzan c'hoazh drezañ** » (2/15) e taolo meiz an test ma teu anat ar merkoù gell-ruz war an divarvrec'h ha war ar c'har gleiz, tostik tra dindan sae ar gweladenour, a zo berrik tammigou, eus kleizhennoù unan staget gant tachoù ouzh ar groaz. Pegiñ a ra ar sae ouzh e gorf ha hi krizet evel glep e vije. Ur barv berr zo dezhañ ha blev hir staget wardreñv.

Diskuliadur Ares eo an treuzskrivadur graet war an tomm eus ar C'homzoù klevet digant Jezuz (1974) hag ar C'hrouour (1977). Evit chom hep kejiñ etre daveoù ar rann-mañ « Aviel Roet e Ares » hag an eilvet rann « Al Levr » ez eo bet dibabet gant an test anviñ Beilhadennoù (V. berradur) en un implij sifroù arab da niverenniñ 40 noziad ar gentañ hag anvñ Chabistr (Ch. berradur) o implij sifroù roman evit 50 rannad 5 noziad an eil.

### Ar relijion hag ar politik dianzavet

### 3/1. ...rak war Ma Bodadegoù n'Am eus diazezet priñselezh ebet.

Gant « ...rak » e krog ar Veilhadenn 3 evel pa vefe heuliadenn ar Veilhadenn 2 an hini eo. Evit gwir, skrivet e voe an div ouzh an hevelep paper (sec'hier plastr) hep disparti erbet. Disrannet e voe d'an arroudenñ-hont gant an test en arbenn na oa ken anezhañ evit en devout soñj da vat hag eñ a voe ur Veilhadenn pe div anezhi. Mar be div en defe gelllet krog ivez ar Veilhadenn 3 gant **Da ouestlet Am eus (2/21)** pe gant **N'Am eus ket roet Din ur maskl (3/4)**.

2. Gant ar bed eo ema bet staliet, evel an alouber en em stal war herezh ar broadoù konkeret diwar e feulster,  
a *serr* o diskouarn, o daoulagad, o genoù,  
evit n'Am c'hlevint ket mui,  
evit n'Am gwelint ket mui  
ha na gomzint ket mui Ouzhin,
3. evit roiñ da grediñ dezhe m'ema-eñ *dalc'hour* Din,  
an alouber ampart d'Am lakaat da lavaret ar pezh na Lavaran ket,  
da lakaat ar broadoù da *veviñ* evel na Vennan ket.
4. N'Am eus ket roet Din Ma-unan ur maskl,  
n'Am eus ket diazezet ur renkad priñsed Em raok evit kuzhat Ma Fas,  
nag e vije o sez pe er sav-heol pe er c'huzh-heol,  
ar briñsed gurunet eus al lid  
hag o doktored vevelek,  
a breder gant arz Ma C'homz a-benn kavout enni lezennoù hag a gadarn  
o zronioù hag o *c'hadoerioù-prezeg*  
e Jeruzalem, e Roma, e Atena,  
tramor,
5. e kement lec'h m'o devez ar briñsed diazezet o aloubadennoù,  
e lec'h ma galvont o *bannoù*,  
e lec'h m'o devez *taolet hed* o rebelled disivoud, o *tilezel* o c'hurunioù hag  
o zronioù, met miret gante o doktored evit tenniñ a Ma C'homz  
lezennoù arall,  
na dalvezont ket gwell anezhe eget re ar briñsed ;
6. an holl, priñsed pe rebelled, hag a vez o vanniñ Ma Anv,  
an holl a vez o sevel ma c'hroaz evel ur vazh-c'hourc'hemenn hag a zalc'h  
sell ar broadoù  
evel dindan gazel-ge ur boemerezh.

### **O gwirionez dezhe e vez lâret gant ar vestronierion, neket ar wirionez**

7. Ma C'homz, He embann a raont d'Am Fobl,  
daoust n'He dilezont ket dezhe avat.  
Ha Hi kinniget gant o dorn kleiz ? Kentizh e harz o dorn dehoù al  
lennour en e c'hred Evidin, heñvel ouzh an hudour o verziñ  
d'evet e zrammoù strobiniellus *hep gouzout* ouzh an neb diskiant a-walc'h ;  
rak doazh bras e vezont da lakaat kevrinus, ul *lec'h* teñval, anvet gante hepken,  
eus Ar Pezh Am eus roet d'ar bed er Sklêrijenn.
8. Hag unan anezhe d'He embann splann ? Kentizh unan all a gelenn d'ar bobl ar  
pezh a vez dleet dezhe kompren,  
ha neket ar pezh o devez klevet,  
rak doazh bras e vezont da droiñ d'ur *bourbout* iskis,  
ul lavar dizanav,  
Ar Pezh Am eus roet d'ar bed e son-skiltr Kornioù an Neñv,  
e taolioù-mouezh heson Ma C'hannaded.
9. Den Mikael, lam da gurunenn diwarnout, diskenn a-ziwar an tron-se ;

Ma Re-Me int,  
O raet Am eus e herezh d'Am Fobl razh.  
An holl zo priñs,  
an holl a ren war ar marv hag an ifern, pa vevont hervez Ma C'homz.  
Kurunet Am eus Ma holl Feizidi.

### **A-gement a nac'h galv e donkad speredel a nac'h e zenelec'h**

- 4/** 1. Selaou, den Mikael,  
kreniñ a rez,  
horellat a rez evel ar *fellon* tapet diwar e drubarderezh.  
2. Na c'harm ket Warnin : « Hag eñ zo ma gwall ? Ha n'eo ket gant ar c'hantvedoù eo  
ema bet diazezet noueañs ar briñsed he deus ma *c'hejet* outi ? »  
Na c'harm ket an dra-se ; na ra ket gaou ouzh Ma Zrugarez !  
3. Kent ma'z i e-barzh kof da vamm Am boa da zilennet.  
Adalek neuze an holl hentoù az pezh kemeret, nemet ar pec'hed,  
e veze kaset gant un Ambrouger,  
e *lasoù* fougeüs ar vended,  
evit ma anavi ampartiz, troioù-gwidre ar re az Kasan taliñ oute.  
4. Ar pec'hed, a restaoli kont din,  
met ouzh en em laerezh kuit a-ziouzh Ma Galv hiziv *ez i da netra*,  
5. rak an ene a c'hall bezout klañv, yac'haat a Ran dezhañ,  
hogen gallout a ra ivez kavout e finwezh hep distro.

### **An ene, pont buhezel etre krouadur ha Krouour**

6. Ema an ene sell, dorn, gouzoug, *stomog* ar spes ; drezañ  
e C'hallan e dommiñ diwar *sked Ma Gloar*; e C'hallan e gas war-du an *hollgaerded veur* hep somm,  
e C'hallan klevet e *veuleudi* hag e ziviz,  
e C'hallan e vagiñ da virviken.  
7. Hep an ene e kante ar spes, e anoazh an anken, dall, *naonek*, dre ar garidennoù  
teñval kleuzet gant ar preñved ha gant an ifernoù sklaset,  
ha eñ troiñ da *frim* ; neuze e spont e dasmant an *dud*.  
8. Na gren ket ouzh Ma Mouezh ;  
kren da gas da netra da ene !  
9. Na c'harm ket Warnin : « Penaoz ez in me davet priñsed al lid ?  
*Dalc'het* e vin pell diouzh o lojeris gant o dismegañs. Davet penndierved  
ar broadoù ? Pellaet e vin evel unan diskiant gant o gwarded. »  
Na c'harm ket an dra-se ; na ra ket gaou ouzh Ma Nerzh !

### **Mab-den disuj daoust ma oar ar Wirionez**

10. Kaset Am eus Ma C'hwezh war an douar a-bezh ;  
Gantañ-eñ adal an hadenn, adal an vi,  
kement buhez a anav he bevañs ha lezennoù he spesad.  
Gantañ-eñ kement den a anav Ma Mouezh.  
11. Mar man disuj o fenn,  
an holl re az po kaset Ma C'hemenn dezhe a ouezo *en o c'hreiz*,  
en o askre lec'h ma C'hwezhan, ez eo gwirion Ma C'hannad,  
rak mard eo gwan ar penn, leun a lorc'h ennañ,  
ar galon zo hi *leun-barr* ag he Doue.



## **Krogiñ da eostiñ ar re vad**

12. E-leizh n'az heulio ket hag en em gollo ;  
darn a sujo d'Am C'homz  
ha d'az heul a grogo gant an Eost.

### **5/1. Rak tremenet eo an Hadour.**

A-dreuz ar rouedoù stignet gant priñsed al lid, ar pejoù antellet gant ar veleion,  
tremenet eo Ma Had,  
douget gant Ma C'hwezh betek ar c'halonoù.

## **Holl ar gwinizh speredel n'azv ket a-gevret**

2. Hogen ra daolo Ma Mederion ur sell en a-dreñv war  
lez ar park :  
Lakaet Am boa da sevel diskiblion,  
testoù Ma Fazioù war an douar,  
evit o dave da bPark Israel,  
evit feskenniñ an Eost azvet *goustad* a-c'houde o zad Abraham,  
lakaet kant gwezh en arvar gant ar sec'hor, ar gorventenn,  
douraet gant Ma Daer ha gant ma Gwad,  
3. ha, digalonekaet *adal* al lez,  
taolet o deus o filc'hier kerkent hag ar feskenoù kentañ, aet int kuit war an  
douaroù distuz lec'h ma kave gante bezout spletusoc'h da zifraostiñ  
hag arat,  
en un ankouaat ned eus nemet un Hadour hepmuiken,

## **Ar Mad n'eo ket bet staliet er bed**

4. ha disec'het en e sav Eostad Israel,  
ha n'o devez medet nemet louzoù gouez ha strouezh *stank*, met  
paour e greun mat,  
frondus, met laoskel a ra ar vugalez garmal o naon, war al lanneier m'  
o devez Ma Diskiblion diviet o nerzh warne.

## **An hini fur a laka da glotiñ ar mision kaset gantañ ouzh an dud en em gav-eñ gante**

5. Ra chomo Ma Mederion a-hiziv  
hep diankiñ war ar fraostoù !  
6. Sell ! Tresiñ a Ran lez ar Park m'az Kasan ennañ :  
eus tu an heol da greisteiz  
betek lec'h ma tiskenn *ar frimoù* d'ar gouañv ;  
eus an *tu* eneb  
betek lec'h ma chom war neuñv ar skorneier d'an hañv ;  
d'ar sav-heol  
betek lec'h ma sav banniel Mouhamad ;  
d'ar c'huzh-heol  
betek an inizi koural.  
7. Heñvel ouzh Ma Diskiblion Am boa kaset davet broadoù Israel az Tavean  
d'ar broadoù  
a *vevenn al lez* az peus gwelet,  
ket en tu-hont.

## Ret eo misioniñ tud ar mad ; an ed mat

- 6/1.** Kreniñ a rez, den Mikael,  
disliv eo da fas,  
en arbenn ma lavarez ez penn : « Penaos e c'hallin-me cheñch ur bobl  
ker gwan ha ma'z eo *diniver*,  
a pa ra diouer din kalon a-walc'h da cheñch ma buhez ma-unan ? »
2. Lavaret Am eus dit : « Tremenet eo an Hadour »  
N'az kasan ket d'an Haderezh, met d'an Eost.
3. Roiñ a ri da c'hwez ha da skuizhder d'ar feskenn-ed,  
da zorniñ ar feskennad,  
da lediñ he greun,  
d'o *zroiñ* er c'hrañj,
4. hogen n'az peus tamm soñj eus al labour,  
ar poanioù hag an daeroù,  
dek gwezh ha tri-ugent seizh gwezh kaletoc'h  
eget da re-te,  
an devez reiñket d'ar greun evit mervel e douar,  
diwaniñ, harziñ d'ar preñved ha d'an evned, sevel o gar a-dreiste hag azviñ o fenn.  
Kement-se Am eus er graet evidout.

Berr eo ar Veilhadenn 6 evel ar re 11 ha 19 ; lâret a ra Jezuz d'an test : « **Kreniñ a rez... disliv eo da fas** », a pa vez bec'h bras warnañ dija get ar from  
ha digousk diwar ar gweleadennoù dreist-naturel-hont gouzañvet gantañ pep eil noz. Ouzhpenn tra, e vez-eñ o labourat war an devezh da  
gempenadur e di lec'h m'ema deuet d'anneziñ nevez zo goude en devout dilojet eus Bourges an 3 a viz genver 1974. Neoazh en e spered prederiet  
ema kentoc'h an amprouadur startañ. Ar breur Mikael da zont zo krog da raksantiñ ar reveulzi a fourgaso e vuhez relijiel ha kevredigezhel. Raksantiñ  
a ra ar pezh a vo anvet gantañ « e varv sokial ».

## Kement tra zo da vezout graet gant muzul, ar pignerezh speredel zoken

- 7/1.** Bleiniñ a ri Ma Fobl  
dre greiz an Uhelioù Am eus miret dezhe, dre o gwenodennoù  
*digor c'hoazh*,  
ha neket dre grapadennoù brevus,  
dre an hentoù a-zianoù naket,  
bevennet hed-a-hed get tavarnioù.
2. Kemer penn ar gwenodennoù kreiz ; pignat a raont,  
hogen *gouzañvadus* e vez o dinaou  
a dremen dre vammennoù ha bodadoù *gwez-frouezh* ;  
gallet a ra ar vugalez kerzhet warne ;  
gallet a ra ar gwragez heuliañ o friedoù warne,  
gourvez oute d'an ehan  
evit tommiñ o c'horf, o leuniañ gant joa  
evit ankouaat a-gevret betek ar beure  
skuizhder ar pignerezh.
3. N'atiz ket re-holl,  
lakaat a ri da goll kalon,  
na klask kendrec'hiñ betek re,  
lakaat a ri d'arvariñ.

## Distro ar speredelezh dre ar garantez hag ar frankiz

4. N'az Tavean ket da dorriñ bodadoù al lid, met o *naetaat*

diouzh ar briñsed,  
diouzh o beleion hag o doktored,  
n'Am eus ket diazeet warne,  
o golc'hiñ diouzh ar c'helennoù gaou  
ha diouzh ar galloudoù touellus  
n' Am eus fiziet e dorn ebet,  
rak Ma C'homz hepken a salv,  
Mam Brec'h hepken a ro nerzh,  
Ma Fardon hepken a *absolv*.

### **Karantez ha youl ar mad, dorioù-porzha ar silvidigezh**

5. Chom a ri ar pezh ma out  
nemet ar priñs,  
nemet ar prezegour,  
met an douger eus Ma C'homz,  
ar gward eus Ma *C'helennadurioù*, ne ren na ne varn anezhañ,  
met an hini a zegas da soñj gant karantez Ma Mennentez a salv ha dismantrerezh-holl  
an eneoù ezou disuj.

### **Ar muzul e kement degouezh hag ober**

6. E kement degouezh e chomi gant ar muzul, rak n'az peus ket galloud,  
na mui egedout un den all,  
da vont en tu-hont eus Ma Chomz,  
na bezout par d'Am Nerzh.  
7. Kemer penn ar gwenodoù kreiz  
hag e vleini Ma Fobl  
war ar Menez Santel.

Liez e vez graet **Beilhadenn ar muzul** eus ar Veilhadenn 7 en arbenn ag he doare pleustrek ha fur. Ret eo lenn en e bezh an Diskuliadur-mañ er  
spered habask ha gwirion a zo e-leizh anezhañ amañ gant ar C'hrouour.  
En ur vezout dreistpar ha dreistbedel, ema ar **Gomz** tost tre ouzh an dud ; komz a ra eus **gwenodennoù**, **hentoù** ha **tavarnoù**, gwerjeoù, **bugalez**,  
eurusted ar **maouezed** hag o **friedoù**. Santelaat a ra an holl draoù-hont hag e komz war un dro eus gwanded mab-den a vez liez en **arvar** ha eñ **koll**  
**kalon** ken aes ha tra.

### **Ne sav ar C'hrouour tamm relijion ebet**

**8/**1. Ne laki da zaouarn war zen ebet d'e gadoriañ *war da lerc'h*,  
ne savi rummad-priñs ebet war Ma Bodadegoù,  
rak ganit end-eeun,  
met muioc'h c'hoazh ez koude,  
e vint mestr warne o-unan.  
2. Ne ziazezi ket beleion,  
rak hini ebet Panevedon na ro nerzh ha pardon.  
Hini ebet Panevedon na ro Ma C'horf ha Ma Goad.  
Hini ken *na ray en e-unan* Koun eus Ma Aberzh.  
3. Ar veleion hag ar briñsed, evel tirvi o deus c'hwezhet  
o c'hasoni ouzh Ma Fas,  
o deus Ma brochet ouzh ar c'hoad.  
Dre gement-se o deus kaset da get o gouenn  
dre an droug a *ziver* anezhi a-hed ar c'hantvedoù-holl.  
Penaos Am bije diazezet

beleion war Ma C'hounadur ?

4. *A-hent-all*, holl an denion a vez pec'herion ha razh : pehini anezho a vez dellezekoc'h dezhañ bezout beleg ?

### **Ar mad a rez eo da saly, ned eo ket ar groaz**

Ma c'horf treuzet-didreuzet, ar gwad skuilhet diwar Ma Goulioù, o Roan da selloù ha daouarn an holl benederion *keit ma pec'ho an holl enep Din*,

5. evel ma tiskoer o zorfed da *lazherion o zad*,  
evel ma lakaer dre griz en o genoù kig ha gwad o zad  
gourvezet dindan taolioù e vibion, evit *bevaat* keuz enne, evit tenniñ anezhe daeroù ha garmoù a vorc'hed.

### **Aberzh ar c'horf hag ar gwad nad eo ket un oferenn**

6. A-gement a bec'h enep Din, hogen krog gant ar pened, *an c'holl c'hoazh moarvat*,

ema gourc'hemennet dezhañ ober Koun eus Ma Aberzh,  
touchiñ ha debriñ Ma C'horf ha Ma Gwad

7. e glac'har ar morc'hed,  
er goanag eus Ma Zrugarez  
ha pare Ma Goulioù

*-Ra steuzio ar pec'hed evit na chom mui anad eus Ma Goulioù! -*

8. evit a-Zehoù ar C'halloudegezh  
e Teuin en-dro war goabrennoù an Neñv e kreiz Ma re.

### **Kevatalded an holl dud er goanag hag esperañs**

9. Diazeziñ a ri war ar bodadegoù  
e *kevatalder-holl*

tro pep unan  
d'ober Koun eus Ma Aberzh.

N' Am eus ket lezet reolenn all ebet da Ma Zestoù.

Evit ar re prederiet gant reolennoù buhezegezh ema Diskuliadur Ares « un dismeg ouzh penngelennadurioù an ilizioù », ar Veilhadenn 8 peurgetket. Ankouaat a raont avat e vez ar Bibl start ha rust a-viskoazh e keñver ar relijion har ar gloareion, an dud a iliz. A-hent-all, ne ra ar Veilhadenn 8 nemet degas soñj ned eus gant ar skeudenn-lavar eus ar C'horf hag ar Goad (Mazhev 25/26-27) tamm ebet ag ar ster roet dezhi gant kelennadurioù zo.

### **Eus he redioù he deus tennet ar vaouez spiswel ha nerzh**

**9/1.** Ar maouezi na rint ket Koun eus Ma Aberzh, dre n'o devez ket Ma c'hondaonet. Pezh pened a zougjent ag un torfed *nad eo ket o hini* ? Ha kalz anezho zoken o devez gouelet Din.

2. Daoust ha n'eo ket unan anezhe  
a roas digostez he c'horf, hag o dilezas d'an Tad  
o leunias eus e C'halloudegezh  
a-benn ma *kellid* enne ar mab e den ?

3. Pa voe Ma Zestoù adkouezhet er pec'hed, ha ne voe ket ar maouezi  
en o-unan-kaer o harziñ d'an temptour,  
o roiñ testoni eus Ma Dasorc'hidigezh ?

4. Evel ma voe *mestroniet* ar mab gant ar veleion hag o friñsed, a reas anezhoñ e-giz ur sklav,

ar vaouez ha n'en em laosk ket anezhi mestroniet gant ar pried ?

### **Dreistelezh ar vaouez p'en em sav en tu-hont eus he doareoù skañv**

5. Sav e pep lec'h

ar maouezi en o dellez a vertuzioù !

6. Hogen berz int ouzh an avoultriezh hag ar c'hadaliez disakr,  
lec'h ma kollont o Buhez, rak Maria he deus graet eus he c'hof un templ sakr  
da virviken !

Ra chomo ar joaioù Am eus miret d'ar priedoù kuzhet  
etreze,

ra chomo o youc'hoù a eürusted hep treuziñ ar mogerioù !

Anvet liez **Beilhadenn ar vaouez** (gwelet ch. XXVII) ar Veilhadenn 9 a adkas soñj d'ar bed, mestret hennañ kentañ gant tu gour mab-den pa vez izel lec'h eben, nend ay biken da goll an droug hep na gemero perzh ar vaouez ha na reno en un doare pennañ. Honnañ a vez pec'hourez ivez avat, met dre m'ema dindan gazel-ge ha yeverezh **Adam** (2/3) ned eo ket ker kiriek anezhi en strewadur eus an **droug**. Dre-se he anien n'he devez ket kollet kement eus he spiswel orin.

### **Ned eus ket eus an holl-Vad hep frankiz-holl**

**10/1.** Piv en deus lavaret Am eus komzet ag un aoter ?

2. Aoter Adam, ar roc'h lugernus ma save anezhi  
an ezañs Tremazon,

e veulgan ambrouget gant *kloc'higoù* an aelez, zo bet douaret gantañ  
goude ar pec'hed ;

ne vo ag un adsav dezhi ken nemet gant e eskern hag eskern e ziskennidi.

3. Na sav ket un aoter,  
met an daol eus ar C'hounadur !

### **Pemp skiant ar c'horf hag an naon zo ken dellezus a zoujañs hag ar feiz**

4. Goulenn a ray lakaat warni bara, gwin hag eoul fonnus a-walc'h  
evit ma aozo gante ar *penedour* anvet d'e dro

ober Koun eus Ma Aberzh,

peadra da zebriñ evit an holl re eus ar vodadeg, denion, maouezed, bugalez.

### **Ar vuhez speredel memes he deus ezhomm ag arouezioù anat**

5. Eus eoul *evel ur balzam* war Ma Goulioù, ar pec'hour a olevo Ma C'horf, a c'hlebo Ma Gwad,  
kent o dougiñ d'e ziweuz ;  
kement hini a ray ur seurt.

6. A-us da zaol ar C'hounadur e ri lakaat an tabernakl ;

serret e vo e ouel c'hwezh deiz a-ziwar seizh,

tra ma raor Koun eus Ma Aberzh,

tra ma tougor pened,

7. met pep seizhvet deiz,

abalamour n'o devez ket Ma Fobl nerzh a-walc'h evit lakaat deizioù a vorzhed ouzhpenn  
d'an deizioù a vorzhed,

lakaat a ri da lemel *pourvezioù* ar C'hounadur,

na vo miret brienenn ebet, banne ebet anezho,

hag e laki da zigor gouel Ma Zabernakl

eus a sav da guzh an heol evit ma vo frealzet ar bec'herion

dre ar gwel eus Ma Zrec'h.

8. An deiz-hont e lido ar vodadeg Ma Zrec'h meur,  
Ma Oberoù *moliezhus*,  
gant meulganoù ha youc'hoù a levenez,  
e embanno Ma Dasorc'hidigezh  
ha Badeziant ar bec'hourion Em Dour Santel.  
Ar pezh a vo goulennet diwar feiz an deiz-se  
a vo roet deoc'h Em Anv  
gant an Tad ; e barr o levenez e vo an holl.

### **Doueoniezh ebet ! Komz Doue ha diouganourion zo trawalc'h**

9. Goulenn a ri lakaat bemdez levroù Ma Chomz e-barzh lec'h ar vodadeg,  
a-benn ma vo tu da nep pec'hour o tont tre eno gant keuz ha morc'hed  
O lenn evitañ e-unan pe  
O embann a vouezh uhel.  
10. Diardoù e vo o yezh ;  
glan a-gement ger-spisaat e vo o marzoù,  
Ma C'homz evel un ebeul mibin  
o redeg rez a-benn d'e bal,  
frank ha digabestr a-ziouzh an harnez a *laka* dezhañ an doktored,  
ar c'hleuzioù a sav dirakañ priñsed al lid,  
an holl re a denn gounid ouzh e zoñvaat  
ha ouzh e sterniñ d'o c'harr.

### **Penngelennadurioù dogmatek hag ideologiezh ne renkont netra**

11. E-barzh lec'h ar vodadeg  
hini ne vo gwezh ebet ouzh en em ginnig dirak ar bec'hourion evit ouzhpenniñ  
e gomz d'Am C'homz,  
evit degas ur gelennadurezh *savet dezhañ*, e brezeg war ar Pezh Am eus  
embannet ;  
12. Ma Furnez zo a-walc'h Dezhi He-unan ;  
Ma C'hwezh a nevesa skiant ar speredoù.  
13. Evit chom hep bezout ken eus ar bed dirak Ma Aberzh kerkoulz evel dirak Ma  
C'homz, pep pec'hour d'e dro seveniñ Koun eus an Eil pe  
Eben  
en em adunvano er peoc'h gant *kement* breur pe c'hoar,  
a wisko ur sae c'hlan, a-stumm hag a-liv diforc'h mat diouzh  
gwiskamantoù ar bed.

### **Diskouez e feiz evel ar C'hrouour en em ziskouez**

Ouzh ma lako e bardon  
hag e sae  
da vinc'hoarziñ ar bed pe d'e gonnariñ  
ez eo e ouezo m'ema diforc'het diouzh ar bed  
hervez Ma Mennentez.

Gwezhave e rer **Beilhadenn ar Frankiz-holl** eus ar Veilhadenn<sup>10</sup>, dre ma tegas soñj da vab-den e tle bezout **dieub** rez diouzh rakvarnioù a-gement  
zo holl, rak an disterañ rakvarn a vir ouzh an **holl-garantez**, ha **frank** holl-razh eo kement den d'anavout **Komz** an **Tad** hep ne vije ur relijion pe ur  
politik bennak o herzel outañ gant forzh dogmoù ha lezennoù (10/10).

Mar be roet ar frankiz meur-hont d'an den neuze e teu anat dezhañ ema ker gwir all evit ar frankiz war ar bemdez : emzalc'h kevredigezhel,  
buhezegezhel, sevenadurel hag all, a vez roet honnañ dezhañ ivez adal ma tiver, evel **Komz** ar C'hrouour. ar **mad** diwarni (12/3, XXXiii/11,  
XXXViii/3). Kreñv bras e vo efed dieubidigezh ar werzenn 10/10 war an emzalc'h sokial abred pe ziwezhat.

## **Kar-nes ar C'hrouour ouzh e Grouadur**

**11/**<sub>1</sub>. Dre ma On en em droet da Skeudenn evit Ma Zestoù, pere o devez klevet  
Ma Anal,  
klevet Ma Mouezh, gwelet liv Ma Selloù  
ne dorri ket Ma Skeudennoù  
a ri eiltresiñ feal pizh-ha-pizh.

## **Maria, skeudenn an deneridigezh hollvedel**

2. Ober a ri heñvel ouzh Maria,  
Ma douget he deus, lakaet er bed, maget eus he laezh, *gwisket*,  
bet eo par anezhi d'emrousted an aelez a vez ouzh Ma servij.  
Hogen skeudenn ur bugel da vab-den hepmuiken  
e gwelentez dreist e silvidigezh a spir a-walc'h da selloù ar bec'herion.  
3. Torriñ a ri sakradur kement skeudenn arall eus mab-den.

## **Vended c'houllo lakaat da sent ha fougaserezh gloriüs all**

Piv a c'hall gouzout piv zo salvet,  
piv ned eo ket salvet ?

## **Tad an Hollved (ar gwir Hon Tad)**

**12/**<sub>1</sub>. Selaou, den Mikael !  
Gourc'hemenn a ri al lid  
ouzh ar muzul Am eus kemennet dit.  
2. N'amproui ket Ma Fobl gant bec'h ur pened, ur bedenn,  
ur c'han en tu all eus o nerzh,  
pe hag o *zaol* en hirvoud,  
rak Me hepken, na te na den ebet,  
a c'hall o amprouiñ.  
3. Peger gwan eo da benn, hag horellus da nerzh-kalon, hep arsav e freskay  
Ma C'hwezh d'az soñjoù ha d'az kalon,  
evit ma weli spis ar pezh zo mat  
ouzh ar pezh zo drouk d'Am Daoulagad,  
ar pezh zo re nebeut pe a re,  
ar pezh zo kaer  
ouzh ar pezh nand eo ket,  
rak kaerder eo matezh ar Mad.  
4. Selaou, den Mikael ! Setu pedenn ar bec'herion evel m'Am boa  
he roet d'Am Zestoù daoust n'o doa ket gallet neoazh he roiñ d'ar bed :

TAD AN HOLLVED ,  
NED EUS NAMEDOUT A ZO SANT.  
RA RENO WARNOMP DA SANTELEZH  
EVIT MA RAIMP DA VENNENTEZ,  
EVIT M'HOR BO HOR MAGADUR,  
EVIT MA C'HALLIMP PARDONIÑ  
HA BEZOUT PARDONET,

EVIT MA HARZIMP D'AN DEMPTASION  
HA BEZOUT DISKARET AN DROUKSPERED,  
EVIT MA RENO WARNOMP DA VIRVIKEN  
DA SANTELEZH, DA C'HALLOUDEGEZH HA DA SKLÊRIJENN.

5. Ter gwezh d'an deiz,  
ur wezh da noz,  
rak d'ar pec'hour a vez dleet a-walc'h d'e silvidigezh herrad ur bedenn  
en deñvalded lec'h ma red an erevent diaoulek kement hag ar bleizi,  
pediñ a ri ar pec'hour e-giz ma C'hourc'hemennan.

### **An amzer : ar voger savet gant mab-den dirak ar Sklêrijenn**

6. Selaou, den Mikael ! Er-maez eus an amzer Emaon,  
met te en amzer emaut,  
gouzout a rez pet heol zo savet abaoe Ma C'homz ha Ma  
Oberoù,  
ha pet den, *tost hini ebet*,  
en devez O c'hredet a-walc'h da veviñ Herveze  
hep troiñ e gammedoù diwar Ma Re ;  
aes-kaer e vije d'ur bugelig o c'hontiñ.  
7. An engroeziad evit piv e voe paet dle ar Goad, priz paet gant an Tad  
dre ar mab  
d'ar re na c'hallent ket ober gant eeunded  
eus an Donezonoù Doueel *a voe roet dezho*,  
*e-keñver* O divuzul an Tad karantezus *a re* a oa dleour d'*E*  
*grouadurioù*,

### **Ar remziadoù, un disoc'h all c'hoazh eus an amzer**

8. Bostad an engroez n'he devez engehentet nemet rummadoù dizanaoudek,  
gwashoc'h an eil evit egile en disantelezh  
hag e pilpouserezh ar fals doujañs-Doue,  
ar galeted a galon hag ar skloufoni,  
o darempredoù avoultriezh, disakr rak un taol koll-mezh eo da glask  
gadaliezh hakr ouzh o Doue E-unan,  
9. Bostad an engroez n'he deus ket engehentet ur pec'hour penedus zoken,  
nemet ha diskaret e ve eñ dre heg er vezh Ganin  
evit ma anavo  
en ur blegiñ dindan Ma Glin  
an euzh ag e walloù,  
an dienez vras ag ar pirc'hirin a zistan d'an Tad.  
10. Ha zoken, tremenet an dienez,  
kalz o devez adsavet fier o fenn lorc'h enne  
hag int hegus d'Am daeiñ gant diskred. Gwa d'ar re a dempt o Doue !

### **Ne dalv ket ar boan pediñ ar re varv**

11. Pezh krouadur,  
gourvezet e eskern e poull ar foz  
e holl sper er goanag eus Ma Zrugarez,  
a vije pedet ?



## Mammog saotret ar feiz en em c'holc'h hag en em nevesa

12. Namet Maria, brazez war ar mab,  
ar bec'hourez a ziskredas gant dae Ouzhin ivez,  
hogen kemer a raas warni he-unan da c'houzañv ar poanioù  
evit *skrabat* ar c'housiadur diwar he c'hig,  
evit tenniñ an douetañs diwar he c'halon,  
da vezout ganet glan a-nevez,  
hi a-gement a oa gwanoc'h eget nep piv bennak.

13. Nameti-hi, a zo en em renket e-mesk ar speredoù en o sav dirak Ma Zron,  
e-mesk ar *gouleier aour*,  
krouadur ebet na vo pedet.

Daou « Hon Tad » zo deuet betek ennomp : Mazhev 6/9 ha Lukaz 11/2-4, dishañval a-walc'h anezhe avat evit testeniekat nend eo ket ker gwir ken ar Skritur-Sakr dre forzh bezout bet distreset ha roiñ abeg reizh d'ar goulenn erbedet d'he glanaat (16/12, 34/12).  
Amañ koulskoude, n'eus ket ezhomm glanaat. **Tad an Hollved** a gemer e-unan lec'h an « Hon Tad » eus an ilizioù. Ewezhiomp ez eo **Tad an Hollved** an destenn nemeti graet **pedenn** anezhi gant Diskleriadur Ares. Evit ar pezh a denn d'an **deoliezh** pe zoujañs-Doue a-vras, an **test** zo bet fiziet ennañ **kemenn** brastres o stummoù pleustrek (**lid**, 12/1). En he frankiz ema an **deoliezh**-hont ha ned eo ken anezhi nemet ar skoazell-eñvor war ar bemdez, a denn pep unan eus ar **Gomz** evel eus ur puñs, ag ar pezh en devez da **seveniñ** (35/5-6) evit krouiñ e **ene** dre **droiñ e vuhez** d'ar **mad** en ur labourat da **cheñch** ar bed.

## Nagennerion ha c'hoarzherion a vez maget ivez gant ar Gomz...

### 13/1. Sell, den Mikael

an evned a vez o troiñ ha gwikal didalvout, bezout ma tebront  
diwar Ma Dorn.

2. Engroez an dud a ray heñvel tro-distro dit,  
bezout m'en em vagint eus da gomzoù *neoazh*  
hep gouzout dezhe.

### ...hogen hini ebet ne vez salvet daoust dezhañ gant ar Gomz

3. Hogen ar magadur-hont n'o salvo ket daoust dezhe,  
rak gallout a ra an evn lonkiñ ar c'hreunenn  
ha, klañv pe lontek  
he distaol hep tamm splet.

4. E giz-se en em gollo engroeziad ar re nand int ket pederion anezhe,  
a gav gante a gantved da gantved bezout pelloc'h diouzh an tremenvan eget m'emaint,  
en un deurel termen d'an deiz war-lerc'h bepred  
a-benn dioueriñ fougeoù goullo ar vended,  
hag a-boan ma spiro pedennoù ar benederion da glouaraat o eskern en  
islonkoù sklaset.

5. Ker bras ma vo da dristez d'o c'holl  
ne c'hallo ket bezout kevatal gant ma hini  
diouzh koll Ma Bugalez.

### Ned eo ket gant pleustrerezh devot e vo salvet ar bed...

6. Ne vi ket lorc'hus a-walc'h evit krediñ bezout an Hadenn  
ouzh da lakaat kiriek eus o c'holl ;  
ne wanay ket da galon gant keuzeudigezh fougeüs, rak dre goll  
evel-se da beoc'h ha da nerzh-kalon, gwall bec'hiñ a ri ouzh Ma Daoulagad.

7. Sed-te e lez ar Park m'Am eus da gaset.

### ...met gant eosterezh denion vat diniver

An eost ez ez da feskenniñ  
zo dezhañ tañvouezad niverusoc'h eget grouan ar moreier, rak rummadoù  
ar rummadoù da zont int ;  
ken uhel ha kreñvoù-lec'h eo  
ar feskennoù ez ez da lakaat war o hed Diragon.

8. Na leñv ket : « Pezh den gwan a c'hall diskar paneve ur c'hreñv-lec'h hepmuiken ? »  
Mar ne gollez na da beoc'h na da nerzh-kalon en aner gant prederioù ven,  
ne vo ket klasket penn ganit eus an tañvouezennoù chomet en o sav daoust dit,  
met eus da goll-kalon a zo disantelezh.

### Diesat un abostoliezh met gant C'hwezh e-leizh enni avat

9. Ma C'hwezh a dremeno ez raok  
ha michererion an eost  
evit plegiñ ar garennoù, o c'hinnig d'ho filc'hier ;  
sonno o fennoù kent bezout medet,  
a-gement ne viot ket lakaet da giriek.

Trebouletoc'h c'hoazh e tisoc'h an test diouzh ar Veilhadenn 13. **Beilhadenn an Tremen Meur** e ray anezhi a-daolou. Evit ar wezh kentañ en ur mod ker spis e teu splann dezhañ e c'hallfe bezout hir a-walc'h ar c'hemennad-hont resevet gantañ, a donkadur hollvedel, o skoñ a-benn d'ur mision profedel **divuzul**, d'e soñj-eñ atav (14/4, 33/6). Bras divent e hañval bezout ar mision-hont, ar gefridi da **feskenniñ** (lakaat e **feskenn** = bodiñ gant hevelep liamm speredel) un denelezh deuet da vezout **kreñv-lec'h** reiziad **Adam**, hini an **droug** hag ar poell-spered poellataer a-re. Ober an **eost** eus an danvez-**penderion** a fonn ker stank ha **grouan ar moreier**, ez eo kouvian ar bed-mañ a gav gantañ bezout arnevez ha razh, daoust dezhañ bezout kozh a-fet skiant buhezegezh, da gemer a-zevri penn an hent d'an tremen evit ur **bed** nevez (28/7). Kavout a rae gantañ an test gouzout petra a oa « follezh ar feiz », hogen amañ avat d'un tremen-dreist groñs eo a c'hourc'hemenn ar C'hrouour mont krenn-ha-krenn ganti.

### Reishaat a ray ar relijion hag he merc'h ar politik

**14/1.** An Haderezh zo bet graet,  
gwennaet an tañvouezad,  
daoust d'ar fall-louzoù hadet gant an doktored,  
*gwasterezh* o friñsed,  
o deus *ervet* Ma Fark gant *girzhier* spern  
ha ruilhadoù mein difrouezh.

2. An tañvouezennoù ponnerañ a vo ar re ziaesañ da feskenniñ : re gresket e Roma hag e Atena.

Ur voger spern dreinek o dalc'h pell diouzh da falc'h ;  
ul lorc'h brasoni *gwashoc'h eget biskoazh* a sav sonn o garennoù evel goafoù.

3. Ra chomo hep gwanaat da nerzh-kalon diraze,  
rak Ma Zrevad kaerañ int.

Rankout a ri loskiñ an drein hep loskiñ ar pennoù evit *tizhout Gantañ* ha, evit plegiñ ar garennoù, gloaziñ da zaouarn ouzh o barv reut ;  
(rankout a ri) klemm dindan sammad o feskennoù.

### Dont a ra an test da vout brec'h ha komz ar C'hrouour

4. Pere eus da zellidoù a vije bras a-walc'h  
da roiñ nemet un dapenn c'hwez hepmuiken d'ur pezh-labour ken divuzul evit mab-den ?

5. Ma Brec'h a vo da vrec'h,

Ma C'homz da gomz.

### **Pennoù bras ar galloud nand int ket ker kreñv ha ma seblantont bezout**

**15/**<sub>1</sub>. Da lakaet Am eus da dremen dre balezioù priñsed al lid, o zron,  
o *leziou*, o nevedoù ha santual, evit ma anavi  
holl o zroioù-gwidre,  
o filpouserezh,  
o ard da gomz,  
o ard brasoc'h c'hoazh da devel ;  
2. anavout a rez o gaouier,  
binimoù soutil o zavadennoù.  
Kemer truez oute ! Strinkiñ a raont binim evel naeron enket ;  
o doare war dav a dest o aon .  
3. Kavet *lec'h achap* gante, e tec'hont en ur c'hwibanat. Ken aner e vez dezhe  
o c'hwibadennoù evel o zavadennoù. Mar fello dezhe da zantiñ avat,  
n'Aotrein ket ma tantint Ma C'hannad heñvel ouzh o freizhoù  
evit o morziñ  
kent o flaouiañ ;  
4. Ma c'hwezh az savo adreiste  
ker skañv hag an avel o sevel divaskell un c'hwibon dreist  
al loened gouez.

### **Treuzvarc'had ebet gant reizhiad ar galloud**

5. Mar be, gant aon a sevel *bec'h Em arbenn*, re ag ar briñsed  
o asantiñ selaou ouzhout,  
kae d'o galv davete,  
er peoc'h ro Ma C'hemenn dezhe,  
respont d'o goulennoù.  
6. Nac'h oute neoazh breutaerezh ha treuzemglev ;  
na rannet na tavet ne vez Ma C'homz ;  
penaos Am bije da varc'hata gant galloudoù touellus ?  
7. Ra asanto priñsed didro en em roiñ da Ma C'homz,  
ra restaolint war an tach o c'hurunenn,  
o bazz-c'hourc'hemenn.  
Ra ziskennint diwar o zron,  
ra wiskint o botoù, reutaint o daouarzorn gant kelc'hioù lêr,  
hag az heuilhint d'an Eost !

### **Bezout na penn-bras, na barner, met gwirion, madelezhus, labourer**

**16/**<sub>1</sub>. Selaou, den Mikael !  
Ne vi e penn den ebet ;  
Ar c'hentañ out hepken, evel an henañ zo kentañ ganet diouzh  
e vreuder ha c'hoarezed,  
kentañ da vout resevet Kelennadurezh an Tad.  
2. Dont a raor evit selaou Ma C'homz  
az kalvor da gaout alioù diganit,  
ned eo ket da gaout urzhioù diganit.  
3. Kalz az karo ; darn arall n'az karint ket ;

kement-se na vo ket *lakaet* da bec'hed warne  
mar sentont ouzh Ma C'homz.

4. Bodadeg erbet na c'houlenno da baeroniezh ; ne vo nemet  
bodadegoù Doue.

5. Beviñ a ri hep brasoni nag ardoù pompadus  
e-kichen da bried ha da ziskennidi  
e-giz m'az pezh bevet betek-henn.

6. Ne ri ket krog d'ar guriusted.

7. Ne vennigi den na tra ebet ;  
gant Ma Brec'h hepken e vez benniget.

8. Lakaat a ri da zaouarn war ar re glañv,  
gant preder e ri war o zro hervez doareioù da arz,  
diouzh da arz e tifenni ar re c'hlaç'haret enep d'an droug ha d'ar re fall,  
enep d'an hudouriezh ha d'an divinerion,  
rak al labour zo mat d'al labourer ha diwarnañ e resev e c'hopr.

### **Izelegezh ha eeunded, gwir vammennoù a sklêrijenn**

9. D' ar bedenn e vi ar c'hentañ o vont ; d'az alioù ha reizhoù e vi  
ar c'hentañ o sujiñ dezhe ;  
evel-se e stummi skouer eus sujidigezh-holl da Zoue.

10. Ne gomzi ket eus da vuhez tremenet,  
ned eus peadra ebet aze da vagiñ fougennout,  
hogen hiziv e wiskez ur vantell nevez,  
hini ar servijour eus an amzer o tont.

11. Heuliañ a ri ned eo ket hepken Ma C'helennadur  
roet a vouezh-den da Ma Zestoù,  
met ivez an Hini roet a Vouezh an Neñv  
da Voizez, d'an holl ziouganourion,  
rak ar Pezh a Roan dit bremañ ne deñvela ket, met sklaeraat a ra holl-razh  
Ma C'helennadurezh  
a-zrebi Adam betek an deiz-mañ.

### **Dieubiñ ar Skriturioù-Sakr diouzh an arroudadoù gaou ha didalvez**

12. Ne zegemeri ket da Gomz Din  
komz mab-den,  
hini Paol pe Yann, Pêr ha re arall,  
ha hini o diskennidi, o devez goveliet dezhe kurunennoù hag int  
d'en em gabelliñ anezhe da c'houde.

13. D'o heul na gleuz ket puñsoù sec'h,  
na glask ket dour lec'h na c'hall ket mammenniñ.  
Na soñj ket muioc'h naket o devez an denion-hont en em gollet. N'azez ket  
ouzh Ma Lez-varn goude bezout diskennet diouzh Ma Zron !

### **Na varniñ**

14. Ra vano da ziweuz hep distag barn ebet  
*a-zivout den.*

Na ro da veno diwar-benn e bec'hed nemet d'an hini a c'houlenno a-guzh  
evitañ e-unan,  
met diwall a roiñ da veno a-zivout gwall *piv bennak da nep-mañ-den,*

na d'an tad diwar-benn e vugalez zoken, na d'ar pried a-ziwar e  
bried, na d'an intañvez a-ziwar he gwaz aet d'an anaon.  
Dave pep unan d'Am C'helennadurezh !

### **Ned eus na relijion na azeuladur ebet o reoliañ an Drugarez**

15. Chom hep degas koun war Ma Zrugarez da geñver kement komz bennak  
kuit da galonekaat an tehoù gwan,

### **An hini fall a gas e zroug dezhañ gantañ-eñ er marv**

hogen degas soñj d'an dibenedour e kas da get e ene, ha kantren a ray e  
spes en hirvoud dre an deñvalijenn sklaset, gwalleurusoc'h eget ar preñved dall ha  
noazh *e goueled ar beredegou*,

16. ar spes a zeu da leñviñ war e eskern gwennaet,  
war e gig koazhet,  
na chom dezhañ, e anoazh ar c'heuz hag er yeinder-du hep termen, ken namet  
goanag Ma Deiz,  
ar spes a vez evitañ ur predig-amzer ken hir hag un deiz, an deiz ken hir hag  
ur c'hantved,  
ker kriz eo an anoued rivus en treuz-didreuz,  
braouac'hus an deñvalded lec'h ma kantre.

### **Ar pened eo, ned eo ket Doue, a ro ar sividigezh**

17. *Meur* a bec'hour, dianket gant beleion gamambre o ardoù milis, a ray gant fae  
ouzhout. « Komz a rez evel ur wrac'h kozh, a hucho dit. Doue zo mat. Penaos  
pan'd eo mat, e c'hallje-Eñ ma c'has da spes *truezek* ? »

Respont a ri : « Mat eo Doue e penn ar pened »

18. N'Am bez lezet tamm Kelennadur all ebet gant Ma Zestoù, ha  
ne Laman *na ne Gemman tra ebet* Anezhañ amañ.

**Beilhadenn ar Reizhoù** a rer gwezhave eus ar Veilhaden 16, bezout ma kaver c'hoazh **reizhoù** (gourc'hemenoù ar reizh) e lec'h all. Broudoù int  
traken ha ned eo ket urzhioù. Memes pa vez garv pe e **kounnar** (30/9), Diskleriadur Ares ne zeu ket diwar ur youl aotrounius met diwar ur Vennentez  
krouiñ (7/5) hag eus karantez un **Tad dleour d'e grouadurioù** (12/7) a chom war o frankiz ha **digabestr** (10/10) e-keñver o zonkad. Memes pa ne vez  
ket heuliet ar Gomz gant mab-den, hemañ ne vez ket kollet dre ret. Pell omp amañ diouzh an Doue taer ha kastizer eus ar relijion.

### **An aon rak ar pec'hed a vez gwell eget an aon rak ar marv**

**17/1.** Stlakal a ra da zent, den Mikael.

*Stennet* da nervernoù gant ar spont,  
dre m' Am eus, herrad ur sell, diskouezet dit annez ar  
spesoù.

2. Gwell e vije dezhe bezout bet breinet razh a-bezh en douar evel  
ar gourejen diskaret gant ar bloavezhioù ;  
hogen mab-den n'eo ket ur gourejen.

### **Hep ene e vez ganet mab-den. E vadelezh eo e ene**

Eus al loen Am eus roet dezhañ ar c'hig, ar bouzelloù hag an eskern  
evit chafod

3. d'e gorf gwirion,  
ker skañv hag ur vogedenn c'hlan,  
nad eo ket ganet diwar kof e vamm

met diwar buhez an den ganet kent  
*en em engehent e-unan* en ur vuhez arall *didermen*  
a sav evel ul lestr evit mont er-maez da skoiñ d'an donvor.

4. Disfonto re abred ar chafod  
ha steuzet *aezhenn* al lestr diachu !

Hogen mar chomo ar chafod en e sav hir a-walc'h evit ma tapo an den,  
kalvez war selaou d'ar Mestr,  
ampartiz ha goust, ma *roy* bec'h evit achu e oberenn,  
miret e vo dezhañ e ene da ouel gant ar Roue  
evit ma'z ay davet Lestraz an Neñv,  
en ul lezel e eskern gwennaet en gortoz war glann ar mor.

5. Mar be ar C'halvez disuj d'ar Mestr, diek ha lezirek, *diroll*,  
prederietoc'h gantañ-eñ e-unan eget gant e oberenn,  
devet e vo e ouel gant Tan an Neñv ;  
goueledet e vo e lestr en islonkoù  
*lec'h ma tiroudo* er c'hloaz.

6. Dre un hañvaladenn e Roan dit an dra-se,  
rak ar re vev na vezont ket evit kompren sort traoù,  
hogen ar pezh a vern dreist-holl eo  
ma kavo ar re he danevelli dezhe  
o salvidigezh dindan doujañs  
mar ne ve ket el levenez.

7. Neuze eus kig, spered hag ene ema mab-den ;  
unvanet e vo an tri da Ma Deiz,  
met ken na vo da neuze ar spered a vo liñsel sklas ar re villiget.

Treset eo Jezuz mod-se gant an **test** : « Un den eus ar sav-heol bras kenañ, gant bri ha dinded e-leizh ennañ, hogen pikol chouk ledan ur **c'halvez** zo dezhañ (18/1) e-giz ma voe ivez moarvat ouzh e dad Jozeb (Mazhev 13/55). Dle da Jezuz bezout bet savet ivez diwar bouez e zaouarn **Chafodoù** heñvel ouzh ar re a gomz ar Veilhadenn 17 anezhe. »

Dre fiziañ e Jezuz ar garg da gomz en e **Anv** e Ares e fell d'ar C'hrouour diskouez e c'hall ur c'haezh **kalvez** zoken tizhout d'an uhelañ derez eus ar vuhez speredel hag eus ar **salvidigezh**.

## **mestr ar bed ha Mestr an Neñv en em gloko an eil egile**

**18/1.** *Lezel* a Ran *dit* un hañvaladenn all :

Ur c'halvez war e chafod  
en doa savet ur *c'haer* a lestr  
hervez kelennadur ar mestr.

2. Aet peurvat al lestr,  
darev da rikliñ *war e chanter*;  
deuet anat d'ar c'halvez e oa sec'h al leur tro-dro dezhañ ha-se ker pell  
ma tizhe e selloù.

3. Ha eñ lavaret outañ e-unan : « Me chal penaos e neuñvo ma lestr  
pa vo deuet ar mare da lestriñ *evidon* ? »  
Deuet soñj dezhañ en doa ankouaet kentel *ziwezhañ-holl* ar Mestr (gwirion) ;  
pediñ a raas ar Roue : « Sell, Aotrou, prestr eo ma lestr, dellezek a-walc'h d'en em  
gejiñ gant Da Lestraz,  
neoazh d'e *sevel* kement a evezh am bez lakaet,  
kement a lorc'h am bez tennet anezhañ  
m'am eus ankouaet pan'd on mestr war ar c'hoad  
nend on ket mestr war an Dour ma *c'hhallo chom war neuñv*, hag e tisec'ho ma lestr  
dindan an heol. »

4. Selaou a Reas ar Roue ouzh e uvelded,

e Roas aotre d'e vorc'hed,  
tarzhiñ a Reas koabrou an Neñv hag e Lakaas da bilat ul Liñvad-dour  
a reas ur Mor  
ma neuñvas al lestr warnezhañ  
pa zeuas an deiz da lakaat da ouel,  
e c'hallas ar c'halvez skoiñ da gejout gant Lestraz ar Roue.  
Den n'ankounac'hay an Dour  
paneve-Se ar gwellañ *arc'h* savet  
na grog tamm Buhez enni,  
na dalv ket gwell eget ar chafod  
a roas tro d'he sevel gant pasianted, ha war un dro gantañ e sank don en douar  
lec'h ma vreïn gant he gouel.

**Beilhadennoù an ene** zo eus ar Beilhadennoù 17 ha 18. Diskuliañ a raont ned eus ket ag an **ene** (anvet **ha** el Levr XXXIX/5-11) war un dro gant ar babig nevez ganet, met ganet e vez kalz diwezhatoc'h dre ar **mad** graet gant ar **penedour** : an den **a garantez, pardon, peoc'h, frankiz** ha **meiz** speredel **dezhañ** (gwelet 4/5-8). Kement-mañ, aet da goll er Skriturioù, a verk anien vuhezegel an **ene**, frouezhenn ar goustiañs hag ar **vertuz**. Donedigezh ha bezoud an **ene** eo a ra enta an den speredel. Kement den **mat**, a feiz pe get, a vo e **ene** al **lestr** er c'haso a-us d'**islonkoù (teñvalijenn)** ar **marv**. Gant ar c'hrouadur nevez ganet ned eus ket nemet **kig** ha **spered** dezhañ ; digoustiañs eo ar c'hrouadur ha n'en deus ket ezhomm eus un **ene**.

## Evit paraat a solin e ranker kentañ kariñ an Dour

**19/1.** Hogen gwell eo lezel da vreiniñ an arc'h hag he gouel,  
na chomo netra anezhi,  
eget kas Dour ar Silvidigezh d'ul lestr na vo ket evit flodiñ Warnan  
ha eñ solin en isfontoù,  
2. eget lakaat dre ret war E Aodoù neb n'en deus dibabet war e rezid frank  
lakat da ouel evit mont da gejout gant Lestraz ar Roue.  
Gant na vo ket graet drougimplij eus an Dour !

Ur predig-amzer traken e padas ar Veilhadenn 19. Goude bout lâret div frasenn, evel direnket, setu Jezuz aet diwar well a-daol trumm. Ne bara ket oute bout sklaer o ster avat. Evel nad eus ket bouzaroc'h eget an hini na faot ket dezhañ klevet, ned eus ket gwashoc'h da flodiñ eget al lestr n'en deus ket choaset merdein war Zour ar Vuhez. Ne raer ket salvidigezh an dud daoust dezhe.

## Badeziant : Neket ur sakramant, met un engouestl

**20/1.** Na te na den ebet  
na vez mestur war an Dour,  
Namedon Ma-unan.  
2. Ober a ri ma skignor Ma C'heleennadurezh evel un alezon  
da vagiñ  
ha n'eo ket da hoaliñ,  
a-benn m'er ray an den a c'houlennno Ma Dour drezañ e-unan  
ha na ve dleour anezhañ na d'az madelezh  
na d'az hoalerezh.

## An Dour diazez, ar meurvor a Vad divent

3. Dour ar badez a dresez  
Ma C'hroaz warnañ,  
a skuilhez war ar penn hag ar c'hein,  
na zalh gallout ebet ennañ.  
An dour a vadeze Yann (Vadezour) gantañ eo.  
4. An Dour a rikl an ene evel ur ouel Warnañ

na zeu ket eus an neñv a-us dit,  
met eus an Neñvoù zo Ma Annez.  
Ar Mor a gaver war an Uhelioù  
lec'h ma vleini Ma Fobl,  
ar re a choazo d'az heuliañ  
dre ar gwenod gevr,  
n'eo ket ag un danvez anavet gant mab-den.

5. An Dour a Skuilhan  
dirak ar re Er goulenn Din  
*evit loc'hiñ o listri Warnañ*  
nad eo ket an hini a ev an den en davarn,  
nad eo ket an hini a zoura ar gwez,  
hennezh ne Vennigan ket  
dre ma walc'h ar multrer e gontell ennañ,  
en em walc'h ar c'hast ennañ.  
6. Ober a ri diouzh na dresor ket mui Ma C'hroaz war an dour-hont da  
bleustriñ brizhkredennoù diwarnañ.

### **En em vadeziñ e-unan a goustiañs ez eo ar vadeziant**

7. Evit ober koun eus Ma C'homz roet hiziv,  
neb a c'houlenn ar badez  
en em zalc'ho dirak ul lestrad dour, hag a lavaro :  
« Naren, neket dour Yann (Vadezour), met Da Zour ! »  
8. Da c'houde gwalc'hiñ a ray ar badezour e benn hag e zaouarn  
e-barzh dour al lestr,  
evet a ray anezhañ,  
skuilhiñ a ray ar pezh a chomo war al leur  
evit testiñ ema an dour-se un donezon evit ar sec'hed, evit kibellat, evit douriñ ar parkeier,  
en arbenn a bec'hedoù Adam ha pec'hedoù e lignez.  
9. Diazeziñ a ri al lid-mañ evel al lidoù arall ;  
Diskenn a ray Ma C'hwezh ha sec'hiñ da virviken *liv* da  
c'hourc'hemennoù.

Ar Veilhadenn 20, **Beilhadenn ar Badez**, zo unan ag ar reizhadennoù pennañ-se a zegas Diskleriadur Ares da lezennoù sakramantel kristeniezh an ilizoù. Ned eo ket ar **badez** ur sakramant, na zegas na gras salvus na ne ziverk ar **pec'hed**. Ur doare lidus ha diredi eo ar vadeziant eus ur glouestratur hiniennel da **cheñch e vuhez** (= ren ur vuhez **vat**, 30/11) ha kenober da **cheñch ar bed** er **mad** (28/7), evit gwir an div oberenn namete a ve salvus.

### **A gement a atiz lubanerezh a atiz brizhkredennoù**

**21/1.** Torriñ a ri an holl vrizhkredennoù,  
dreist-holl ar re deuet diwar drougiezh priñsed al lid, diwar o  
doktored ha diwar o beleion  
evit roiñ d'o jestroù ha komzoù  
ur seblant a c'halloud touellus  
a dennont aotrouniezh ha korvo anezhe,  
dre lavaret d'ar bobl :  
2. « Sed-aze hag en deus Doue hor dibabet a-ziouzhoc'h evit roiñ gallout dimp  
d'ho oleviñ er Spered,  
da bardoniñ deoc'h ho pec'hedoù,  
da zerc'hel deoc'h *ar Mann*,  
d'ho tieubiñ diouzh an diaouled,



*a gement* zo drezomp-ni hepken  
d'ho ren d'an Tad, hag e talc'homp eus an Tad ! »

### **Nac'het e vez Doue gant galloudoù an douar en ur vezout drevezet war un dro gante**

3. Pilpoused, jestraouiñ a raont an uvelled,  
nend int ket, eme-int, dellezek d'ar galloud *dileuriet dezhe*,  
padal e tegasont soñj *evel-kent e tle* Ma Fobl  
tremen dre hennzh da gavout Ma Silvidigezh.
4. Gaou ! Te, den Mikael, un euzh e vi Din mar  
distagi an disterañ trugarez damantus  
ouzh ar re a laer Ma Arouezioù hag a douell Ma Fobl.

### **A garantez hag a frankiz e vo ar bodadegoù nevez**

5. Ne Rannan ket Ma C'halloudegezh gant Pêr,  
na gant *hini* a Ma Zestoù, na gant den ebet ;
6. Daveet Am eus Pêr ha Ma Diskiblion da brezeg ar Yuzevion evit o diereiñ  
Em Anv a-ziouzh o leoù e-keñver an templ hag e veleion,  
e-keñver ar sinagogoù,  
hag o ereiñ ouzh Ma Bodadegoù nevez ha ouzh Ma C'homz, evel ar Roue  
a zave E Gannaded da gouviañ E Sujidi d'E Euredoù, en ur ziereiñ anezhe  
a-ziouzh kement redi an deiz-se,  
rak a-ziwar blaen ha barr eo  
e c'hall ur Yuzev respont da bedadenn e Roue.

### **Ne c'houarn ket ar C'hrouour war e grouadur, e gariñ a ra**

7. Hogen ar Roue-*hont* na vez dezhañ maodiern ebet, na ministred, na gouarnourion,  
reniñ a Ra en E-unan penn,  
e sez E Gador-varn ema en E-unan kaer.
8. E Gannaded, nad int ket bet savet memes da vevelion-vras Gantañ, nag ofiserion E Di zoken,  
o c'haret En deus e-giz Kannaded.

### **Gouezder barbar ar bed a beurbado gant ar politik**

- 22/1.** Dre m'o devez uzet en aner o arzelloù war zouaroù gouez,  
pell diouzh Israel,  
Ma C'hannaded na voe ken dezhe namet kerse da c'hopr ;  
na lezjont ken war o lerc'h namet *deñved* a-strew  
enket gant ar bleizi.
2. Meot-tourz a savas eus an deñvalijenn,  
Brochiñ a rejont ar bleizi gant fulor taer,  
ha neuze int da dolpiñ Ma Deñved a-vandennadoù ha d'o ranniñ etreze,  
*neb* d'ar sav-heol, *neb* d'ar c'huzh-heol, *neb* d'ar c'hreiznoz, *neb* d'ar c'hreisteiz.
  3. Skriv an dra-se, den Mikael, rak da remziad a anav ar gwalinier,  
gouezet e vo gantañ taliñ oute,  
hogen ankouaet e vo gant ar remziadoù da zont ar pezh n'eo ket skrivet. Skriv  
evite :
  4. Setu ! An tourzed zo ar briñsed hag o beleion. Darn ag ar briñsed a  
blegas dezhe un niver bras a briñsed arall gant o zropelloù ha razh ; gante-int e

savjont e-leizh a vagadoù diniver ;  
kerzhed a rejont en o fenn da ledanaat hep arsav o aloubadegoù.

5. Evit *kadarnaat* o galloud e lakjont o falserion da zont da noz,  
goverlerion aour doazh da sevel un tron a-gozh,  
e azezjont eskern gwennaet warnañ,  
eskern Pêr,  
eskern Andrev ;  
dizouaret e voe Ma Diskiblion.

6. Gervel a reas priñsed ar bagadoù o fobloù da-dal an tron : « Ha n'  
anavit c'hwi aze kestad, klopenn ha dent ma zad ? Ha nend on me  
e vab, hêr d'e dron ? »

Meur a unan a lavaras : « Ne welomp ken aze nemet eskern gwennaet ! »  
Kentizh ar breizherion, a heulie kement bagad,  
aon gante n'en em rannfe ha eñ koll e nerzh,  
aon gante na gollfent o gounidoù,  
o lakjont d'ar marv en ur grial « Salver d'ar bobl ! »

### **Neb a gar ren na c'hall ober namet neuz a garantez hep muiket**

7. Goueliñ a reas pep priñs : « Ma breuder gaezh, test eo ar vroad ne vennen ket  
ur fin ker kriz deoc'h ; *er raok* d'am zrugarez eo aet veñjañs ar breizherion.  
Ha na vin me ken trugarezus oute ha ouzhoc'h ? »

8. Dindan brec'h astennet ar briñsed e voe absolvet ar breizherion,  
savet da *satrap* evit o gred taer,  
evit roiñ o feulster d'ar briñsed  
ne gouezhas biskoazh warne  
goad an torfedoù graet evit salvder ar bobl, rak bras divent e voe  
ampartiz ren ar briñsed.

### **Galloud a-vremañ pe galloud a-gent an henamzer, un hevelep tra**

9. Hiziv c'hoazh e vez drevezet ar furnez habask gante,  
kaset o daveidi dre hentoù distro d'o daleiñ,  
evit m'en em gavo o fardon gant ar bourev goude dezhañ bezout  
dibennet an hini gwan,  
evit m'en em gavo o *c'harez* da lez an hini kreñv goude dezhañ bezout  
graet e dorfet.

10. Evit o filpouserezh, evit o skloufoni  
ema dellezet d'o spesoù kantreal dre al lec'hioù braouac'husañ.  
Hogen euzhusoc'h o devez graet c'hoazh :

11. Laeret o devez Ma Arouezioù,  
drevezet o devez Ma C'halloudegezh,  
savet o devez ur porched maltouterezh  
war harzoù Ma Rouantelezh,  
kustum ur gwir-treizh,  
evit distroiñ *deog* ar garitez,  
aotreiñ paseporzhioù touellus,  
barniñ Em Anv,  
goloñ Ma Fobl a zeñvalded hag a spont.

### **Ar Reizhded pe Justis n'eo ken nemet ar pezh zo gwir, e-se reizh enta**

12. O euzh argarzhus a denn da Ma Justis,  
met skriv, den Mikael, e vo didronet ar briñsed hepdale ;  
diskuliet eo o zouellerezh gaou end-eeun,  
adkaset e vo o beleion d'ar park ha d'an *eskemmez*,  
gwerzhet e vo gant o doktored o arz da dapeuterezh ar c'hantved.

### Da ziwall zo ouzh distro an Istor kozh

13. Met skriv evit bugalez da vugalez  
e vano ar walenn a-dreñv an dremmwell  
kuzhet gant un oabr glan.  
Evel an c'hoant a sav divronn ur werc'hez yaouank,  
e teuy adarre ar walenn evel un aveleñn skañv da gentañ,  
bourrus d' ar re flouret dezhi.  
Ra ziwallo da ziskennidi ouzh ar gorventenn a zeuio da heul,  
mar en em laoskint da vont gant hoalerezh  
ar mouezhioù flour deuet en-dro eus an dremmwell,  
rak buan e teuint da vout kurun an vac'homerion,  
ha Ma Deiz a denno c'hoazh war-dreñv diraze !

14. Ra zalc'ho da ziskennidi soñj eus Ma C'homz :  
Hep mui priñsed da virviken,  
na beleion, na doktored,  
hag ar Mil, a vo pell amzer war talaroù an ankoù a-dreñv an dremmwell,  
a varvo.

**Beilhadenn ar Varbared** e vez graet a-wezhioù eus ar Veilhadenn 22. Peadra da brederiañ evit ar **vederion** (4/12, /2, h.a.), en em soñjal diwar-benn ar gwall-reuziadoù a c'hall diveriñ da heul ur mision berrboell e-giz an hini zo bet graet gwezhall gant **diskiblion** pe **kannaded** an Aviel a brezegas d'ar baganed ha barbared e lec'h prezeg ouzh **Israel**, ar vroad prientet ervat da **seveniñ** ar **Gomz**. Ur gristeniezh skortig he fonnusted ez eo bet an disorc'h avat. Ar relijion-se pe ar mennozhioù ideolojik diveret anezhi, gant diouer bras a **garantez** liesañ, o devez talvezet da zigarez splotus evit ar varbarelezh ag a-gent kerkoulz evel a-vremañ.

### Dieubiñ ur bed douaret en e soñjoù ha lezennoù

,

**23/1.** Selaou, den Mikael, gwan eo da benn,  
ha koulskoude ned out ket kollidig Ma Mibion pulluc'het gant  
o gwalloù evel gant gouli ar *pian*(= *lovr, brec'h, bosenn...*) ;  
kleuzet eo bet o fenn gant an droug, goloet o daoulagad hag o divskouarn,  
kivijet o c'halon gant ar pec'hed.

2. E-kreiz ar re zister e *tremen* evit gourenerion ar re nad int ket ken dister anezhe ;  
e-kreiz ar re ziskiant ema fur an hini nad eo ket ken diskiant anezhañ;  
Deuio ganto an Hini Kreñv avat, an Hini Sklêrijennet, ha dizolaet e vez o mezh  
gant o gourenerion, o re fur hag int da grial :

« An Erer ra lezo reniñ ar c'hoz e kreiz he re ! Ra zalc'ho  
an Neñv ha lezo dimp an douar ! Na vern dimp E Gri a dreuz  
ar menezioù ? Ne dizh ket deun hor garidennoù ! »

E Gwirionez, den Mikael,  
o gwander eo o laka da nac'hiñ Emglev an Erer.

### Al lorc'h hag a laka da vout bouzar ha dall, gwashañ gwander zo

3. Komz ouzh Ma Fobl hervez o gwanderioù  
n'az peus ket soñj anezhe,  
rak ardoù a vez ganto evit diskouez o devez komprenet,  
evit roiñ o meno dirak ar c'hevren evel dirak babouz ar vugalez ;

o richenn douell a *guñva dienez o estrenvan* ;  
ar re widreüsañ a denn korvo anezhe, dre lavaret : « Ur bobl sklêrijennet oc'h,  
drezomp-ni e tiskuilh Doue E Zivinerezh deoc'h, drezomp-ni Eñ a zigor ho speredoù  
hag ho taoulagad. »

Frealzet, e vez paet gant ar bobl gopr o c'hentelioù.

4. Forbann an doktored

a vez o diouiziegezh un doñjer Din,

a leugn a avel pennoù gwan Ma Fobl !

Roiñ a Ran dit ul lavar

hag a roio meiz-spered dezhe

evel m'Am boa er roet d'an diouganourion ha d'an diskibliion.

### **Dogmoù ar relijion n'int nemet idoloù eus ar spered**

5. Dindan da vouezh e Skuilhin Ma Dour war ar c'halonou sec'hedik, da gomz a lakay  
da strinkiñ ar gwad er pennoù goullo d'o strujusaat. Dic'hwezhiñ a Rin Ma C'hwezh  
war da feizidi ha Ma Bennozh war o diskennidi.

6. Dous e vo da vouezh,

eeun da gomzoù ;

alies ur pok ac'hanout a ray gwell eget ur prezeg.

7. Aozet ez eus bet un doue tri fenn Din gant an doktored

evit souezhiñ ar re wan, o lakaat da grenniñ dindan o orakl ;

divizet o devez eus Ma Zruez hag eus Ma C'hastiz hervez an oberennoù

gant prezennoù n'eus diwezh ebet dezhe,

*divinadellus* ;

eus ur Ger Ac'hanon o devez savet levroù.

8. Ma Fobl ne oar mui men Emaon, men n'Emaon ket.

Diskar idoloù ar spered

evel ma voe diskaret an idoloù koad !

9. Kae ! Da Harp On.

Forzh lies e rer **Beilhadenn ar Gozed hag an Erer** eus ar Veilhadenn 23. Dre an hañvaladenn-hont ar C'hrouour hor c'heleñn a-zivout berrweled ar  
goustiañs, deuet diwar sistem reizhoù an douar a zo mab-den en em zouaret ennañ e-giz ur **c'hoz** abaoe gwall choazoù **Adam** (2/1-5). Troet eo ar  
berrweled-hont, aet hogozik da zallentez, da vezout un eil natur, un anien ken don evit mab-den hag ankouaat e c'hall mont er-maez eus riboul e **dunel**  
mennozhioù ha penneolennoù, e kav gantañ en e boell-spered eñ ned eus tu ebet kavout gwell evite. Ya, gallout a ra koustiañs mab-den emdroiñ  
trema ar **Sklêrijenn** (12/4) lec'h ma plav an **Erer** (ar C'hrouour, ar **Wirionez**, an **Esperañs** eus ur bed cheñchet er **Mad**). Gallout a ra mab-den e-unan  
zoken dont da vout **erer** en-dro = bezout **graet un Doue** (2/13).

### **Adsevel Eden a vo hir, met gallout a ra sevel a-nevez**

**24/1.** Diskuizh a ray da benn war ar maen-bez,

leñviñ a ray da re feal war da zaouarn yenaet

kent n'az po gwelet ar restadig az kasan tolpiñ

seveniñ ar Gomz a Fizian ennout.

2. Embreg hep mall !

Ar breñvedenn ha kejout a ray ouzh ar wenanenn gant hastiñ ?

Dav eo dezhi seveniñ remzi he amzer.

D'az teizioù e lakzen deizioù ouzhpenn ne vident ket trawalc'h ; pevar remziad

tud na vo ket trawalc'h.

3. Neket un den hepken a ziskouez an Hent,

neket un den arall a gav ar Vuhez,

met kalz o vont d'ar bez

an eil war-lerc'h egile

a ziskouezo an Hent,

ur voadad o eskern berniet a savje ur menez  
a gavo ar Vuhez,  
dre na ro mui ar Vuhez an Tad,  
He roet En deus ur wezh,  
an Oaziz.

### **Nag e ve hir da gavout en-dro, adkavet e vo ar Vuhez peurvat**

4. Penaos un den hepken, mil den zoken,  
a gavje en-dro ar Vammenn endonet  
dindan mac'herezh an emgannoù,  
dindan treid karavanoù ar varc'hadourion,  
dindan kroazlez ar gisti,  
dindan avel Kounnar Doue ?  
Rummadoù morc'hedus a gampo war an dezerzh-hont evit tamoueziñ  
e draezh,  
5. e duriañ evel ur min,  
a-benn adkavout ar Vuhez.

Ur meulgan d'ar **basianted** (39/3, XXXiii/3) ha d'an **espeañs** pe **goanag** (16/16) eo ar Veilhadenn 24, anvet gwezhave **Beilhadenn ar Vuhez**. Peder gwezh e teu ar ger **Buhez** en-dro gant erbedoù sonn a-benn chom hep diskrogiñ diouzh ar strivoù evit distro ar **mad** dre bleustr ar **pened** ha gant un **eostad** fonnus a **benederion** pe tud ar **mad**. Gant ar **benederion** e vo eus ar **restadig**-se, penn-blein un obererezh hir ha diaes, a zisoc'ho anezhañ distro an eürusted beurlvat d'an holl, da lâret eo **cheñchamant ar bed** (28/7).

### **Mil sevenadur, hogen un hevelep hag unik bugel d'an Tad**

**25/1.** Petra a zeui-te da vezout ouzh Ma Daoulagad

mar bleinez betek Ma Aodou  
bodadegoù da bobl nemetken ?

2. E pep lec'h e vez karet o bugalez gant o zadoù, karet e vez ivez o fideled  
gant ar veleion.

Pelec'h ema o dellid ?

3. Na lavar ket d'an estrañjourion : « kejit gant Ma Bodadegoù ! Gante-int  
ho karin ; gante-int ho pleiniñ war Aodou ar Vuhez ! »

4. Lavar dezhe : Estrenion, en hou karan e-raok ho anavezout. E-raok na voe  
ho pennoù deuet eus an donderioù *e-resed* an dremmwel, savet am eus an daol  
evit ho prediñ, digoret am eus renkoù ma gouenn evit ma kemerot  
lec'h enni

evit krapañ a-gevred war an Uhelioù,

rak an hanafer hag ar muleter on,

5. hogen a-uc'h din ema an Ostiz hag ar Pastor ; bleiniñ a Ra ar bec'hourion  
a gemer penn ar gwenod gevr,  
o magiñ a Ra war ar roc'helloù meinek,  
gwalc'hiñ a Ra o zreid kignet.

6. « Na zilez pec'hour ebed en e bened ; kreñvaet e vez an holl Gantañ  
en o fignidigezh,

ar re Er ped en ur hejal grizilhonoù ha gouleier,

ar re Er ped seizh gwezh an deiz,

ar re n'Er pedont ket, daoust dezhe en anavout,

ar re a gont pet heol ken na vo E Zeiz

ha re a gont pet loar,

ar re En ezañs hag a gri Tremazañ,

ar re an ezañs hag ar c'hriadenoù o laka diaes,

ar re Er gwel gwenn hag ar re Er gwel du,  
ha nac'herion an holl re-se,  
an engroeziad diniver na vize ket ul *lanvad ankr* d'o anvñ, a anav  
an Tad o anvioù. »

### **Ar gwellañ sikour sokial na dalv ket karantez an Tad**

7. Den Mikael, mar n'o c'harez ket c'hoazh,  
neket dre roiñ an aluzon dezhe pe lienñ o goulioù  
evel ma ra ar briñsed hag o beleion  
en ur chom hep o c'houviañ d'o C'huzulioù  
gant aon rak koll o zronioù,  
met dre o c'haret evel m'o C'haran,  
furnez priñs e vo da garantez,  
neket an Avel foll savet eus Nazared,  
an Trowent a dreuz forzh an douar hed-ha-hed

8. Torr gant an holl Korf Ma Aberzh ; en o renkoù laka  
ar c'halir da redek ;  
kej da bedennoù ouzh o fedennoù, degas da ginnig d'o zemploù,  
ro da verc'hed d'o mibion !  
Gant muzul ha kuñvded  
ez eo bet renket *bannoù*  
kuzul bras Ma Bodadegoù ;  
er C'hortozan war Ma Menez Santel.  
Gwisk da votoù, den Mikael, kemer da vazh,  
Ambroug-eñ da-dal Din, stign da c'houzoug !

**Beilhadenn ar Garantez** e vez graet lies ag ar Veilhadenn 25. Ar C'hrouour a gar an denelezh a-bezh ketibunan, ag an holl ouennoù, sevenadurioù, relijionoù ha pedennoù pe hep relijion na pedenn ebet zoken, na vern. Un den mat na c'hall a-wael namet kariñ ivez kement estren, kement den ha eñ eus ur sevenadur arall. Ned eus ket bet c'hoazh ag ur gristeniezh wirion, en arbenn n'he deus ket gouezet honnen kariñ an holl vugalez eus ar C'hrouour, bostad an engroez diniver a anav an Tad o anvioù, razh anezhe hor breudeur eus an douar.

### **An diaouled Emfouge, Poellelour ha Brizhyoul**

**26/1.** Lavaret am eus : Nemet ar restadig, ar vostad n'az heulio ket.

Da gentañ penn e krio : « An hent gwir eo a ziskouezez ! » Rak  
aes e vez ar morc'hedoù keuzidik kentañ,  
birvidik an darbaroù evit ar veaj hir  
betek Ma Uhelioù.

2. Hogen an temptour en em silo war da lerc'h.

Noz derc'hent an disparti,  
d'an eur ma teu anken er c'halonoù,  
e sko war an norioù, ha eñ dont tre ha lavaret : « Follentez eo heuliañ an den-hont  
evit ur grapadeg *dic'hopr*. »

### **Abegoù poellek a vez atav d'an aon a vont war-raok hag emdroiñ**

3. Banniñ a ra e ampoezon kontammus war Ma Hadegi,  
dre lavaret d'ar re a vez fromet gant ar skiantoù : « lennet eo bet e bouzelloù ar re varv,  
pouezet eo bet ha tamouezet ludu poultrek ar bezioù, ned eus bet kavet kendalc'h ebet  
da varv an den ; berr eo e vuhez ; war an uhelioù-hont evel  
d'an traoñ, lec'h m'emaoc'h, ema e fin e poull ar foz. »

Ar re-se a ya en-dro d'o gwele, en ur grial : « Sed aze ul lavar a skiant-vat ! »

## **Pa ne chom namet tenniñ plijadur ha piaouiñ eus kement tra zo**

4. D'ar re a gar ar plijadurioù ha madoù e lavar dezhe an temptour : « Chomit en draonienn zruz, e aezamant ho tier ! D'ar re n'o deus ket e prestan evit paeiñ ar mañsoner, ar pallenner hag al liorzhour, evit ar sonerion a gaso bourrusted d'o festoù ; astenn a ran en a-raok gwerzh ar marc'h o dougo da di o *c'hoantenn*, da di ar mignon a zalc'h ur banvez. Ker berr e vez o ho joaioù, o eskemmot-c'hwi ouzh poanioù ur bignadeg diboell hag ho taolo buanoc'h c'hoazh, *treut* ha trist, er foz hep distro ? »  
Ar re-se a ya en-dro d'o gwele, en ur grial : « Sed aze ul lavar a furnezh ! »  
5. Evel an hoc'h ne skuizh ket tamm o tebriñ, an temptour ne skuizh ket tamm o lavaret gaouier.

## **Holl ar re a vez galloud gante a embann ne c'haller tremen hepte**

D'ar re c'halloudek ha d'ar re binvidik e lavar : « Dismegañs a reot c'hwi d'ho tadoù, dismantriñ a reot-c'hwi o herezh, donezonoù ar chañs a ra kaezh deoc'h ? Lakaat a reot-c'hwi ar werin gaezh da zioueriñ ar servijoù aozet gant ho skiant-spered, renerezh ho kouarnamant, marc'hadourezh ho *sanailhoù*, an aour prestet ganeoc'h ? Pe splet a denno ho sujidi, ho *arvalion*, ouzh ho kwelet o ranniñ ganto avaloù treñk ar menezioù ? »  
Ar re-se, laouen, a ya en-dro d'o gwele, en ul lavaret : « Pebezh torfed dilez edomp-ni war-nes ober ! »

## **Ar riboderion divergont a gemer digarez war ezhommoù naturel ar c'horf**

6. Ouzh korfoù denion ha maouezi gwisket, arc'henet evit ar bignidigezh, en em sil an temptour a c'hwezh un tan e traoñ o c'hof, a lavar da bleg o skouarn : « Pe amourouz, pe garedig a zistano an tan-se war ar gwenodinier menez ? »  
D'ar vaouez : « Piv az paeo e aour hag e profoù, e bravigoù hag e brageris, evit ar joaioù a roez, pa vi el lein ? »  
D'an den : « Piv a gemero en nec'h lec'h da wreg ha te aet skuizh ganti ? Disec'hiñ a ri evel ur c'hozhiad gant ar strizhentez ! »  
Ar re-se, eil hag eben, a ya en-dro d'o gwelead da bleustriñ an orged, evit ebatoù avoultr.

## **Dirollerezh gwazh-war-wazh zo da zont c'hoazh**

7. Kement-se holl, ha ken-ha-ken c'hoazh, zo bet gant an temptour war seulioù Ma C'hannaded, hogen gwazh e ray c'hoazh war da roud dre ma out Ma C'hannad Kreñv ; c'hoantekoc'h a vadoù, a blijadurioù, a c'halloud e ray eus an denion, gadalezed gwashoc'h eget biskoazh eus ar maouezi.

## **Pe eürusted a nac'h an Tad da zen ar mad ?**

8. Met petra a ginnig an temptour, nad eo ket anezhañ evit krouiñ tra, na levez, na madoù ?

Petra a ginnig-eñ na Roan ket c'hoazh ?

Ha n'Am eus Me savet tiez tomm ? Ha n'Am eus Me plantet gwini hed-ha-hed Ma Gwenodennoù war du an uhelioù ?

Ha n'Am eus Me pedet ar sonerion da gas gouel Ma Zrec'h, da zidueliñ an hini en deus poaniet hed an deiz ?

9. Ha n'Am eus Me roet Ma Mulezed evit ar bignidigezh, ha magadur da bep unan ?

Ha n'Am eus Me lakaet ar re greñv hag ar re fur e servij ar re wan hag ar re vihan ?

Ha n'Am eus Me kaeraet a gened ar maouezed ; ha n'Am eus Me leuniet o friedoù a *nerzh gourel* ; an Tad ha na Ro E vennoc'h d'o levenez ?

### **Tad an danvez zo ar gwellañ danvezelour**

10. Ha n'Am eus Me roet d'an holl hed-ha-hed ar gwenodennoù ar mammenoù hag ar ruskennoù, an houarn hag an tan ?

Ar gaouiour touellus na c'hall roiñ netra a razh an traoù-se ; na c'hall anezhañ namet saotriñ ha gaouiadiñ ;

al laouer eo he deus laosket gantañ truez an Tad ;

an hoc'h a soroc'h e-barzh, a voueta e-barzh, gwezh ebet na dorr e naon.

### **Perak meiz-spered ha Krouidigezh a vefe enep an eil ouzh eben ?**

11. An Tad a zilez gantañ kalonoù, eneoù

an dibenedourion aheurtet en o fennegezh,

denion ha maouezi kaledet en o flijadurioù, o gwall-c'hoantegezh,

o fallentez, o darempredoù avoultr, an holl re a vez ouzh Ma daeiñ, dre lavaret Din :

« Doue, hon touelliñ a Rez ; gant piv ema bet gwelet bev ar re varv ? »,

o lavaret c'hoazh : « Ne fell ket dimp eus un Doue gwarizius ouzh hol levenezioù ha pinvidigezhioù,

Hag hol laka da ridenniñ ha melenaat e-giz gwrac'hed ! »

o lavaret ivez : « Piv a grou, piv a ren amañ anez mab-den ? Piv a vo trec'h war ar marv anez skiant mab-den ? »

12. An ourgouilh lorc'hus, ar c'hadaliezhañ orgedus, an c'hoantidigezh madoù, an euzhusderioù, o zreizhiñ a ra an temptour,

o *difankiñ* a ra en doneier sklaset,

dre ma pobl an Tad E Annez eus eneoù naet, ha dre ma eus dija trawalc'h a ziaouled.

13. ...

14. ...

### **An ourgouilh lorc'hus d'en em gavout dreist ar vuhez speredel**

15. Lavar da Ma Fobl : « N'en em gollit ket ! » Na skuizh ket o komz oute ; war Ma Menezioù kas d'az heul holl ar re a c'hallez !

16. Lavar dezhe : « Bez' ema an temptour dre an douar,

naonek atav. E sell ruz a vez o wilc'hat dindan ar Sklêrijenn, e droiñ

a ra etrezek an Tad : « Astenn Da Vrec'h, sko ! » a asped-eñ.

17. « Brec'h Doue, an ael distrujer, a sko an eneoù zo en em gollet el lorc'h,

zo bet kemeret Ma Arouezioù diwar skrap gante, zo en em blijet 'barzh en euzhusterioù a bep seurt. Evel eus *lastez* an temptour en em walc'h anezhe. »

Ar Veilhadenn 26, anvet **Beilhadenn ar Brizhyouloù** a-wezhioù, a zegas da soñj ag ar gwalennoù zo eus kevezerezh, uhelegezh, goapaerezh-ki, brizhdigarezioù h.a., a zeu ar pian (23/1) anezhe a-zrebi **Adam**, trelat speredel mab-den, ar vosenn vuhezegezhel-hont a zo bet disperedelaet ar bed ganti ha kadarnaet ren ar **vestronierion**. An **temptour** gwirion nad eo ket un drougael anezhañ. Deuet eo mab-den da vezout e **ziaoul**-eñ e-unan. Doare kizidikoc'h kizidik hemañ da zegemer an temptadurioù en devez lies hualet ar strivoù a **vorc'hed** keuzidik gant ar re wellañ zoken, ha troet da



## Alioù fur evit ar vuhez kevredigezhel

**27/1.** Den Mikael, *kar* ar re a gerzh war-zu o c'holl !

N'o c'hari ket mar bent degemeret Em Bodadegoù ganit ; int a gavo dezhe bezout dilennet.

2. Na zougi ket d'en em gavout salvet ar re a van aheurtet en o dibened ;  
ra vo da galon hep plegiñ dirak reuzeudigezh ar bec'herion foran,  
pe ar re anavet ganit o c'hevren kuzh.

3. Salvus e vez ar vezh. O mezh, diskouez-hi war ar plasennoù hag  
er c'huzulioù, na varn ket avat, na lavar ket : kollet eo hemañ ! Lavar :  
Pe vreur en em stago ouzh kammedoù hemañ evit e zistreiñ diouzh ar gaou ?  
Salv ! Na varn ket !

4. Pellaat a ri diouzh Ma Bodadegoù gant douster ha poell ar re  
a vez foran o fec'hed evel hini an avoultrerion hag ar gisti,  
ha na ziskouezont tamm pened ebet anezhe,  
ar re a denn drougimplij eus o finvidigezh ha galloud, savet dezhe temploù  
d'o uhelegezh,

d'an aour, d'ar *c'henwerzh*, d'an uzurerezh,

5. rak difennet Am eus *perc'henniñ* herezh Ma Fobl  
hag o ren,

Am eus roet d'an holl,

distroñ war du stal ar banker hag ar marc'hadour eostad  
ar c'houer ha gopr al labourer dre lorberezh ha breinentez  
a bep sort ;

ar re ivez a zistro Ma Galloudegezh war o zu dezhe hag int tremen da  
bPorzherion Din : priñsed al lid, ar veleion, an doktored en em laka da  
gKannaded Din.

### Pellaat an dibenedourion ned eo ket o dispriz, ...

6. Lavaret Am eus : Holl ar re-se ha re all c'hoazh a anavez, o laki da bellaat  
gant poell

diouzh Ma Bodadegoù ;

*lenn* a ri en o c'halon a-raok poueziñ o gwalloù, rak o mennozhioù a vez  
kel liesdoare evel askedoù ar rec'hier,  
ken niverus hag ar stered.

### ...derc'hel efedusted diouzh klask ar Mad eo

Ar pezh az po gourc'hemennet d'ar Bodadegoù  
evit diforc'hiñ ar mennozhioù mat diouzh ar re fall,  
ar benedourion diouzh an dibenedourion,  
er Siellin.

### Pa vez an dibourc'had o klask drevez an dibourc'her ar goazhañ a c'hoarvez

8. Keit ha na vo Jeruzalem distroet da Lec'h an Neñvoù, na skuizh ket  
o lavaret

d'ar re binvidik, d'ar re c'halloudek, d'ar re orgedus, d'ar veleion ha d'ar re arall,  
e tennont fonn bremañ diouzh an douar, diouzh an aour, an houarn hag an tan,

diouzh gopr al labourer,  
diouzh uvelded ar re izel, diouzh gwanderioù ar bec'herion, hag int doazh d'ober  
lezennoù eus o skrapidigezh, o direizhted hag o holl euzhioù,  
emglevioù a lakaont gant ampartiz da sielliñ gant ar re a vestront warne evit  
o gwastiñ,  
o zouelliñ, o laerezh,  
9. hogen anavout a raint kastiz ar re a zroukskouer,  
dre m'o devez awenet d'ar re wan a vestronion, a dennont  
korvo anezhe,  
da zont da vezout heñvel-mik ouzh o mestronerion *hag o dibourc'herion* ;  
engehentet o deus ur veñjañs hep fin ebet.

Erbedennoù a-zivout ar beviñ er gevredigezh eo a zegas ar Veilhadenn 27. Ar ger **bodadeg(où)** amañ zo roet dezhañ talvoudegezh ur ster ledan ouzh un tu (an holl gevredigezh denel en he fezh) kerkoulz hag ur ster eus ar strizhañ ouzh un tu all (strolladoù lec'hel ar **restadig**). Hogen an daou ster-hont en em geñ, dre ma tle ar **restadig** dont da vezout ar melezour pe an arnodva eus ar **bed cheñchet** (28/7).

### **Kreñvoc'h mad oberius eget feiz vorzedus**

**28/1.** Bez' emañ o horellat den Mikael, emañ o oueliñ.

Piv a vo salvet, a c'houlennet-te Diganin ?

N'az Kasan ket dre ar bed gant ur gordenn da vuzuliañ evit lavaret :

« Fellout a ra din gwelet ledander hag hirder Lec'h an Neñvoù ma talc'ho  
ennañ ar re zilennet. »

2. Bez' az Kasan diskouez da Ma Fobl o faziou,  
evit ma verzhint lec'h m'Emaon,  
lec'h n'Emaon ket.

3. Setu lec'h m'Emaon : Evel ur stêr Ma C'homz a zinaou adarre war ar  
stepennoù,  
digor a ra He red en douaroù skornet  
lec'h m'Am eus enaouet denion rust,  
denion n'Am anavent ket mui er maskloù a oa  
bet stummet Ouzhin,  
denion droukskoueriet gant ar pennoù-bras galloudek hag ar varc'hadizion,  
ar briñsed hag ar veleion.

4. O *enaouet* Am eus. Koulskoude ne zistagont ket Ma Any, ne selaouont  
ket Ma C'homz; paot a vag kasoni Ouzhin,  
kement-se avat ne vo ket tamallet dezhe  
dre ma'z int bet droukskoueriet.

5. A gement bet lorbet a zeu da vout evezhiek;  
perak e Kasin profeded d'ar re a zo bet gweladennet gant ar  
falsprofeded ?

Anezhe int eo e Ran profeded.

6. Sed perak n'Am eus ket kaset d'an denion-hont Ma C'homz el  
Levriou,

Hogen e-kuzh dezhe Am eus bleinet o zreid a-benn d'ar Wirionez  
a oa en he gourvez evel un erer gloazet  
e kalon o zadoù hag o breuder daoubleget dindan ar re c'halloudek  
hag ar re binvidik,  
hag int da zieubiñ ar Wirionez,  
hag int da zieubiñ o zadoù hag o breuder;  
ha Me d'en em guzhet oute c'hoazh dre ma oant bet skuizhet Ac'hanon,  
c'hwezhiñ a Ran didrouz en o askre.

## **Dezev an Diskuliadur-mañ: Ur bed nevez**

7. Rak dle eo d'ar bed cheñch, sed ar Wirionez,  
n'Am eus ket lavaret traoù arall da ma Zestoù.  
Ma C'homz eo al Lezenn a zeu ;  
ar broadoù hag int o devez sujet Dezhi c'hoazh ?  
Pêr zoken n'en deveze ket Hi sevenet.

8. En arbenn a gement-se e vo tennet diouzh o faleziou hag o zemploù ar bilpouzed likoes  
o deus graet e gaou eus Ma C'homz al lezenn a vez.  
Hi zo al Lezenn a vo.

Un nebeudig priñsed c'hoazh e Roma, e lec'hioù all ivez,  
ha tennet e vo an diwezhañ eus e wele da darzh gouloù-deiz.

9. Na ouel ket d'ar gwalleurioù a vo gwelet d'an deiz-hont,  
rak lezet Am eus gant ar briñsed  
amzer evit selaou ouzh Ma Chomz,  
hag ouzhpenn eget amzer ar morc'hed zoken !

## **Gwell e vez un den difeiz madoberus eget un den a-feiz gwallus**

10. Dre n'eo ket bet graet gante, o lakaat Ma Nerzh war o anv o-unan hag o tistroiñ  
an doujañs Doue war du o falsoberoù,  
diazeziñ a ri gwir zeolietzh Ma Fobl,  
kelenn a ri ar Wirionez,  
karet a ri Ma Fobl,  
sikour a ri an hini moustret diouzh ar moustrer,  
an hini dibourc'het diouzh an dibourc'her ;  
gant da vreuder eus ar stepennoù, ar re ne vezont ket evit distag Ma Anv,  
e tiazezi ar *reizhted*.

11. Gwell eo ma tiazezo anezhi hep Ma Anv  
eget na reno Em Anv ar pezh Am bez euzh ouzhtañ.  
An dra-se, M'Am eus eñ youc'het war an uhelennoù,  
dindan ma C'hri o deus savet an doureier dirak Genezared,  
hogen chomet eo azezet ar vostad a selaoue Ouzhin.

## **Betek-henn e vez graet gwell gant Yann difeiz eget gant ar relijion...**

12. Gwell e vize bet dezhe  
chom hep anavezout Ma Mouezh,  
ha sevel evel gwagoù ar mor,  
heñvel ouzh ar gwagennoù a darzh ouzh ar garreg a stank o red,  
*bouzar, pennek* ;  
diskaret o divize ar pec'hed,  
an euzh ken uhel hag un tornaod.  
Hogen chomet eo ar vostad a selaoue Ouzhin azezet gant he fennoù-bras hag  
he beleion.  
Gortozet Am eus  
ha setu Me savet en o lec'h.

## **...met setu deuet amzer ar seveniñ**

13. Rak naer ar pradeier hag hi Ma c'hanmeulje da vezout he graet en he frankiz rez,  
da vezout roet dezhi un neizh evit he bugalez ha bevañs a-fonn,

da vezout he graet par ouzh naeron he spesad,  
ha denion hag int-i Ma mallozhje c'hoazh da vezout o lezet da *stouiñ*  
*dindan* mac'homerezh an estren, o breur, da vezout o lezet dishêret gant  
ar binvidion, o breuder,  
da vezout o lezet touellet gant ar veleion ?

14. Deuet eo an amzer ma vo sevenet Ma C'homz.

Eus an uhelennoù a zo a-us d'an aodoù  
dirak Genezared  
ema klevet Ma Galv a-benn ar fin  
gant denion hag o devez kaz Ouzhin.

### **An eürustedoù pe meulgan d'ar re wenvidik**

15. Eürus int rak m'emaint bet drouskoueriet.

Eürus int rak m'emaint bet paour en din hag  
e teuint da vout pinvidik eus an douar holl.

Eürus int rak m'edi marv o zadoù sklaved  
ha frealzet eo o eskern hiziv.

Eürus int rak m'edont *gronnet* gant an naon hag an direizhted  
hag e vevint reishaet ha gwalc'het.

Eürus int abalamour d'o vertuzioù rak ma anavezint Doue.

Eürus int rak ma karont o breuder, ma raont ar peoc'h  
ganto.

Eürus int rak ma rannint Ma Hêrezh etre an holl.

Anvet a rer **eürustedoù** un heuliad lourennek hag a grog gant « Eürus (pe Gwenvidik) int... » pep gwerzenn anezhañ. Sed aze un doare barzhel kozh bras (kavet peurgetket en avieloù palestinian, Mazhev 5/3-11, Lukaz 6/20-26), hag a zeu war well en-dro e Diskuliadur Ares. Dre an **eürustedoù**-hont ar C'hrouour na zeu ket da ziskouez un anad ag e stil. Dont a ra ker plaen ha tra da gomz d'an dud eus an 20vet hag 21vet Kved e-giz ma komzas d'ar re eus an henamzerioù.

16. Karet a ri pergen Ma Gwenvidion,  
rak ma sevenont Ma C'homz,  
rak na Zalc'hin ket soñj ag o c'hasoni,  
met derc'hel a rin soñj a walloù ar briñsed o deus braouac'het o zadoù  
Em Anv.

17. Ar pezh o deus goulennet o zadoù Diganin  
an noz m'o doa anoued ha naon,  
ha n'o deus ket bet digant ar re a gomze Em Anv,  
en el Lakan da zisoc'h hiziv,  
rak n'o devez ket pec'hed gant avi,  
hael eo chomet o c'halon.

18. Goulennet o deus o lod eus Ma Hêrezh digant ar re o deus lakaet krog  
war an douar, an houarn hag an tan,  
goulennet o deus ar reizhted digant ar re a dron Em Anv, a zoug  
ar varnadenn-mañ : « Bezout a ra, eme Zoue, ar re binvidik hag ar re baour, ar re c'halloudek  
hag ar re wan ! »

Gwa d'ar varnerion gaouüs !

### **An droug a zeu pa ne ouezer ket mui anavezout ar Mad**

19. Kollet o skiant dezhe, emaint en em droet trema Satan, p'en devez an droukskouer  
lazhet an Tad en o c'halon,  
ha Satan lavaret dezho : « Ar re finañ, eme ar skiant, ra zeuint da vout pinvidik,

ra renint war ar broadoù ! »

20. Mall eo Din dieubiñ ar broadoù ;  
war-greiz an noz Am eus o lakaet da glevet berlobi ambren ar c'halloudeion,  
an dierned hag ar binvidion,  
komprenet o deus, emaint en em savet,  
torret o deus o chadennoù, diwar o houarn goveliet o deus armoù,  
diwar o filc'hier graet o deus klezeier,  
tapet o deus an tan a vann daredoù,  
trouzet o deus a zon ar stepennoù  
evel kefeloù kezeg d'ar pevarlamm merket gant Ma Arouez,  
adkemeret o deus o hêrezh digant al laeron.

### **Krediñ a ra an Tad e vo ar bed evit adkavout ar Mad**

21. Diverket Am eus o barradoù feuls evel kourmoul,  
glanaet En deus Ma C'hwezh an oabr a-uc'h dezhe.  
Dont a ray en-dro ar broadoù da dal Din,  
broadoù arall en em zieubo ivez.

Lezel a Ran gant o mestronieron an amzer eus ar morc'hed, gortoz a Ran c'hoazh.

22. Gervel a ran c'hoazh ar veleion d'ar Wirionez.

Hervez Ma Diougan e vo lezet peoc'h, bevañs ha kledour ganto ;  
an hini a restaolo da Ma Fobl  
neb o madoù

neb o deoliezh

a vigo eürus e kreiz e re ;

23. mar daleo avat, mard ay da glask troioù, e c'houzañvo ar feulster.

E-leizh anezhe a vo handeet hag heskinet,

ar re vanet salv a vo hetaet hag enket,

o gwraez a yay da c'hastaouiñ hag

o bugalez a vo lamet o danvez digante.

24. Ra brederio buan Ma C'homz

ar re a briz gwerzh an douar,

gwerzh an houarn hag an tan, gwerzh ar bedenn,

gopr al labourer, kampi an arc'hant,

a denn korvo diwar ma hêrezh evite o-unan ;

ra ziwallint kent na vo re ziwezhat !

### **Ar pened a salv hep bezout ponneroc'h anezhañ eget prederi ar bemdez**

25. Hag eñ zo bet lakaet ur priz Ganin da Ma Silvidigezh ?

Ha n'Am eus Me he roet d'an holl evit poan un pened

a zo levez evit an dud en doujañs Doue,

ned eo ket ponneroc'h anezhi eget ar preder diouzh an uzurer,

a zo skañvoc'h eget yev ar pinvidig hag ar galloudeg ?

### **Danvez kalvezadel pe artifisiel e vez gwerzhet kentoc'h siwazh pa vez ag an natur**

26. A-hed Ma Gwenodennoù war-zu Ma Uhelennoù

e labour ar gwenan evit an holl.

Perak gant follezh

oberiañ mel ha koar e-barzh er stalioù ?

E-harz o zroad Ma Gwez alamandez a strew o frouezh, ar glujar na c'houleñn

priz ebet evit he c'hig

nag ar c'havr ur priz evit he laezh.

Lakaat a Ran da strinkiñ eoul evit an tan, strewiñ a Ran war c'horre an douar ar plom hag ar c'houevr evit an holl diouzh ar boan d'o dastum ha d'o aoziiñ.

Eus an douar ha n'Am eus Me roet an teol diouzh ar boan d'e boazhiñ ?

## **Danvez ur profed en test kadarnaet adarre**

A lein Ma Annez Am eus da c'halvet, den Mikael,  
den Ma Mennozh,

evit lavaret lec'h m'Emaon,

lec'h n'Emaon ket,

evit lavaret da neb a gri : « Aotrou ! » Ouzhin na vo ket salvet dezhañ mar

man bouzar ouzh Ma C'homz,

ha da neb en deus Ma ankounac'haet a vo tommet dezhañ ouzh sked Ma Gloar mar dalc'h d'Am C'homz.

Te avat, nep tro na vanni an dorn war nep hini !

## **Ar Mad a yay an trec'h gantañ diouzh un enebiezh na c'haller ket mirout outi**

**Beilhadenn Vras** eo anvet ar Veilhadenn 28 gant an **test** en abeg d'ar reizhadennoù hollbouezus degaset d'ar c'hredennoù boutin ganti. Didamall a ra ar vuhegezh dizoue ha difeiz, an andouecouriezh hag agnostegezh, pa vezont disoc'het diouzh **droukskouer** (28/3-4) ar relijion gant ma chomer hep paouez a glask **mad** ar bed (28/11-12). Termeniñ a ra ar **Wirionez** (28/7) evel hollad an oberoù (ha n'eo ket ur rollad menoioù) a **cheñcho war vad ar bed**, dre ma talv muioc'h an oberoù **mad** (ar **pened**) eget an dogmoù pe penngelennadurioù strizh. Dediañ a ra an Eürustedoù (21/15) d'an holl dud a ra ar **mad** ha n'eo ket d'an dud a-feiz hepken. Aweniñ a ra arsav gant an harzoù politikel hag ar politik e-unan. Gervel a ra d'ur vuhez na vehe ket ker kreñv enni pouez ar greanteladur, an ardivinkadur hag ar c'henwerzh, rak seul vuioe'h e implij mab-den danvezioù naturel ar Grouadelezh seul aesoc'h e adkav e natur speredel, e anien zon (28/26).

Deizioù gweladennoù Jezuz na voent ket notennet gant an test. Koulskoude e tale'ho soñj da viken eus an deiziad kentañ : ar 15 a viz genver hag eus an deiziad diwezhañ : an 13 a viz ebrel 1974, hag etre an daou zeiz-se darvoudoù bihan n'eus ket a ankouazh anezho o-unan. Da skouer, emezañ, « e-pad an hir a Veilhadenn 28, e-tro kreiz miz meurzh, e tarzhas ur gaouad c'hlav pil. Tostaat a reas Jezuz ouzhin, lakaat a reas e zorn war ma fenn hag ur wezh c'hoazh e pouezas e veud ouzh ma diweuz ha neuze e klevjon leunded e gorf : pouez e vrec'h, gwask ar biz. Ur wezh ouzhpenn e taoljon meiz na oa Jezuz nag un tasmant nag ur weledigezh, met un den treusneuziet dezhañ **kig, spered hag ene** (17/7) ».

Alies e vez lâret gant an test : « Ur Revelasion er Revelasion eus Ares eo ar Veilhadenn 28. Da lâret eo, lennet distag diouzh ar re all e spir dezhi he-unan. »

## **29/1. Ar pezh Am eus lavaret a vo sevenet**

a-benn remzi ar rummadoù a zeuy diwar da ziskennidi.

2. Te, den Mikael, n'anavi nemet

ar restadig,

re wan evit kaeiñ dit ouzh ar vestronierion, razh ar re

az toujo,

az tamallo a c'haou hag a douerezh-Doue,

ag emsaverezh disivoud, a enaouo an c'hoarzherion ez enep

ha tud diskiant evit gaouiñ ouzh da vuhez,

evel m'o doa graet Em enep.

## **An Tad n'en em aberzh ket dre zorn ar bourev**

3. Hogen evidout

evel evit an holl

Am eus sammot an Aberzh.

An holl a ray koun Anezhañ gant keuzeudigezh,

met piv a c'hallje E c'houzañv adarre ?

Te e-unan n'out ket zoken.

4. Rak Ma Zrec'h eo dija da drec'h  
a-raok na vi skoet ;  
Savet diwar ar bez Ma Brec'h a harzo ez raok ar c'hoaperion hag  
ar vultreion,  
ar falstestoù.
5. Ne vi ket ennout a lorc'h *argollus* a-walc'h evit en em ginnig e aberzh evel da Zoue,  
ned eus gour Nemetañ-Eñ a c'hall en Em ginnig d'ar bourev hep en Em goll,  
rak n'az peus tamm galloud ebet evit dasorc'hiñ a varv da vev  
hag e kolli evel-se ar pezh a C'hortozan ac'hanout ;  
ar goazhañ razh hag ar pec'hedoù a ri aze.
6. Reizh ha dous , e seveni Ar Pezh az Lavaran skriv ;  
neuze ul leizh a aeled az skoazello,  
a skoo da eneberion daerañ diwar Ma C'hourc'hemenn.  
Na brederi ket d'en em zifenn,  
ro bec'h d'ar pezh a C'hourc'hemennan dit hiziv !

**Beilhadenn an Aberzh Kentañ** e vez graet gant an test eus ar Veilhadenn 29 abalamour man'd eo disañval-krenn mennozh an **aberzh** meneget dre ziv wezh enni (29/3 ha 29/5) diouzh mennozh an « aberzh dre ar groaz » pe eus « aberzh an oferenn » dogm an ilizoù. **Aberzh** ar C'hrouour, naturel ha diazezel e orin, eo an hini sammet gantañ adal ar C'henelezh dre ober ag an aneval-speredet a oa diagent **Adam (an den a gouske war ar skeud,** vii/2) e **skeudenn** (Geneliezh 1/27) en ur asantiñ an holl riskloù da c'houzañv a-gevret. Ent-gwir, goude en devout resevet ar **frankiz**-holl, e-touez donezonoù arall, e **choaz Adam** (2/1-5) ur vuhez disañval diouzh mennozh an **Tad** war e zivout. Dre ar gwall-**choaz**-hont e luskas **Adam** kelc'hiad an **droug**, ar gwalleur, ar c'hleñved hag ar **marv**. Evit kement-se e tisklêr an **Tad karantezus** bout **dleour e-keñver e grouadur** (12/7), padal e c'houlenn digantañ, e dalc'h an hevelep frankiz, bout kengrouour eus e **silvidigezh**-eñ e-unan pe **cheñch** war **vad**.

## Gwanaet ha bouzaret eo mab-den gant ar pec'hed

### 30/1. Ar pezh a Lavaran

E lavaret Am eus c'hoazh ;  
Ma Diouganourion ha Ma Zestoù o deus Eñ roet d'ar bed.  
P'az pize selaouet outo, den Mikael,  
ne Vizen ket diskennet da dal dit.

2. Hogen dindan ar pec'hed ema koun an denion  
evel dindan ar sec'hor un draonienn strujus,  
pep tra a zivi enni, da aezhenn e koazh an dour bev,  
spered mab-den a fron an aer ag an amzer evel un azenn sec'hedet,  
evet a ra ar fank e don ar poullou,  
evet a ra forzh petra a zistan e sec'hed ur berrig-amzer.

3. Drezout-te e Teuan da gas a-nevez an Dour Bev.  
Pet gwezh Am bo d'ho toura ken na sevenot  
Ma C'homz ?

## Goulioù an Tad : e Garantez disprizet ha gloazet

4. Perak e van ruz Ma Goulioù ?  
Perak e *nac'her* Dezho pareiñ ?  
A-vec'h ma vez serret *O* c'hig, e c'hoarvez amzer ur gaouad euzh  
ma vez gwashoc'h eget biskoazh ar mallozhiñ-Doue, an droukskouer,  
an c'hoantidigezh madoù, ar c'hadaliezh orgedus, ar gaou,  
a zigor Ma Goulioù adarre evel ur vegenn *gailhastr*,  
a skuilh tan enne.  
Ne Bareint ket mar ne bare ket mab-den ;  
dibaouez e tenn Ma Deiz war dreñv.

5. Hag eñ a vo dle Din Am bout keuz d'an amzer ma Voen ganet gant Maria,  
lavaret na vo ket eñ benniget !?

6. Kentoc'h eget skubiñ ar bec'hourion galedet  
diwar barrad Ma C'hounnar evel diwar Ma Zrowent dour-bil e grez Noah,  
e Tiskennan da wriziañ e kreiz da rummad evit bezout e Winienn ;

### **Dizehan e teu an Tad war well en-dro er C'hrouour**

7. Ma Skoultrou gloazet eus Ma Gouliou na daolont ket frouezh,  
o c'hrenniñ a Ra an Tad ;  
mard advountont gloazet eus Ma Gouliou, o c'hrenniñ a Ra c'hoazh.  
Mard out ar skoultr mat e C'hwezh evit distrew an astuz a-ziwarnout ;  
da vennigiñ a Ra evit ma tougi muioc'h a frouezh.

8. Ra ziwallo avat ar re a euver hep skuizhiñ Ma Skoultrou !

Taolet e vint d'an tan war un dro gante.

9. Naren, Ma Chounnar nad eo ket marv da virviken.

An doktored eo o deus lavaret an dra-se ; ra vo o diwezh en tan !

A-ziouzh o c'hig *rostet*, ra vo stlapet o spesou e-barzh e aveliou-sklas  
an islonkou !

### **Mont da get eo tonkadur an droug, ned eo ket da vezout pardonet**

10. Ne Bardonan ket ar pec'hedoù ;

Ma Silvidigezh nand eo ket e penn ar pardon, met e penn ar pened.

Ne Bardonan ket d'ar pec'hour ;

Ma Mennentez eo ma paouez bezout pec'hour.

### **Ar pened pe fest al levenez diabarzh eus ar mad adkavet**

11. Ar penedour nad eo ket ar pec'hour a ya war e goazez er boultrenn, en em  
c'holo gant ur sac'h,

hogen an den a baouez a bec'hiñ, ha eñ gwisket evit ar fest zoken, c'hwezh-vat gantañ,

o kanal ouzh son ar fleüt hag *an drompilh*,

nag al levenez ha brageris hag eñ a zijaoj diouzh an hini en devez

*cheñchet* buhez ?

12. D'ar re n'o deus ket resevet Ma C'homz,

n'anavont ket o gwall,

d'ar re a zo bet droukskoueriet ivez

e vo pardonet,

hogen d'ar re o deus resevet Ma C'homz,

a anav o disentidigezh,

ema goulennet digante distroiñ ouzh Ma C'homz,

na bec'hiñ ken.

### **Cheñchet ar penedour da zen eus an amzer a zeu**

13. Mar ne bec'hont ket mui, ne zalc'hin ket soñj ag o amzer dremenet,  
ez aont tre er pened.

Bez' emaint tud ag an amzer a zeu.

14. Priñsed al lid, distroet o deus Ma Bodadegoù ouzh o zu dezhe

hag o beleion,

graet o deus tropelladoù berr o anal anezhe, o suniñ an aer da zouelliñ o naon ;

hañval ouzh pastored hag a zalc'h o deñved war o naon ha sec'hed,

hag a gont dezhe geot ha dour gant ampartiz,



evit ma kerzhint war o seuliou,  
lakaet o deus Ma Feizidi da gestal oute en aluzen  
o fardon didalvoud.

### **Touelladur ar relijion a lavar ober en anv an Tad**

15. Pet amzer e pado c'hoazh o euzhioù ?

Den Mikael, sed ar pezh a lavari d'an neb a ra ur jestr da  
absolviñ : « Diwall ! Tresiñ a rez ur mallozh da Zoue. »  
D'an neb a c'halv ar pec'hour da glevet anzav e bec'hedoù, lavar dezhañ  
e ra aze an droukskouer gwashañ ouzh an hini gwan !

16. Ar C'hrist na selaou ket ouzh anzavioù ar bec'herion,  
o gervel a Ra d'ar pened,  
gortoz a Ra na bec'hint ket ken,  
diskouez a Ra dezhe E C'houliou gwad-holl,  
E Skoultrou gloazet astennet diraze  
evit m'O louzaouint gant preder,  
evit ma sklêrijenno Ma Deiz an neñv a-dreist dezhe.

Bev ha dirannadus eo ar **Wirionez**, pep tra enni a zinaou eus an hollvoud. Rak-se an **test** a ra a-wezhioù **Beilhadenn an Arall-Holl** eus ar Veilhadenn 30. Gwelet a rer enni kerse ha meskont an **Tad** e-doug an oadoù m'en devez galvet en aner an denion (**Skoultrou e Winienn**, 30/6-8) d'adkavout ar **Mad** hag ar santimantoù a ziskouez anat dreze o-unan ema mab-den **skeudenn** an **Tad** (Geneliezh 1/27). Gwelet a rer ivez ned eo ket diskoulm an **droug** pe **bec'hed** 'barzh e **pardon an Tad**, met 'barzh e doare buhezel war vataat (**pened**) mab-den. D'an diwezh, e weler splann ar c'hrist eus an ilizoù nad eus ket anezhañ, kement **penedour** gwirion avat a zeu da vezout **krist** eñ e-unan hag en e zalc'h-eñ ema alc'hwez ar **silvidigezh** hollvedel ha donedigezh an **Deiz** diwezhañ.

### **Pet gwezh e vo ret gervel an denion ?**

**31/1.** Heñvel ouzh ar winienn e Ran gwrizienn ez remziad ;

a-benn bremañ ez eus en em ledet skoultrou mat a-dreist ar stepennoù, lec'h  
na soner ket ma Anv.

2. Ma skoultrou hag a daol gwaskedenn war an traoñiennoù lec'h ma aspeder Ma Anv  
en un devañ an ezañs

zo gloaset,

dre na zouger ket pened dindan o gwaskedenn.

O c'hrenniñ a ra an Tad hag o zeurel a ra *gant* ar bec'hourion evel ma rer eus an astuz.

Birviñ a ra an deñvalijenn gant ar vordilh a spesou war gantren.

3. Ma C'homz ha na bouez Hi dalc'hus a-walc'h ?

Ha n'Am eus Me da c'halvet evit He lakaat da vezout anavet gant Ma Fobl  
goude Dezhi bet embannet c'hoazh gant Ma Diouganourion ha Ma Zestou ?;

4. Ma Fobl hag int a bellay diouzh priñsed al lid hag ar veleion, hag int

a bellay diouzh ar falsdiouganou,

*hag int a dec'ho* a-raok ar gisti, ar varc'hadourion, an usurerion o dalc'h dindan  
o hoalerezh,

holl ar re o brein hag o droukskouer,

a zoug barnedigezhioù gaou,

a c'hourdrouz a walleur ar re wan mar savont eneb,

a zistro ouzh o zu dezhe Ma Hérezh ?

Ar benedourion, *hag int a zeuy en-dro* d'ar re o c'holle ?

### **Kroaziadeg ebet ! Eus ar feulster ne sav ket ar silvidigezh**

5. Ha dleet e vo Din astenn Ma Dorn etrezek ar sav-heol  
evit gervel denion rust ar stepennoù,

ma trouzint d'an dremmwel war o roñseed kezeg aroueziet, evit pilat  
evel Ma Zrowent e grez Noah  
ar re o deus dianket Ma Fobl,  
o deus savet o fuilhentez *diwar* o hirvoudoù  
dre sevel galv d'Am Anv,  
evit serriñ *genoù* ar re a huch gaouier, mallozhoù da Zoue ha  
lavaroù diboell,  
evit troc'hiñ daouarnioù ar re o deus laeret hêrezh Ma Fobl ?

### **Penedourion *mederion* vihan, met *ramzed* eus an Neñv**

6. An Eost az Kasan mediñ, den Mikael, zo ul *labour* evit ar  
ramzed eus an amzerioù a-gent,  
hogen ker gwan eo da vrec'h evel un tarar o klask toulliñ ur  
menez;  
setu perak e vo skoazellet bemdez ganeoc'h-c'hwi, te ha da vederion;  
lemmet e vo ho filc'hier aet dall; plegiñ a ray an tañvouezad en ho raok dindan Ma  
C'hwezh; devet e vo drein ha spern gant Tan an Neñv; Aeled leizh ul lejon aveet  
a-ratozh a skoo gant ho eneberion;  
7. ha neoazh poaniañ a reot, bloñset e vo ho tivrec'h gant an taolioù paket,  
krabiset gant an drein;  
hogen berniañ a ray feskennadoù ponner war ho lerc'h, greun mat a-builh enne,  
Solieroù Ma Grañjoù a glemmo dindan o bec'h.

### **An *Deiz* ma vo trec'h ar *benedourion* war ar marv**

8. A-benn neuze e vo Ma Deiz.  
Gant ur Jestr e Arsavin ar sterenn dindan ho treid;  
na vo ken na deiz na noz,  
*hogen* goulaouet e vo dibaouez kement zo holl gant Ma Sklêrijenn ;  
9. diskenn a Rin d'ober gweladenn Ma Grañjoù,  
astenn a Rin Ma Divrec'h war an hollved  
hag hemañ da youc'hal gant al levez, da dridal gant ar blijadur,  
10. ar stered en em enaouo evel flammoù, en ul loskiñ ha pulluc'hiñ  
dilerc'h ar strouezh ha spern dreinek,  
11. stouiñ a Rin etrezek ar pouloù-bez, al listri-ludu, ar morioù,  
an eskern ha ludu a skrijo dindan flouradenn an eneoù diskennet  
Ganin diwar an Uhelioù Santel,  
int a c'hronno hag adsavo.  
Eus goueled an islonkoù sklaset selloù *kleuz* ha gwenn ar spesoù Ma  
aspedo,  
pep unan a welo neuze Ar Pezh a Rin.  
Hogen ken na vo an Deiz-hont e vo paod a ouilerezh ha poanioù  
en doneier teñval.  
Ra vi klevet gant Ma Fobl, den Mikael !

**Beilhadenn ar Gomz pouezet gant Dalc'husted** eo ar Veilhadenn 31. Dont a ra en-dro ar C'hrouour war c'halvadennoù, gwirionezioù, erbedadennoù  
bet graet c'hoazh gantañ, hag e **pouez** (31/3) gant helavarded warnezhe. En he fezh ez eo sklêrijennet ar Veilhadenn gant ul lourennerezh barzhel  
dibar, e-giz ar bravat a arroudenn a veneg a-nevez **denion ar stepennoù** (28/10, 28/20) pe daskounadenn hollgaer an **Deiz** (22/13, 31/8) ma vo  
**cheñjet ar bed** (28/7) pa vo levezon ar **restadig** kreñv a-walc'h evit lakaat harz hag arsav da red an amzer - **na vo ken na deiz na noz**, 31/8 – evit  
herzel d'ar **marv** ha dasorc'hiñ ar re reizh ha moarvat ivez memes sevel a varv da vev ar **spesoù** (31/12) eus goueled an **deñvalijenn** lec'h m'emaint  
kouezhet.

**Jezuz nad eo ket Doue; evel kement penedour bras...**

**32/1.** Mouhamad, Ma C'hannad deuet ez raok, en deus kelennet Jezuz  
nad eo ket Doue,  
ha dizeol ar re a gred kement-se.

### **...ema Krist hag evel kement Krist skeudenn Doue**

2. Olivet Am eus diweuz Ma C'hannad gant Ma Dorn; gwir eo e geennadur:  
an den Jezuz nad eo ket Doue; ar C'hrist eo zo Doue,  
Me eo ganet eus Jezuz ganet eus Maria.
3. Un ec'honder hiroc'h eget ur bann-heol a ya eus Jezuz d'ar C'hrist ;  
an hed divent a ya eus an douar d'an Neñv  
en deus e redet eus ur penn d'egile, pa'n devez lakaet e gammedoù Em C'hammedoù,  
troad-ha-troad Ganin hep pellat biskoazh,  
entanet eo bet eus Ma C'harantez evit mab-den,  
e vreur,  
ha savet evel ur *vogedenn* c'hlan Davedin ;
4. sevenet en deus e-doug ur bloaz, herrad amzer un *bomm-nij* a-denn-askell,  
ar pezh a seven ar bed evit e silvidigezh a-hed ar c'hantvedoù.
5. M'Am eus eñ kendeuzet Ennin ; graet Am eus un Doue anezhañ ;  
deuet eo da vezout Me.  
Pezh spered den, lutig dister,  
a c'hall intent kement-se ?

### **Didro-kaer eo karantez. Dogmoù ha lezennoù a douell**

6. Hogen roet Am eus dezhañ nerzh a-walc'h da gompren dre hañvaladennoù  
ez eo aner prezeg diwar Ma Oberoù,  
disantel selaou ouzh flaperezh an doktored !
7. Diwar avel e vouetont Ma Fobl, vended goullou ha touellerezh a baota enne ;  
emgleo a skoulmont gant ar skiant ; bez' ez vezont e breudoù diehan gant o  
dislavarerion, ker goullou hag int ; diwar o *filiperezh* e veulont ar  
briñsed, ha pennoù-bras o emsavidí dizivoud,  
doazh da ouzout penaos baratiñ ur re,  
penaos troc'hiñ fougeoù gant ar re all,  
respont o devez ouzh pep tra,  
bez' emaint gaou ar gevier.

### **Ar Gomz na vezv ket, digor a ra ar spered**

8. Hogen, kelenn a ri, den Mikael, en em zalc'h an den doujañs-Doue ennañ dirak  
Ma C'homz ha na ra mui kammed ebet ken war-raok  
evit na gouezhel en islonk.  
Em Bodadegoù na gomzor biken gant un teod mezhvier e-doare  
ma ra an doktored,  
n'o deus ket torret o sec'hed diwar Ma C'homz  
met en em vezviñ Anezhi ;  
ne verlobio gour gant trelat diwar Ma Levrioù.
10. Sevel a ri ar muzul a vo bannet diwarnañ Ma Levrioù er  
bodadegoù,  
hag e tistaoli diwar-dro ar re savet diwar dorn den.

Ar Meiz Speredel Adkavet e vez graet eus ar Veilhadenn 32. Didro kaer e lavar : **Jezuz nad eo ket Doue**, neuze enta ned eo ket anezhañ an hini a zo « mab » an Tad a-hrevez, « eilvet person » un dreinded nad eus ket anezhi (23/7, XViii/1). An doueegezh a zo e **Jezuz** eo hini kement **penedour a laka e gammedoù e Kammedoù** ar C'hrouour (2/12, 32/3). Speredad ar wirionez-hont a voe santet gant an iliz, met dre ziouer a **veiz** speredel (pe dre ur spered meizel a re, intelektual ha distresus) he deus el lavaret ha displeget dindan stumm kelennadurioù dogmatek a zo bet dianket ar gristeniezh gante.

## Trec'h ar *Furnezh* war ar brizhpoellata

**33/**1. Gwan eo da benn, den Mikael ; dalc'het eo start gant ur skoulm d'ar gouzoug.

2. Un tammig amzer c'hoazh ha, da zeiz Ma Zrec'h,  
troc'h hardizh ar gordenn az stag d'ar bed  
ha da briñsed al lid.

Endon e poultrenn an douar da walenn-roue ha da gurunenn !

3. Diwar an deiz-hont e serri porzhioù an templ en arouez a zic'haou,  
gant da re e pedi a-dreñv e vogerioù  
ken n'az po e aozet ouzh Ma Urzhioù.

4. E-kehit-se e Sonnin da vrusk evel un nervenn,  
az Uhelin evel un tour,  
e C'hwezhin ar spered ez fenn ; e Lakin lemm da lagad.

5. Evel an erer ne ri van ouzh an uhelioù mezevennus,  
evel e gri a-dreist ar rec'hier e teuy da vouezh betek ar re  
o deus dianket Ma Fobl evit o broudiñ d'ar morc'hed.

6. Lavaret a rez Din : « Kement-holl a C'hallez ; en ur gaouadig e C'hallez o c'has da get.  
Perak ma C'hasez-Te d'o broudiñ ? »

Abalamour Ma Furnez n'eus skiant ebet Enni,  
divuzul eo da vab-den,  
Ma Furnez na c'hallez ket kompren.

7. Lavar hepken : « Da glevet am eus ha Da welet am eus, trawalc'h eo din ; ne  
bec'hin ket. »

## Mar n'oc'h ket evel ar re vunut-hont, silvidigezh ebet !

8. Seul vui e c'houlloi da benn ag ar skiantoù fougeüs  
dindan Ma C'hwezh, ouzh *sked* ar Spered,  
seul vui e *verzi* Ma Burzhudoù marzhus ;  
sed perak Am eus lavaret : « Bezit evel ar vugalez ! »

9. Eus genoù ar re guñv hag ar re vunut eo e lusk ar flammoù a zevo  
ar re zrouk, ar re faos, hag ar re gwallc'hoantek o c'halon.

Sent Ouzhin evel ur bugelig,  
ha gant da ziskennidi  
e naeti ar bed  
hag e prienti Ma Deiz.

## Kollidigezh ar re vouzar, ar re lorc'hus hag ar re wallc'hoantek

10. P'az po graet eus an templ lec'h ar Vodadeg, e tigori e borzhioù  
a-nevez dirak Ma Fobl ;  
da dour serzh e vo-eñ a-ven, heñvel ouzh dason ar gurun,  
e tegouezho da vouezh hag ar pezh az po skrivet gant ar re a rank keuzidikaat.

11. Kalz a vano bouzar, lorc'h enne, int en em gollo, e lavaret Am eus,  
ar veleion hag ar briñsed dreist-holl zo o fennoù e-barzh sec'hier tev,  
met ivez ar re c'halloudus hag ar re binvidik bouzaraet gant safar strakus o  
c'hêrioù.

12. Hogen evit ar restadig e tiazazi ar bedenn.  
D'an tad e komzor Outañ e-giz m'Am eus e c'hourc'hemennet ;  
Koun Ma Aberzh a reor ha razh.

### **Skeudenn vras ar gendruer hag ar selaou**

13. Met ivez doareioù arall hag a c'hourc'hemenni hag a Siellin,  
lakaat a ri Ma Bodadegoù da ziviz Ganin, ha gant ar vaouez c'horroet  
a-uc'h ar reter, he deus Ma ganet, a vez brazez a dristez dalbezh,  
rak roet Am eus dezhi Ma C'hwezh da jav  
evit redeg an douar eus ur penn d'egile,  
hag hi brazaset a druez gant ar pezh a wel dindan ar Spered ouzh he briata hep  
ehan ; skouarnoù diniver zo ganti savet trema ar bed, hag  
e astenn he seizh brec'h a vez o aspediñ Tremazon ;  
hervoudiñ a ra evel ur vaouez war wentloù.  
Pegoulz e vo dieubet gant ar bec'herion ? Pegoulz e pareint Ma Gouliou, dre  
vont e pened ?

### **Gallout a ra an Tad bezout Mamm ivez**

14. Gant bri ha doujañs an ael en deus komzet outi,  
dre ma sent-eñ Ouzhin ;  
hi, e Selaouan outi, dre he diweuz e Klevan klemmoù mab-den,  
dre m'he devez, evel ar vatezh a zalc'h war he dislonkadur pa vez he Roue o komz outi,  
lonket he hegenn,  
brevet he ourgouilh etre he nervennoù ha dalc'het war he c'hoarzh ;  
kavet dezhi an nerzh a sav ar menezeier,  
aet eo e dreistelezh ar silvidigezh.  
15. Evit kement-se pep unan he c'hoantay en he skeudennoù, a *Lakan war wel*, rak nad eus  
Namedon Ma-unan a ziskouez an Hent, hag an c'hoant eus ar salvidigezh zo mat.  
16. He galviñ a ray ar bodadegoù en o metoù,  
goulenn a rint kevrinoù he nerzh diganti  
hag e komzint outi evel d'o Mamm,  
rak mibion Ma Mamm eo ar benedourion.  
Kement-se ivez a ziazazi Em Bodadegoù.  
17. Ne sielli dimezenn ebet  
dre m'Am eus diverket hini Ma Mamm diouzh marilhoù an templ.  
18. Ne redii ket da lidiñ obidoù  
dre m'Am eus gorroet Ma mamm evel Elia betek Ma Annez.

### **Anien Tad-Mamm ar C'hrouour a chom kevrinus...**

19. Ne vi ket hardizh a-walc'h da sielliñ Ma C'hevrinoù. Emgravet eo  
Ma Dekredoù Em Lec'h.

### **...met eured ha marv zo kevrinus ha razh ivez**

Ne savi ken marilh nemet ur c'haier-koun,  
Skriv a ri : Doue En deus gwelet an dimezoù-se,  
Doue En deus gwelet an obidoù-se,  
Me hepken a sparl Ma Morailhoù war ar priedoù hag an anaon.

## **Ned eus nemet karantez ar priedoù a ziazez an eureudoù**

20. Na te, na den na jestraouo Ma Nerzh e penn e *vrec'h toc'hor*,  
en ul lavaret diwar c'haou : « Astenn a ran ma dorn warnoc'h, emaoch gwaz ha  
gwreg, »

peotramant : « Kibellet am eus da gorf, emaoch badezet, »

pe, disakretoc'h : « Da olevet am eus »

ha traoù arall c'hoazh a ra ar briñsed hag ar veleion, a zeu  
a-dreñv Din a lec'h da lec'h

e-doare bamerion lorbus

evit tenniñ splet eus an Nerzh Am eus diskouezet,

eus birvilh ar re izelek ouzh gwel Ma Marzhoù moliac'hus.

21. Setu ! Gwelet Am bez an euredoù e kalonoù an dud yaouank kerkent

m'o devez en em garet ;

p'o devez c'hoantaet anavezout korf an eil egile,

o het kuzh, Am bez e siellet.

22. Hogen kent anavezout o c'horfoù, rak un oberenn sakr eo,

e teuint d'ar Vodadeg a bedo gante hrevez m'az po e ziazezet,

evit ma roy dezhe an Tad donezon sell an aelez, an daoulagad a laka  
glan o noazhder,

o c'huzh diouzh an temptour hudur war spi,

evit ma vint war o gwele evel bouilhadoù Bezhata,

ha neket evel ar gwagennoù o sevel hag o tiskenn evit gouelediñ.

Gronniñ a Rin o joaioù en dinamded, o Lakin da vezout un oberenn sakr.

## **Muioc'h eget ar c'houlpad a dorr an avoultriezh, ar feiz er Mad**

23. Hogen skuilhiñ a Rin Ma Fulor war an avoultriezh.

Ar pried digablus a vo dieub ha rez, gallout a ray dont d'ar Vodadeg evit gouenn

he zestoni diganti,

ul lizher torr-dimeziñ,

he lakaat da bediñ gant ur gwelead all.

24. Mallozh an hini kablus, mar er gouenn Diganin, en Asantin dezhañ,

met en dibennadiñ a ri ober.

Ra zeuy soñj dezhañ eus e wanded eñ e-unan hag an temptour a vez o kantren ;

ra c'houlenni Diganin ankouaat kentoc'h !

25. An danvez priedoù diroll, hag ar re skañv dister

a laka Ma Lec'h pediñ da sal ar gouelioù,

ar re a zave dit o reizher, prederietoc'h gant kas ar bed eget

*doujañs-Doue*,

dave-int gant kuñvelezh d'Am C'homz !

Mar ne dizhont ket d'un dalc'h evezhiek,

na laka ket o anvioù er c'haier-koun.

## **Kement den zo a varv, diwar-se pouez bras ar marv**

26. Chetu c'hoazh ! Pa vo marvet an hini pec'hour a-ouez d'an holl, pe an hini

a anavezez e gevrin disakr,

ha ma teur d'az kerc'hat evit e veziadur,

na ra ket war dro !

Gant kuñvelezh dave ar re a ouel dezhañ d'Am C'homz.

27. Hogen pa vo marvet

ar pec'hour en devez graet Koun eus Ma Aberzh,  
en devez diskouezet anat e vorc'hed,  
er gwrior en doal wenn a-vent gant ul liñsel,  
a zeue gantañ d'ar Vodadeg evit lakaat bara, gwin hag eoul enni,  
a zo eus ul lien kreñv evel ene an hini keuzidik, evel ar gouel er  
bount a-raok dindan Ma C'hwezh war-zu Ma Uhelioù Santel.

28. Salvus eo arouez an traoù-hont d'ar re er c'haso d'an douar,  
el lako en tan  
pe en taolo er mor.

### **Al lid-kanvoù na zegas tra ouzhpenn da zellid an hini marv**

29. Ra vior e chal gant ar silvidigezh  
na gant tonkadur ar c'horf marv !  
Ma Galloudegezh a zalc'ho soñj eus a gement sklisen dister  
e deun an isfontoù,  
ag al ludu douget er pelloù gant ar gorventenn,  
hag o dasorc'ho a-benn Ma Deiz.

30. Peseurt pedenn a ray muioc'h eget pened an den a lezo en e zilerc'h  
heñvel ouzh ur *skavenn*,  
izili goullo hag a vruzun da bouldrenn ?

31. Ma aspediñ evel ma *chourik* pologed an erer diskaret etrezek ar c'houmoul  
ne lam ket e zrougerioù, ar gwalldorfedoù en deus graet e-touez  
Ma Deñved,  
daeadennoù fougeüs e lorc'h da biao an Neñv ha da vestroniañ war an douar  
Em Lec'h.

### **Dre gastiziñ e gorf an hini bev a zihun e gig...**

32. Mar n'en deus ket graet pened pa oa poent,  
e vez pedennoù ar re vev didalvez d'an hini tremenet porzh  
an deñvalijenn gantañ,  
met mar talc'hont d'en em gastiziñ daou ugent deiz pad,  
ha mar ned eo ket bet tizhet *barr* an euzh gant ar pec'hour a ouelont,  
da c'hopr o deoliezh un ael douger-gouleier a ray gweladenn dezhañ  
en deñvalizion  
evit digas sklêrizion ha klouarizion d'e spes reuzeudik.

### **...evit e brestañ d'an hini a vev hep kig diwar-vremañ**

33. Piv a oar piv a vez Em Lec'h  
ha piv a vez taolet en deñvalijenn sklaset ?  
Rak-se e reor emgastiz  
kerkoulz evit ar re geuzidik  
hag evit ar bec'herion foran.

34. Ar re a vez niverus o oueliñ unan kar aet d'an anaon  
na vint ket razh ouzh en em gastiziñ evitañ,  
ra zougint kañvoù hag en em gastizint  
evit ar re a vez marvet en o-unan, en digenvez, dezhe na kuñv na kar d'o  
goueliñ.  
Aluzon o hini marv d'e vreur e vo.

## Bragerezh ha pedennoù kañv na roont ket ar silvidigezh

35. Ra vo berzet pompadoù war an ton bras ha puilhentez a lorc'h,  
Ra vo dismantret ar bolzoù-kañv,  
a zo deoliezh zevot d'ar re varv ;  
ned eus deoliezh nemet e doujañs Doue !  
Kement-se ivez den Mikael, en diazezi evidout da-unan hag evit da ziskennidi.
36. Un deiz obidoù ne vo ket graet Koun eus Ma Aberzh, mes digoret e vo gouel an Tabernakl evit arvestiñ ouzh Ma Zrec'h, rak fatiñ a ra kalon ar feizidi diouzh gwel ar marv ; el levenez e vo digaset soñj eus Ma Diouganou ha Ma *Finwezhioù*.

## Priedoù mat a zoug diougan eus ar mad da zonet

37. Un deiz euredoù  
e ray ar pried evit an holl Koun eus Ma Aberzh ;  
gant e bried e profint Din  
dre o fasianted hag o haelled  
kentañ lodenn o joaioù eured ;  
n'evint ket diedoù mezvus ;  
servij a rint o c'houvidi ken na vo aet a-raok an diwezhañ anezhe.  
Goude bezout en em dennet war o goar,  
kent anavezout o c'horf  
e komzint c'hoazh Ouzhin, hervez m'az po el lavaret dezhe, rak hed-a-hed  
an deiz-hont gante-int eo e vo kaset ar bedenn heñvel ouzh an diouganourion.

An hirañ ag ar beilhadennoù eo ar Veilhadenn 33. Honnañ a bled gant meur a zanvez hep liammoù anat etreze. N'eus hini ebet hag a dalv ent-gwir da dra-diazez evit ar **silvidigezh**, met e doare ur pakad ret-holl e ambroug pep unan anezhe ar veaj speredel vras. Diwar-se, e vez graet **Beilhadenn ar Pakadoù** anezhi gant an test pe **Bisac'h ar Pirc'hirin** gwezhavez. Gwezh ag ar re nac'herion-Doue e komz ar c'hrouour a gompren o emzalc'h difeiz **en arbenn man'd int bet droukskoueriet**, gwezh ag ar **vaouez c'horroet a-uc'h ar Reter (Maria)**, skeudenn kendruez Doue, gwezh eus an **euredoù** (dimeziñ) hag eus an **obidoù**, gwezh eus ar **veleion** a vo difredet kaer ag o labour pa vo kemeret lec'h ar relijion gant ar **pened** (klask ar **Mad**).

Arvez daouek ar C'hrouour, **Tad** (12/4, pe **Tad karantezus**, 12/7) ha **Mamm** (33/16, XVI/9) nand eo na kenanien na daoubennegezh, na divrevegezh (hermafrodek), na mann ebet daouventek ennañ. Tamm ebet a-sort gant un doue daoubennek hañval ouzh an **doue trifennek** (mojenn an drinded) a zo bet **stummet** dezhañ gant an iliz (23/7). Peogwir ned eus ket tu deskriviñ anien ar C'hrouour, e ra hemañ gant skeudennoù e doare ar **Vamm** a **selaoù** eñ outi (33/14) hag e vize homañ e **zanvez pried** peurbad (33/17) evel pa vize ur person distag a-grenn dioutañ. E gwirionez, e komz anezhañ e-unan en e neuz a gendruez, a denerded, a zouster mamm a c'hall eñ bezout, pandeogwir emañ en tu-hont d'ar revelezh. Ur **c'hevren** (33/19) a van e natur, hogen mab-den, **skeudenn** ar C'hrouour (Geneliezh 12/7), ha na c'hall eñ ivez bezout daouek e arvez ha diskouez ken karantez tad, ken karantez mamm ?

Degas a ra an test da soñj ez eus ter c'harantez hag en em gav en **euredoù** na vezant kavet a-gevret e nep lec'h a-hend-all : ar garantez romantel (33/21), karantez an aviel pe an dlead a garantez (**Karit hoc'h enebourion**, Mazhev 5/44), hag ar garantez kerent (da lâret eo ar garantez a vabelezh) pa vez bugalez gant ar c'houlpad atav. Ur garantez **profedek** hollek eo a sav evel-se a-ziwar an ter c'harantez-mañ. Heñvel ouzh **an diouganourion**, eme Doue, e **vo ar priedoù** deiz o eured (33/38), sed perak e talv an euredoù kement ag ur ster **profedek** da birc'hirindourion Ares (**restadig**), un **arouez** a feiz hag a esperañs eus ar pennañ.

## An nerzh speredel n'eo ket en doareoù meurdeuz

- 34/1.** E pep amzer neb a ray Koun eus Ma Aberzh a zougo  
ur sae c'hlan  
hag en diforc'ho diouzh ar bed dre e uvelled.
2. Laka da blegiñ en irc'hier – ra vreinint enne ! - ar bragerisoù  
a zougez evel Aharon,  
o gourc'hemennet Am eus da Voizez da skoed enep d'an hudouriezh  
en amzerioù a voe a-raok Ma Zrec'h warni ha war ar marv,  
war mac'homerezh Behemot hag e sklaved,  
bragerisoù tonius ha kurunennoù a wisk c'hoazh ar briñsed hag ar veleion



*vouzar* ha dizesk,  
evit tenniñ klod anezhe dirak o fideled.

### **Ar speredelezh, bleiz du ar relijion hag ar politik**

3. Dre m'az Tavean diverkiñ o *lufi*; o gourdrouz a zienez,  
o gorad noueañs a ray dit ur blanedenn a-seurt gant renavied nac'h o feiz ;  
dre ma tispenn arouez o bannieloù,  
Ma C'hroaz o deus Hi savet war o c'hont o-unan,  
e rint ouzhit e-giz ur falsprofed,  
4. naoniet e vi gante, o tave d'ar pevar-avel o haroded evit skigniñ  
gwallvrud *an dismeg* war da roudoù,  
pellaat diouzhit brokusted hael an denion doueüs  
a bae dezhe un aluzon a *binvidigezh*,  
na *roint* dit pezh kouevr ebet diwarni, Ma Zailh sakr  
distroet gante.

### **Sikour gant kannad an Tad eo sikour gant an Tad**

5. Hogen goude bezout bet klasket en aner ta goll,  
ta naoniañ gant ta re,  
ta lakaat da grial forzh trugarez digante,  
e koll o c'housked ar briñsed,  
ra yunint, ra c'halvint ouzh Ma Justis, tud diskiant,  
Me serro o c'harvanoù dezhe,  
tremen a ri en o c'hreiz evel Daniel e kreiz al leoned.

### **Skoazelliñ kannad an Tad eo skoazelliñ an Tad**

6. Daoust ha dilezet Am eus Ma C'hannaded d'an dud difeiz ?  
Bez' e Tiazezin evidout an hanter-zeog da bennwir,  
da feizidi er roio dit d'oberenn-zeol ;  
neb a resevo talvoudegezh kant a roio dit pemp anezhe,  
hag ar pezh a roio dit-te Din-Me eo er roio.  
7. Neb az tegemero Ma degemero,  
nep a waranto ta veaj Ma dougo gantañ, ar re a yi kuit dioute  
goude bezout o gweladennet, n'o Lezin ket emzivad hag o Gweladennin  
en o digenvez ; kerkent ha bremañ end-eeun ar re a vez ouzh az servijout,  
a gemer preder ganit, en em dro ouzhit evit da arz ha da alioù, a anav ar madoberoù  
a Skuilhan  
war ar re a skoazell Ma C 'hannad en e drevell.  
8. Bez' e tiazezi, gant muzul, diner-servij Ma Bodadegoù evit da remziad  
hag ar re a zeuio da c'houde,  
met ne vo nikun o resev hanter-zeog ar profed war da lerc'h.  
9. Holl ar re er roio dit didro kaer,  
e-giz Hiram hag a roas da Salaun ar sedr hag an aour  
ma savo Ma Zempl,  
a resevo o gopr eus Ma Dorn.

D'ar **restadig** (26/1, 29/2) ha d'e **vreur henañ** (16/1) e tegas soñj ar Veilhadenn 34 e vo amzerioù kalet da dreuziñ gante, o devo da c'houzañv trubuilhoù ha dioueroù hag e rankint treuzveviñ dre vastiñ o-unan d'o ezhommoù danvezel kerkoulz ha speredel ; rak dre en em sternañ ouzh al labour diaes bras-hont a zo an **dihun** (36/4) eus ar bed, hemañ a gaso muioc'h a gudennoù dezhe eget a skoazell epad pell. Rak **dle eo d'ar bed cheñch** (28/7), dilezel ar reizhiad pe sistem **choaset** gant **Adam** (2/11-5). Evel-just e vo difennet kousto pe gousto ar reizhiad-se gant he dalc'hidi : relijion, politik (mab disakr ar relijion) hag o eilerion : arc'hant bras ha skiantoù.

## Ur mision bras-ec'hon ha hir-meurbet evit rummadoù ha rummadoù

**35/**<sup>1</sup>. Ledan bras eo Ma Fark, den Mikael.

D'e bevar c'hostez ez i  
evit broudiñ ar vederion, degas Ma C'homz  
en o zi ;  
kostez-ha-kostez gante e torni an tañvouez gant da falc'h,  
e lezi da gemenoù dezhe,  
e teski dezhe pediñ.

### **Pediñ ned eo ket aspediñ ; dere'hel er spered eo ...**

2. Pediñ ned eo ket goulenn an aluzon,  
Ma Silvidigezh nad eo ket un aluzon, gopr ar penedour eo,  
sujñ d'Am Mennentez adsevel an amzer ma rede Em Liorzhò  
ar stêrioù Tigr, Pishon, Gihon en Ashour,  
a vo adwelet etre ar soulegi,  
ur wezh graet an Eost,  
pa vo lezet da baouez o filc'hi gant ar vederion  
hag int da stouiñ ouzh o glannoù da dorriñ o sec'hed.

### **... e tleer seveniñ ar Mad hag adsevel Eden**

3. Neuze e Lakin ur arsav d'an deizioù ha d'an nozioù,  
e Lakin un ehan d'ar gouañvoù ha d'an hañvoù,  
ar red eus Ma Stêrioù a vano a-sav evit na zinaouint ket mui e  
faoutoù an tir  
a daolo o spesoù.  
4. Kelenn a ri da bediñ,  
da lavaret eo embann Ma C'homz ;  
a-du-arall lavaret Am eus penaos e vo komzet ouzh an tad hag ar vamm c'horroet  
a-uc'h ar Reter.  
5. Na ziskouezi da zen an tachad lec'h m'Emaon o komz dit,  
Na roi neudenn ebet, tamm *pailhurenn* ag ar pezh zo bet stoket ganin  
na vo distroet da feizidi diwar an doujañs-Doue wirion.  
6. Distagiñ Ma C'homz a-benn He seveniñ,  
setu an deoliezh wirion.

### **Ober hep prederiañ ned eo ket e dalc'h mab-den**

7. E kement degouezh zo e talc'hi gant skiant ha muzul,  
bez' e kemeri amzer d'en em soñjal, rak n'eus Nemedon Va-unan a vez en diamzer,  
Ma Nerzh-Me hepken a *zistegn* hep gortoz ;  
da nerzh-te a vo ez pasianted hag en alioù a gemeri ;  
8. bez' e tiskuizhi, rak skuizhder a denn spered digant an den ;  
9. na vo ket daoulagad kig ganit, a varn hag a c'hoanta, hogen  
daoulagad an diouganour en deus gwelet Ma Reizhted,  
en deus krennet dirak Ma Sklêrizion,  
en deus gouelet diwar *kaouled* Ma Goulioù.

### **Furnezh, evezh nag ivez karantez ar penedour gwirion**

10. Na nac'hi da alioù da nikun, ha eñ dizeol ken-ha-ken zoken ;  
nac'hiñ a ri dezhañ an donedigezh Em Bodadegoù avat, rak a-zrebi ar bed-mañ e teraou  
Ma Silvidigezh,  
ha dre ma n'eo ket Ma Nerzh ez talc'h  
met da evezh hepken.

### **Galvet eo an holl dud a feiz da cheñch ar bed**

11. Emglev breuder a ri gant bodadegoù ar sinagogoù,  
re ar sujidi da Zoue,  
nep hini eus Ma Mibion na vo un estren evidout.  
12. War kansell ar Vodadeg e renki Ma C'homz evel ma vez He  
bannet gante,  
ne belli nikun eus Ma Levrou,  
hogen pellaat a ri al levrou tud,  
re Pêr, Paol,  
*at*-Tabarî ha re ar rabined,  
rak Em C'homz hepken en em gav an doujañs-Doue nemeti.

### **Benveg ar Mad eo ar penedour, neket e Vrec'h**

13. Me zo da Aotrou,  
Din-Me nemetken e tegouezh an *derez*-hont,  
disamm-eñ war un dro gant da gurunenn ha da vazh-c'hourc'hemenn ! Ned eo ket  
dleetoc'h anezhañ dit  
egret ar bedenn d'an delwennoù.  
14. Douget e vi gant Ma C'hwezh. N'ankoua ket da lec'h !  
Bez' out ar c'hleze ;  
ned eo ket ar c'hleze ar Vrec'h e sav.  
Diwar da houarn e Torrin chouk balc'h ar briñsed, e Ledin en  
huan ar re binvidik hag ar re greñv, tra ma chomi-te kuñv hag habask neoazh.  
Un nebeud deizioù c'hoazh ha n'Am gweli ket mui,  
bez' e vin dizehan war da gleiz.

**Beilhadenn ar Gomz Sevenet** (35/6) e vez graet lies gant an **test** ag ar Veilhadenn 35. Kavout a rer enni ar **Promesaoù** bras (2/8, 33/36) grataet d'ar **rummadoù** a zalc'ho da **vediñ** (35/2) **Park** ar C'hrouer keit ha ma vo ret evit bodiñ ar **restadig penedourion** a vo trec'h war an **droug** hag ar **marv** dre adsevel ren ar **Mad**. Erbedoù nevez a zeu gant ar C'hrouer a-zivout : An **deoliezh** (35/6) e doare koun **da seveniñ**, Disterdra goull an traezoù « devot » hag al lec'hioù da zoug-chañs e tachad-mañ-tachad (35/5, 35/13), An **emglev** d'ober gant ar Yuzevion, ar Gristenion hag ar Vuzulmaned (35/11), tiegezh Abraham, a asanto a-walc'h deiz pe zeiz d'an **emglev**-hont, Pegen a-bouez eo teurel evezh d'ober ouzh ar **furnez** ha **kemer ali** (35/10).

### **Dalc'hmat e vez mab-den etre krog ha diskrog, aet skuizh buan er goanag**

**36/1.** Dija, den Mikael, korzenn voan dister,  
en em voazet out ouzh Ma gwelet,  
da selloù na vez ken o pariñ gant enkreuz Ouzhin,  
da zaoulagad a riboul avat.  
2. A p'o dije an denion paotaet o lagadoù  
evel an aelez zo gronnet tro o fenn anezhe evit na goll  
gwel Ac'hanin,  
en em ziskouez a Rajen d'an dud.  
3. Kerkoulz all e vez debret digas gant ar fideled ar bara diskennet ag an  
Neñv,

dre ma vez treboulet o c'halonoù.

4. Dihun ar pened enne a-benn ma treizhint Ma C'hig ha Ma Goad

e glac'har ar morc'hed.

5. Dalc'h kont eus o gwanded divent koulskoude :

Ra c'hoursejint da Ma Fred kerkent ma vint gwalc'het !

An naon eus ar morc'hed,

a zo an naon eus Ma Bara,

d'o c'haso ouzh Ma Zaol !

6. Ar pec'hour pennek biskoazh n'en devez naon Ac'hanin ; rak-se ne vo-eñ ket degemeret er Vodadeg

keit ha ma talc'ho d'en em *gargiñ* a zisantelezh.

7. N'el laka ket da grediñ ema degemeret ouzh Ma zaol, rak startaat a raio en e bec'hed,

da enebour gwashañ zoken n'en douelli ket mod-se,

hogen diwall a ri e silvidigezh.

8. Yudaz a zebras ouzh Ma Zaol avat, a-benn ma voe sevenet Ma Chomz ;

Gant na vo ket sontet Ma Mennozhioù !

### **Paot na glevont namet ar pezh a fell dezhe klevet**

9. Laka da virout Ma Reizhoù ! Kas diwar dro *troidelloù* an doktored ! El lavaret Am eus c'hoazh.

Ro Ma C'hig d'ar c'heuzidig, keuzidikaat a ray muioc'h,

ro-Eñ d'an hini disakr, e tougo e wall en e washañ !

### **Ober diouzh ar C'hrouer, eme ar relijion, e-giz ma fell dezhi**

10. Na vi ket evel priñsed al lid hag ar veleion, a fell dezhe dirak o bodadegoù

Ma c'has evel an olifant galloudus,

dre lavaret : « Pleg an daoulin, stou davet ar re-mañ d'o bennigiñ ! », peotramant :

« Sko ar re-se gant da drompilh, mallozh-int ! »

### **Hogen, ken tra nemet bennigiñ zoken na c'hell den**

11. Na c'halv ket Va Bennozh ! N'En deus ket gortozet da bedenn evit dont war Va Re Venniget ;

ar Bennozh,

ar Mallozh na Vennan ket

na zeuont ket.

12. Met lakaat a ri da zaouarn war ar re a c'houlennno un arouez

Em Anv diganit,

rak un Nerzh a zeuio ac'hanout hag o leunio,

o gronno gant ur vogedenn c'hlan hag a bik daoulagad an temptour,

a dec'h en ur oueliñ,

a zilaosk e breizh.

### **Kement tra holl a vez e dalc'h gant ar garantez nemet salviñ daoust dezhañ un den dizeol**

13. Da nerzh a yac'hay ar glañvourion,

dre e hune e tiskouezi an hini didamall d'ar barner zo e galon an entremar,

herzel a ray a-ziabell brec'h ar fallakr,  
teod ar falstest hag ar gwallvruder,  
d'an hini laosk e galon e tegaso soñj dezhañ ag e zilez,  
d'ar jousour ar gaou a ra d'e re,  
kreñvaat a ray an hini gwan,  
14. hogen ne ray ket marzhoù anezhañ,  
ne salvo ket dre heg ar re disakr,  
betek Ma Uhelioù n'o skrapo ket,  
bez' e vo anezhañ betek Ma Uhelioù evel nerzh ar mul a zoug ar  
bec'h,  
pakad ar re a ray ar bignidigezh ganit.  
15. Mont a ri da hanterour pa savo arvellerezh etre breuder,  
gourdrouz a ri ar gaouiad,  
broudiñ a ri al laer da zaskor,  
ar fallon da zic'haouiñ.

### **Ne varni den, a-soñj zoken**

16. Hogen ne varni den, nag a-ouez d'an holl,  
nag a-guzh ;  
na vo ket ag an disterañ barn e don da benn,  
rak n'he zagelli ket muioc'h eget un c'hwenenn,  
hep gouzout dit e lammo war da deod.  
17. Enor an diouganour eo chom hep barniñ,  
skuilhiñ ar peoc'h ;  
memes pa vez luc'hed o strinkiñ ag e zaoulagad  
ne drouz ket anezhañ,  
met broudiñ a ra Ma Mibion d'ar pened,  
e lavar dezho diwall diouzh an euzhuster o stlej trema an islonk evel  
ur maen en-ere an treid ;

### **Annez ar re varv diskouezet d'an test gant ar C'hrouer**

18. Rak gwelet az peus annes ar spesoù ; straket o deus da zent,  
gwennaet az peus evel ur c'hozhiad gant an euzh,  
foetet o deus da zivrec'h en deñvalijenn evit pellaat ar skeudoù diouzhit,  
huchet az peus Din m'az Tennin trema an deiz.

### **Red eo henchiñ, aweniñ, na c'hourc'hemenn**

19. Ne c'hourc'hemenni da zen ebet,  
bez' e tiskouezi Ma Gwenodoù a-benn d'an Uhelioù Santel.  
Pa vezo goulennet ouzhit : « Peseurt anv e tleer bezout da blij d'an  
Aotrou ? »,  
respont : « Kalz na vern ha anvet out Piz pe Gavr, rak mar  
grez ag da vuhez e gwel Doue, ur brud a vadelezh, a bened hag a zeoliezh,  
e teuy da anv da vezout ker bras hag hini Moizez pe Elia ».

### **Ar bugel bihanik, ul labourer d'an dazont n'eo ket anezhañ ag ar re zisterañ**

20. Kar ar vugalez, evesha warne,  
kelenn-int gant habasketed ha degemer-int er Vodadeg, dre ma'z int kevret gant

an holl  
ur bobl a velegiezh ;  
gant na rint ket Koun eus ma Aberzh avat kent bezout  
pec'herion,  
ken na vo distaget gerioù a geuzidigezh gant o zeod ha na vo tañvaet an daeroù diouti.

### **Diskuliadur Ares dindan argad ar bed**

21. Ur garez a vo da vuhez war ar re dizeol ;  
na vezint ket evit gouzañv er gwel ac'hanout,  
priñsed al lid hag ar veleion dreist-holl,  
e-leizh ag o emsavidi disivoud ha razh,  
rak ar vuhez a Rin dit Evidin nand eo ket tamm evel o hini.

22. Gaou ha dismeg az lakint da c'houzañv evit amprouiñ  
da guñved ha da wirionez.

Na dosti oute namet mar galvont d'az klevet, neuze  
Ma Spered eo az Kalvo davete. Keneve-se, chom pell dioute,  
dañjerus int.

### **En tu-hont d'an trubilhòu ema an eurüsted ouzh hor gortoz**

23. Youc'h e pep lec'h : « Berr eo ar vuhez-mañ ; ned eo ket e bloazioù e vuzuler an  
eurüsted, met e peurbadelezh ; pep unan n'en devez ken nemet amzer ar morc'hed,  
rak keuz ar spes na ra namet ouzhpenniñ d'e anken !  
Selaouit ar Gomz am eus resevet hag ho salvit ! »

**An Divamerezh Trec'het** ez eo bet graet eus ar Veilhadenn 36. War evezh kaer e kav d'an **test** bezout tre dalc'hmat, hogen merzout a ra ar C'hrouer e  
vez distroet a-spered meur a wezh ha d'e lakaat war ziwall neuze ouzh an digendalc'h, mammenn a **zizeoliezh** disakr. Meneg a ra **Yudaz**, rak an  
**dizeoliezh** vantrus eus an abostol-hont : an drubardiezh, na voe ken abeg dezhi namet en e ziouer a zalc'husted, e zievezh hag e zivamerezh. Dre  
lavarout e **Gomz Sevenet** (36/8) diwar-benn **Yudaz** e fell d'ar C'hrouer, evit ar pezh a sell d'an dachenn brofedel atav, berziñ en ul lakaat war ziwall  
ouzh abegoù tremeniat e-giz an divamerezh hag a c'hall mankoù marvus disoc'h dioute bepred.

Dav eo lâret evelkent **Komz sevenet** (36/8) na dalvez ket kement ha **Komz** kaset da benn, met **Komz** verzet. Evel-henn ema ster ar **Gomz sevenet** e-  
keñver dalc'h ar **brïñsed** a gav gante lakaat da **blegiñ** Doue ouzh o c'hoantoù-int evel un **olifant** er sirk (36/10), daoust m'en trubardont ha razh dre  
zivamiñ, amgrediñ pe dre zievezh hepmuiken. Diwar **daouarn** tud disterig avat met dalc'hus eo e teuy en-dro an **Nerzh** speredel hag ez ay da goll an  
tech da **varniñ** ha **gourc'hemenn** d'ar re all (36/16-19).

### **37/1.** Emberr n'Am weli ket mui

ha n'Am c'hlevi ket ken, den Mikael.

Leugn da zaoulagad ha da zivskouarn evel Ma Zestoù goude Ma  
Zrec'h.

2. Gant na vo ket dit Ma C'houn heñvel ouzh ur goumoulenn hag a sav  
ha steuz diwar da zaoulagad pa vez deizioù yen ha trist,  
e-giz ma vez evit an engroez.

3. Bez' e c'halli lavarout : « Gwelet am eus Doue,  
Doue ma silvidigezh. Fiziañs am eus bremañ, rak gwelet am eus Silvidigezh ar  
penedour hag e Nerzh ! »

### **Dougen testoni hep aon nag en em spazhiñ an-unan**

4. Ar Pezh az peus gwelet ha klevet embann-Eñ war an toennoù hag er bodadegoù.

### **Petra gwashoc'h eget trokiñ Gwirionez ouzh pinvidigezh**

5. Dispriz ar madoù bras ha pinvidigezh a vo kinniget dit evit da lakaat da devel,  
evit embann az peus graet un hunvre,

evit adpreniñ da levrioù,  
o stlepel er buched,  
rak az lakor dindan lorberezh ha temptadurezh hoalus bras.  
O spino da spered, az c'hasan da get !  
6. Diwall diouzh an temptour ! Roiñ a ran dit nerzh a-walc'h da vezout trec'h warnañ,  
ha koulskoude e lako da zoubliñ e droioù ha strivoù gwidreüs.  
Kouezhet eo dezhañ Eva, hogen aet an trec'h gant Maria warnañ.  
Gra ur geneil hent anezhi, da hentez ! Na ziskrog ket diouzh lostenn he mantell !  
Ouzh he gwelout e tec'h an naer en he raok en ur c'hwibanaat.

### **Gwarez ar C'hrouour da dud ar mad**

7. Evit an denion az argado, e lavaret Am eus : Difennet e vi dioute gant ul leizh a sent  
aveet a-ratozh ;  
en ur C'hwezhadenn az Savin a-uc'h dezhe.  
8. En em astenn a ri Ma Gwarez war ar vederion a labouro er Park  
ganit ;  
gante-int ivez e vo gouzañvet ar re zrouk ha korvigelloù an temptour.  
9. An treitour en o zouez, an neb a grog d'arvariñ,  
pella-int diouzhtu-kaer !

### **Kurunet e vo ar benederion hag ar vederion d'ar c'hloar**

Hogen ar re a dañvo betek penn an eurüsted d'o foan,  
na fazio nag o gred nag o deoliezh,  
e Rin anezho ur steredeg skedus e lein Ma Uhelioù Sakr.  
Bez' e vo un amzer d'o foan  
hag ur beurbadelezh d'o gloar.  
10. Mes ra Vin doujet gant an holl ken n'o devo peurachu o gwezhiad labour.  
Ra virint ar Gomz a Roan dit-te hag an Hini Am eus roet d'Am  
Diouganourion ha d'Am Zestoù ez raok.

**Beilhadenn ar Berzoù**, ur chapelad erbedadennoù eo ar Veilhadenn 37 hag a denn dreist-holl d'ar fazioù zo da chom hep mont gante hag arvar ar  
riskloù ag an distro eus an **droug** gant ar **benederion** zoken. Un distro hag a ranko ar **restadig** diwall dioutañ gant **evezh** (XVI/14) ha start, rak ar bed,  
evit abegoù na vezont na splann na poellek atav, a savo taer a-wezhioù enep diazezadur ar **Mad** er gevredigezh.

### **Ret eo stagiñ gant al labour, paotred ha merc'hed**

**38/**1. Den Mikael, paouezet az peus a greniñ,  
frealzet ha kreñv out.  
2. Kroget Am eus ennout ha da lakaet war lez Ma Fark ;  
mall eo ma vo graet an Eost,  
ma vo salvet ar bed,  
kent na bilo *glavier* pec'hed ar pec'hedoù.  
3. Gant na Zeuin ket d'Am Fark hep da gavout ennañ !  
Em-raok, dre-holl, pa Vezen ganeoc'h,  
Am bez kavet Ma Mamm ha Ma Zestoù,  
Groa kemend-all !

### **Diaesat eost avat, mes ar medour nad eo ket en e unan**

4. Eus da nec'hañsoù Am eus da frealzet,  
gouzout a ouezez en az Heulian war da du kleiz.

Hej da falc'h dirazout !  
Pella an drein a strob da gerzhed dirazout a-benn bleiniñ Ma  
Fobl betek Ma Uheliou.

5. Endramm ha sanailh !

Heñch hag atiz d'ar bignidigezh !

Komzet Am eus dre hañvaladennoù da gadarnaat da fiziañs,  
fiziout ar Wirionez ennout didro-kaer,  
rak hañval ouzh an deñvalizion e vez lavar ar skiantoù  
pa Vezan-Me ar Sklêrizion,  
hañval ouzh ar marv pa Vezan-Me ar Vuhez.

6. Roet Am eus dit ur wreg da bried ha benniget Am eus ho eured. Tomm eo dezhi  
he c'halon ouzhit ha hi kennerzhus dit,  
stardadenn he bronn a gadarna da galon ;  
dinaou a ra d'evet dit, da servij a ra he-unan da goan p'az pezoaniet a-bad  
an deiz.

Ra vevo anezhi da virviken ez kichen war lez ma Fark, war  
gwenodennoù Ma Menezioù !

### **Chom dizimez n'eo nag ur vertuz nag emsavus**

7. Na vi ket evel ar re uhelek o youl a bella diouto maouezed ha bugalez,  
a wisk sae ar gwerc'hezed, en ur grediñ bras an tamm anezhe, en em uhelaat e vertuz  
dirak an denion

hag o krediñ Ma servij gwell ;

8. hogen ankounac'haet o deus Ma C'homz, tud diboell ; o *gwallet* en deus an temptour  
dindan o sae, leugnet en deus o c'halon a vrasoni ha diouiziegezh.

Te, den Mikael, bev e-ser da wreg ha da vugalez dirak

Ma holl Vodadegoù

evit diskouez lec'h m'ema Ma Mennentez.

Ar **Priedoù Testoù Mennentez Doue** (39/9) e c'haller lavaret eus ar Veilhadenn 38. Ur wezh c'hoazh e **atiz** (38/1) ar C'hrouer d'an **east** eus ar **benedourion** a lako harz da gresk ar vuhezegezh eus an danvezel-ha-poell-holl, a vefe **pec'hed ar pec'hedoù** (38/2) a pa c'hoarvezfe an holl-ren anezhi. Grataat a ra ar C'hrouer adarre e vo harpet an east garv-se a-ziwar laez. Bez' e vo, emezañ ivez, an nerzh **diouganel** en e greñvañ e kreiz an tiegezh (**gwreg, bugalez**, 38/9), ar pezh a zegas soñj dimp ag al lavar brudet : « **Ned eo ket mat e ve an den en e-unan** » (Geneliezh 2/18).

### **Doue a oar holl-razh hep deskiñ, an den a zesk-eñ**

**39/1.** A-benn arc'hoazh Am gweli c'hoazh

ha n'Am gweli ket mui,

padal evel un aezhenn skañv e klevi Ma Anal pa

Gomzin dit c'hoazh diwezhatoc'h,

rak ne c'hallez ket az pout soñj eus ar goulennoù diniver a reor ouzhit,  
eus ar c'helennoù az po da *skigniñ*.

2. Na respont ket ac'hanout da-unan,

goulenn amzer ar bedenn,

gortoz ma Komzin ouzhit !

### **Moc'herezh ar buan-ha-buan ha kredenn ar skiant-holl, ar gwalloù meur a-vremañ**

3. Az pezet diegi d'an hast ha d'ar skiant ;

an dorioù int dre lec'h ma teu an droug er bed !

Din-Me ar C'halloudegezh hag ar Ouiziegezh ;



dit-te ar muzul, ar basianted hag an deoliezh.

### **Na hentiñ ar re varv hag ar « sent »**

4. Ouzhin-Me hepken e komzi,  
an holl a ri ur seurt ha razh.  
A-enep d'ar pec'hed azeuliñ  
o berzi, ar re a gomz da speredoù estroc'h eget Doue,  
a ouestl dezhe nevedoù hag o ro kinnigoù,  
d'an anaon lezet brud a zeoliezh hag emaberzh war o lerc'h !  
Marv eo ar re a bed ar re varv.

5. Ned eus nemet ar Vamm a glev ouzh he bugalez ;  
ar re a gomzo outi er ray gant skiant-vat,  
en ur c'houzout ned eo ket ar Vuhez eo a skuilh anezhi  
met ali, frealz ha nerzh.  
Ha na rez-te kenkoulz all hiviziken ?

### **Siwazh, e c'haller dispenn an ene savet d'an-unan**

6. Na zistro ket war gil gant da hent ; na zeu ket en-dro war da giz, den Mikael.  
Evel un naer, ema ar pec'hed az peus dilezet ennañ  
war spi e skoasell da roud ; e flemm  
az lazho ene ha razh.  
Bez' e Kerzhan war-raok ganit ;  
Ma C'hammedoù n'az ambrougo ket war-dreñv,  
hag e vi hep Gwarez.

7. An deiz m'en em goll da ene, na kerent na keneiled na c'hallint tra evidout ;  
penaos bennak e redint a-gleiz pe a-zehoù,  
na mui eget dour a ev an douar goude ar glav  
na zalc'hint da ene.  
Na chom ket strammet gant kerent ha mignonned dizeol,  
hag az kar, padal na zegemeront tamm ar Gomz a roez dezhe !

### **Kar an holl dud met ne zarempred ken nemet ar re vat**

8. Gwell e vez dit bezout gant kileed strizh war da dro, na roont dit  
pok ebet, tamm ger karantezus,  
hogen degemeret dezhe Ma C'homz hag int d'He seveniñ.  
An toulloù kamambre n'hadont ken nemet gwander.

9. Hevelep tra gant an denion na zistagont ket Ma Anv,  
abalamour man'd int bet gwallskoueriet,  
hag int da vevañ evel-kent hrevez Ma Reishted,  
o c'hompagnunezh a vo emsavoc'h dit eget hini *devoded* gwan o c'halon, hag  
int o pediñ ha pec'hiñ war un dro.

10. Gwalleur ebet n'az skoo,  
mignoniezh widal ebet na glasko gwalliñ ouzh da silvidigezh,  
gant na roi ket krog dezhi.  
Kement Tra-Holl Am eus lavaret-amañ  
a dalv ivez evit da feizidi  
ha rummadoù da ziskennidi.

hollvedel dreist-ordinal bras ha hollbouezus.

## An neb en em ouestl d'ar Mad n'eo ken mann ebet evitañ e-unan

**40/1.** Setu an noz diwezhañ m'Am gwelez.

Dalc'h garanet don Ma Dremm ez taoulagad !

2. Eus al lec'h-mañ avat, na ra ket ur santual,  
na lez ket da grediñ ez On deuet  
ha aet On kuit da c'houde.

3. En em ziskouezet On hepmuiken, ha komzet Am eus gant Mouezh un den,  
rak da destoni a sikouro da drec'hiñ gwanderioù ar c'hantved-mañ,

4. hogen bez' e Vezan e-metou holl ar re vodet Em Anv  
evit seveniñ Ma C'homz

a-holl-viskoazh

ha ken na vo Ma Deiz.

5. Kae, den Mikael, gwisk da votoù !

Ren Ma Fobl war Ma Uhelennou Santel  
men o C'hortozan !

6. Ma Zest out hiviziken,  
ned out tra ken evidout da-unan.

An drizek a viz ebrel 1974. An **test** eus Ares, danvez Breur Mikael, **breur henañ** (16/1) Pirc'hirined Ares, en em gav gant Jezuz, **kannad** ar C'hrouour, evit ar wezh diwezhañ. Ne ouez ket c'hoazh anezhañ e kejo gant ar C'hrouer e-unan 44 miz diwezhatoc'h, ha kadarnaet en e garg a **ziouganour** gantañ (XXXVii/2, gwelet Al Levr, eilvet lodenn diskuliadur Ares), al lesanv-hont a voe roet dezhañ c'hoazh amañ end-eeun (35/9). Neoazh, daoust n'eo ket bet rannet da vat ar ger **diouganour** er Veilhadenn 40, kadarnaet eo en un doare splann enni en deus fiziet ar C'hrouour en **den Mikael** ur mision meur a-bouez bras-kenañ. Sed aze en arbenn a betra ema goulennet digantañ na vezout **tra ken evitañ e-unan** (40/6) ha bezout-holl diwar-vremañ evit **Tad an Hollved** (12/4) ha **Mad** an denelezh da zont.

# Al Levr

E 1978 e roas an test  
d'an diskuliadur-mañ,  
resevet end-eeun digant ar C'hrouour e 1977,  
an titl  
Al Levr  
awenet diwar ar werzad I/11:  
*Digor a rez al Levr mat, erfin.*

Kemennadenn :

Evit na vo ket kemmesket  
gant daveoù  
An Aviel Roet e Ares  
a oa bet rannet e Beilhadennoù  
niverennet e sifroù arab: 3, 15, 29, 38, h.a.,  
**ez eo bet rannet gant an test**  
**Al Levr**  
**e pemp Teofaniezh,**  
**pep a zeiziad ha lodennet e Chabistroù**  
**niverennet e sifroù roman: III, IV, XIX, XXV, XXXIX, XLII, h.a.**

---

Ar gerioù ha frasennoù etre krommelloù  
e testenn an diskuliadur  
zo klokaennoù  
ouzhpennet gant an test e-unan  
evit aesaat kompren  
ha dibuniñ en un doare flour  
ur Gomz hag a veze c'hwezhet ennañ he ster  
en ur glevet ar son anezhi war un dro.

**Ha menez Sinai a vogede a-bezh, dre ma oa diskennet warnañ an Aotrou (Yahwe) en tan. Hag e save e voged evel moged ur forn hag e krene ar menez a-bezh, meurbet. (Ermaeziadeg 19/18)**

**Kemenn,  
d'ar 17 a viz Gwengolo 1977, en ur gêriadenn eus ar Var, Bro C'hall**

Bez prest !

## **Kentañ Teofaniezh** **D'an 2 a viz Here 1977, Ares (Jirond, Bro C'hall)**

**Noz an daou a viz 1977, Ares, Jirond, Bro C'hall.** Michel Potay, hag a zo bet test Jezuz c'hoazh e 1974, zo dihunet gant un trouz iskis o tont eus an diavaez : stirlink ha stokoù houarn. Dre un nor-brenestr e wel an noz o lugerniñ. Klezeier ha skoedoù a-viliadoù hag a hañval ouzh en em stokal. Arme ar mad enep arme an droug ? E tu penn a-dreñv ar porzh e tiver evel maen-teuz gwenn a-red diwar mogerioù ar chapel a zo sklêrijennet he fenestroù ent dreistnatur eus an diabarzh gant an hevelep goulou. A-herr en em wisk an **test**, treuziñ a ra ar porzh, en ur greniñ, en trouz hag el luc'hed. Divorailhet e kav dor ar chapel. Ha eñ mont tre. Strakal a ra ar framm koadaj, hañval ouzh tarzhiñ e vize. Da vaen-teuz gwenn pe lava e seblant troiñ ivez ar magorioù diabarzh. E kreizig-kreiz an tousmac'h-hont ez eus un derenn c'houlou en he sav nad eo ket brasoc'h anezhi eget ur vazh ha diouti e sav ur **Vouezh**.

**Ar C'hrouer, manet war-dav abaoe Mouhamad, a zistro...**

**I/1.** Gwelet a rez an Distro.

2. (Evel) an Hini Mat a ro ar Gomz, e(n he) roez.
3. Ar mud a skuizh al lagad.
4. Digor toull da c'houzoug, lavar ar Gomz, bez' Ema.  
An dent a harz ar Gomz ; ar re varv, stardiñ a ra an(/o) dent.
5. An Hini Mat a lavar: “Serr levr mab-den ! Digor a rez (al) Levr mat dirak ar vreuder.”
6. Serr (el) Levr ar c'hantvedoù !  
Serr, nemet Mouhamad !  
Eskemmerion eeun e vez e vreuder ;  
diouzh fealded, e roont eskemm mat.
7. Moshe(= Moizez), e vreuder ; Yeushou(= Jezuz), e vreuder,  
an(/o) divrec'h (a bouez) war ar(/o b/)vreuder,
8. (hag) e c'hourvez an noz war ar vreuder.

**...evit dieubiñ mab-den diouzh kelennadur an dogmoù mestronius**

9. An Hini Mat a lavar: “Serr al levr (eus) mab-den !”
10. Skriv al Levr, ta lagad digor ! Golo ta zorn, (rak) ar goukoug, he flouradenn zo dezhi he beg !  
Bez' ema he naon ar mor hep glann, (lec'h) na besketez ket.
11. Digor a rez (al) Levr mat erfin.

Serriñ a rez levr ar c'hantvedoù.

### **An donezon a Wirionez roet d'an neb a selaou ouzh ar C'hrouour**

12. Komz Mikal Ma C'homz.

13. Mikal a ev Ma Dour. E deod, an Dour a walc'h ar galedenn (anezhañ), (ema evel) un dorn gwenn.

Diveriñ a ra ar fank (diouzh) e benn ; an Dour a ya en ur pleg argant.

14. (D'e dro) e walc'h Mikal e vreuder ; roiñ a ra an Dour.

### **Adkavout denion ar mad a vo ur pezh labour tenn**

15. Mikal a glask ar vreuder ; en divharoù a(/en em) stard

ema ar vreuder, stardiñ a ra an divharoù.

Mikal a(/na) wel (namet) an divharoù, an divharoù, (evel)

an evn a glask ar geot (e klask-eñ).

16. Digor an divharoù ! Lammat a raont, faoutiñ a raont ar goulioù. An noz az sko

(evel) ar bugel ; daer an abadaez, daer ar beure a vez ganit.

17. Douget e vez an naon gant an divharoù (evel) ar falz(/filzier)-koad. Dougiñ a rez ar Frouezhenn ; skoet e vez ta vrec'h gant ar falz(/filzier)-koad ; laosk (ar Frouezhenn) en (o) dent !

Ta vrec'h troc'het ned eus kur ebet dezhi.

18. Debriñ a raont ar Frouezhenn (neoazh) ; ur c'har a(/az) heuilh.

19. (Met) ar c'har a wisk Ma Zroad, a zorn Ma Heiz, ar gag

(a lenn) el Levr, dalc'h pell ar Frouezhenn (diouto) !

### **Bezout anezhañ ha dalc'hour kement-zo-holl, ned eus nemet unan, ar C'hrouour**

**II**/1. Bez' Am bez. Bez' e Vezan.

2. An heoleier a dro Em Dorn. (Hogen,) Ma Dorn zo mil Dorn Dezhañ ; da lagad a(/en em) astenn, a deuk.

3. Diskenn a ra an Hini Mat, ema (ouzh) traoñ ; ez a (tu) dehou, ema (tu) dehou, (pa) Lavarán (dezhañ).

4. Diskenn a Ran, Emaon (ouzh) krec'h ; ez An (tu) dehou, Emaon (e-)kreiz. (Bezout On an) Hini ledek.

5. Va Avel (eo) an Hini Mat, Va Avel (eo) Mikal.

(d'an Avel) ar breur a zigor ar skouarn ; he blevenn eo (evel) an douar,

leun (eo ag) an Dour Glas, an hadenn (a zegas an Avel).

### **Gant ar vuhez speredel e vez adstaliat ar C'hrouer e mab-den**

6. Ma Brec'h (evel) ar wezenn c'hlas a ya (e/)ar faoutenn (ag ur skouarn).

7. (Ober a ra) an trouz an olevad sec'h a wisk an askell c'haozan (hag) ar mestr eus ar gont(/c'hontoù).

(Mar) digori da skouarn (d'o zrouz) leun(iet eo) gant traezh.

8. Ar genoù a ra an trouz. Hebiou d'ar gwir (ez a) an trouz.

9. Ul liorz er penn (eo) ar gwir.

10. Lagad (an) diabarzh a wel ar bleuñv ;

lagad (an) diavaez a gont ar bleuñv ;

11. (neuze) falc'het eo al liorz, gwerzhet.

12. Kontiñ a ra an den bouzar an trouz(où) Em Zi.

13. Goeñvet (eo) e c'henoù, sec'hedet eo (gant) kontiñ ar gwrac'hellou ;

troiñ a ra an trouz ar gwrac'hellou, (o distrew evel) an aezhenn.

14. Bez' e kont an den, bez' e kont an den ;  
an hunvre a guzh an noz.
15. Serr levr ar c'hantvedoù, (rak) kontiñ a rez (c'hoazh, te ivez).  
(Laka tav e/)an trouz(où) genoù dirak al levr !

### **En em izelaat a ra an Tad d'an tachig bihan a zo ag e vab denel**

16. Digor al Levr mat !
17. (Da) skolpoù (ez a) an den bouzar.  
Ta vouezh eo an houarn.  
(Mar kouezh) ta benn a-ispilh dindan e bouez, an Avel a (ad)sav an houarn.
18. Ta gomz (eo) Ma Liorzh.
19. Ur C'hri diouzh an deiz, ur C'hri (arall) diouzh an noz.  
Diouzh an noz, an Hini Mat a gomz a drouz(où), na gont ket an trouz(où anezhañ avat).  
(Ar pezh) a ra, a(/er) rez.
20. Komz a Ran trouz an den.  
(Koulskoude) an Dour kreñv On ; (ned eus) ket skevent Ennon.  
Troñ a ra ar bed(où) Ennon.
21. Genoù an den ez An ennañ;  
bez' e Stardan, bez' e Stardan evel an tach (dindan ar morzhol).

### **An disterig a vouezh houarn a vo mestr war vordilh nerus an droug**

- III/** 1. Laka ta zorn dindan Ma Zorn !
2. Ar vordilh, an(/o) divrec'hioù (zo evel) ar vouzellenn ;
3. Gweiñ a ra(ont en-dro d') ta(/az k/)gostenn, pladiñ a ra(ont) ta skevent, (en ur grediñ mougiñ) Ma Skevent.  
Ne c'hwibanez ket (avat); bez' ema ar vouezh houarn ganit.
4. (Evel) ar Maen Du (ez eo) ta gostenn. Ur pok, (ema) ar Maen (evel) biz ar verc'h (yaouank) o kreniñ. Un taol, e sav ar Maen, ar sparl (eo), (ur gloued evel) ur pikern.
5. (An hini kasonius,) tarzhiñ a ra ta lagad, al lagad (arall) az peus (c'hoazh). Dantiñ a ra ta vrec'h (ha) ta zorn, an askorn az peus (c'hoazh). Bez' e skriv an askorn.

### **Ar C'hrouour meurbet e ec'honder nad eus na ment na bevenn dezhañ**

- IV/** 1. Ma Faz, Ma Fenn na (/n'er g)wel ket.  
Ma Skoaz na wel ket Ma Skoaz (arall).  
(Eus) Ma Dorn d'an Dorn e Redan mil bloaz den.
2. Eus Yeushou da vMouhamad mil bloaz bihan;  
eus Mouhamad dit-te mil bloaz bras.
3. (Hogen te,) klevet a rez ar Gomz (evel Moshe) a glev(as anezhi).  
Ruilhal a ra an douar dindan ta droad.

### **An den merket gant an droug ennañ en em douell a-ziwar e nerzh**

4. Berr (eo) bloazioù mab-den.
5. Biz an den a gellid ar vibion. Ar vibion a gellid ar bobl(/pobloù).  
Ar bloazioù a ya a-raok an den (evel) an tarv a ya a-raok an arar.  
(Diwall d')ar foz !
6. Dinec'het e vez an hini fall gant ar gaouiad, (evit ma) chom hep yuniñ,

(evit ma) chom hep goueliñ (war e wall).

7. Ar gaouiad (a c'hoari) tro ar c'hilpenn (betek) ar c'hof ;  
golc'hiñ a ra an hini marv(/ar re varv).

8. Yunet a vez gant an hini fall (pa vez) marv ; gouelet e vez gant an hini fall (pa vez) marv.  
An eskern yen a dorr ; an daer a zev ar wrizienn.

Ar wezenn, na bign ket outi (arre) an hini fall.

9. Ar goumoulenn na zoug ket an avel.

An hini fall a c'hourvez dindan ar glav ; ha eñ o kontiñ, ha eñ o lemmiñ e zant, ha eñ o serriñ e lagad er ganienn zu.

### **An den merket gant ar mad ennañ a adkav *ar meiz-speredel***

10. Kreniñ a rez ; benniget out.

11. Kompren a rez e ra levr ar c'hantvedoù neb(/an den) a gont.

Ro (al) Levr mat ! (Ned eus nemet) unan.

### **Na c'hortoz ur vuhez all d'ober ar mad**

**V**/1. An den fol a gont ar buheziou,

(pa na vez) da vab-den (namet) ur vuhez.

2. Marvet penn ar preñv, poan a c'houzañv al lost,  
hogen mab-den, (eñ), na c'houzañv ker ar marv kozh.

(Ned eus nemet) ur marv da vab-den ;

3. An deiz berr a glask Adam ;

Hawa (n/a) ouel (namet) ur wezh.

4. Tag bremañ an hini fall !

5. Ne zistro ket (ar) barnour eus an eskern.

6. Bremañ e c'hounez mab-den.

(An) den (nad eus) dezhañ (namet) ur vuhez d'an heol.

7. Galv: "Foll (eo an) den(! eñ) a gont an aour.

Foll (eo an) den(! eñ) a gont div gadoer (evit) ur c'har,  
daou wele (evit) un noz."

8. (An) den, lamm a ra e lagad ; lennet e vez daou levr (evit) ul levr gantañ.

Gwalc'het e vez ar re varv gant mab-den evel ma walc'h bara ar yer.

9. (E gaou e soñj gantañ :) "Ur c'hof (eo) poull ar foz ; (ned eus nemet) fank  
o tont er-maez (anezhañ). Ar c'har na lamm ket (ar foz)."

### **Bannet an test er marv hag er bed arall**

**VI**/1. Kae er-maez (men) n'evez ket mui an aer, (men) ne stok ket ta droad  
(ouzh) ar menez(ioù) uhel, (men) e vez glas an tan, (men) ez eus ugent biz  
d'az torn (e-giz) lost an heol.

2. Ta lagad, maliñ a ra ar gouloù (, an hini) a zev ar maen ; gwelet a rez ar glogorenn  
er morio(= maen-sked, diamant).

Berviñ a ra an houarn ez torn ; (padal) ta zorn a friz ar vleuñvenn ; ta zorn (he)  
anav (ag) ar vevenn (d')an don.

3. Pignat a rez (bete men) e tro ar bedoù hep eur (evel) ar pesked Em  
Dour.

4. (Eus) Ma Zalm e teu er-maez ar bedoù ; redek a rez e(n o) raok (evel  
a-raok) ar wareg ; (koulskoude) ar bedoù na stokont ket ouzh da varv.

(Evel) ar pesked a(/e) sun(ont) ar broen en Dour Kreñv a red.



5. Ma Brec'h a(/en em) astenn. Digor a Ran Ma Gwazhienn warnout, evet a rez an Dour, an Nerzh (a ya ennout).

Bez' e splujez (eus) pell (bras) dre ar glav du d'ar goueled (eus an douar, met) bagig ar groubi(ed)(= kerubined) a(/az k/)c'hortoz (war-c'h/)gorre.

6. Ur c'hreunenn eo ta zant ; mont a rez er (greun) glaou ; an arnev (a darzh) er glaou.

An tiez (tro-war-dro) a ruilh (evel) ar poultr ; tec'hel a ra an den fol, (hogen) ar bod a dec'h (en e raok). Ar breur zo e fas ouzh Ma fas ; komz a Ran (outañ) : “ Skañv eo ta skuizhded ; sav gant ar vouezh houarn !”

### **Krouet e voe an Adam speredel diwar ul loen denel**

**VIII/1.** Kent (Adam e voe) an den(, an tirien) eus Adam(. An den)

zo hir (amzer war an douar kent Adam).

2. Kousket a ra an den war ar skeud ;

3. Troiñ a ra ar bedoù Em Dorn ;

4. Ar Vouezh nad eo ket an trouz ; ul liorz hep an trouz ez eo ar skouarn (he c'hlev).

5. Ma Mouezh a ya en den ; bez' ema Ma C'homz e komz an den ; deniñ a ra an nerzh Em Nerzh.

6. Adam a zeu er-maez eus Ma Genoù gant al livn lemm.

7. Leon an noz a glask ar vorzhed ; un c'hoant eured a ya er vorzhed.

Bralliñ a ra an eured (evel) tal bouc'h(ed é tourtiñ).

### **En ur zibab an droug mab-den en deus dibabet ar marv**

8. An trouz a ya er penn (eus Adam evel) an traezh ; an trouz a zeu en den.

9. En douar e laka an den an trouz.

Er c'hof e laka an den an trouz.

En houarn e laka an den an trouz.

10. Gwadiñ ar gont a ra an trouz.

11. Teuziñ an traezh a ra an trouz, mont a ra en douar.

(Hogen) hir eo teod an trouz ; (drezañ) e krog er penn, e lip ar c'hourlañchenn, stampiñ an houarn a ra an trouz.

12. An trouz na wad ket al laezh.

Ar weuz nad eo ket glann ar goulou.

(E penn) ar voue ha lost (reunek) e red an duad liv ; skoiñ a ra ar c'hein ; troc'hiñ a ra al lagad.

13. Adam a zebr e gorzailhenn.

Marv Adam (eo) an den.

14. An druzoni hag ar gwinegr a lazh an den ; an trouz a(/el) lazh.

Ar vuoc'h a c'horho he moj he bronn (eo) an den.

E c'har a dorr, e gof a ya (evel) an anaf a ya.

15. (War an) den ez eo Ma C'homz ar gurunenn skorn.

16. Digor ar genoù a ra an trouz, (met) serr a ra ar skouarn.

### **E dalc'h gant an denelezh eo adkavout ar Vuhez**

**VIII/1.** Komz a Ran d'an den, serriñ a ra ar skouarn.

2. Komz a ran d'an Hini Mat, (Ma c'h/)klevet a ra.

3. An Hini Mat a gomz da Vikal, (e g/)klevet a rez (gwell eget) an trouz.

4. (Ha) Mikal (eo) ar figezenn a faout dindan an heol,

diveriñ a ra ar sun (anezhañ), (e) evet a ra ar breur gant ar skouarn.

5. Benniget eo hi

Azez (d'Am/)Va Lec'h !

6. An distro (eus Doue) a faout ar penn (bet/)da toull ar gouzoug.

7. Bez' ez On an Dour Kreñv.

### **Nerzh-kalon a rank ar feiz oberiant ha profedek**

8. Mikal, digor ta ilin ! Lakaat a Ran (ennañ) ar flamm na voug ket an douar, (mar/)e serri ta ilin (avat), e loski.

Sachiñ a Ran (war) ta gein gwrac'hellet, lèr baot (a Ran anezhañ), (rak) an hini kasaus a sko (a-dreñv) ar c'hein.

9. (Keit ha ma vi en az) sav, e bik na doull ket (ta gein), (mar/)e kouski (avat), e toull ar pik da avu ; gouelediñ a rez (evel) ar bailh.

10. Plantiñ a Ran ta c'har.

11. Bez' ema Ma Halv war ta deod.

(Mar Er) skopi, an hini fall a gas ta deod war ar stal, ha eñ da (/d'e) droc'hiñ (a dammou) evit e veuz.

### **Enebour an diouganour eo ar roue gwenn (ar relijion)**

**IX/**1. Mikal, tomm eo ta skevent. C'hwezh ! An Avel (diwar ta c'hwezhadenn) a sav ar c'hroc'hen, glaouriñ a ra ar c'hon.

2. C'hoarzhin a ra ar marmouzed.

3. Ar c'hon a lip troad ar roue gwenn, (hag int lavaret dezhañ:) “(Ker) ponner eo ta groc'hen (evel) un nor. Ta zaer eo (ker sonnet evel) ar skorn. Ned a ket an Avel (dindan) ta sae.”

4. “Ar chas-kon, eme ar roue gwenn, n'hemolc'hont ket evidon, debriñ a raont ganin (avat).”

5. Ar roue gwenn, dent zo d'e zaoulin.

6. Debriñ a ra ta vel gant Ma Halen.

7. Ar roue gwenn zo dezhañ an den n'en deus ket al lagad.

8. (Tapet eo) ar Gouloù er pej antellet gant mab-den.

Mikal a zishual ar Gouloù.

(Mar) krogo ez torn ar pej, (gant) ar vazh (te) a dorro ar pej.

### **Bez' ema ar bed o klask ar C'hrouour lec'h ma nend eo ket**

**X/**1. Ar vouezh houarn zo ganit.

2. Galv ar vroad, ta vreur a deskaoua. Ne gav-eñ ket ar Sant ; e bal a fourch, ne gav-eñ ket ar Sant.

3. Enaouiñ a ra ar c'heuneud-brugou, e lagad (n)a wel (ken namet) an noz.

4. (Garmal a ra an den, ar breur zoken:) “Dismantr ar Sant !”

“Men ema ar Sant, an Avel ?, eme kolen mab-den”

5. Gwir e lavar: Dismantr ar Sant. Peuriñ, hemolc'h, bouc'h ha ki, (setu aze da betra) an den (en deus E vihanaet).

### **Ar C'han eus ur spi nevez a laka kounnar er re zo ar galloud gante**

6. Ar roue gwenn, ar roue du (zo evel) korn ha dant.

7. (Met te,) e teuez war zaou droad.

8. Ouzh ta varv (ema) Ma C'han.
9. Ta gomz a bouez (evel ur) pakad gloan war kroazelloù an dargreiz; ned ez ket en divgroazell, (hogen) leun int.
10. Dont a ra ar roue kreñv ; dirazañ (ema) serret an divgroazell.
11. Tagiñ a ra (gant ar gounnar) ; poezon (zo) a-dreñv e lagad.

### **Kement mision profedek a vez ur stourm**

12. Ar bouc'h (a ya) gant ar c'hi. Eizh skilf ouzh ta dreid gwenn. Diwall (na c'hoari) ar goulm !
13. Trouz askell !  
Bez' e Sellan ; bez' e Skornan an askell.
14. Kouezhel a rez ? Na ra ket ! Stourm !
15. (As)tenn a Ran da skoaz (kel) ledan (hag) ur vur.  
Ta vrec'h (a dro d')ur varrenn, ta dal ur sterenn.
16. Ta galon a daol an tan.
17. (Mar) tec'hi kuit ? Ar c'horn (hag) an dant a doull an divgroazell(où), an tezh(ioù) bras(, az peus leuniet).
18. C'hoarzhin a ra ar c'hi,  
“ Pezh skeud(, emezañ,) a c'holo(as) an divgroazell(où) ? ”
19. Stourm ! Sank ta droad en douar !

### **Kreñvoc'h ar Gomz eget *trouz* ar gaou**

#### **XI/1.** Ma C'homz zo ganit.

- Digor a raont al(/o) lezenn dirazout, touziñ a raont (ta b/)penn, (ta) elgezh.
2. Na zouj ket ! Azez Ma(/Em) Sez !
  3. Ar barner, ar gont a ziver (anezhañ).
  4. Ar gont a gleuz an den, (d')ur chorr (e tro) mab-den.  
Ar gont a gleuz an den marv. An trouz a denn an druzoni digant mab-den.
  5. An ejon er park (a zeu) mab-den (da vezout).
  6. Kurunenn skorn (eo) Ma C'homz war den an trouz.  
An trouz a serr ar skouarn.
  7. Ar barner a zebr e deod (anezhañ), a zigor an nor ez tirak.
  8. (Hogen) gedour ar roue a zebr (anezhañ) diwar bouzelloù ar roue, a (zeu d'ar) red, komz a ra er gouzoug (eus ar roue).
  9. (Ha eñ lavaret:) “ Ar barner, leun eo e zivgroazell. Ar bleiz (e) speg flemm-ruz a ya (e/)an digroazell. Ar vibion zo gantañ, (pand/)ez a ar roue divab.  
(Ar bleiz ra vo) krouget !”
  10. (As)tenn a Ran Ma Brec'h. Lakaat a Ran kañv war ar roue.  
Gwiskiñ a Ran ta skoaz (gant) lin ; ned out ket noazh. Sachiñ a Ran (war balog) ta elgezh, ar barv a ziskenn (arre evel) an dorn e kerc'henn ta c'houzoug.
  11. Tiez ar roue(ed), ta vreuder a ra keuneud-brugoù (anezhe).  
(Lakaat a raont) ar pod war ar c'heuneud-brugoù ; ar vreuder zo naon (dezhe) a zebr.
  12. Ta vreuder a ev an Dour Kreñv. (Diwar) ar(/o) gweuz a(/e) red ar froudoù ;  
ar vreuder zo sec'hed (dezhe) a ev.
  13. Ma Mab eo Mikal.  
Kellidiñ a ra mibion an Dour.

### **Daoust da vab-den bout *argarzhus*, karet eo gant ar C'hrouour**

**XII/**1. An c'hwil-nep edan Ma Zroad (eo) an den.

2. Ma Faz a ya war E goar, pounner eo Ma Seul (neoazh).

3. Ne red ket Ma Anal er gwez-pin (evel) ma red ar re vesteod (enne).

Veñjiñ a raont (o-unan) an(/o z/)teod gwriet.

4. Ar vesteoded a zebr an huan.

(Pa vez) Mikal o komz, an huan (a dro d')ar mel. Ar mel a ra an hini kreñv.

Komz !

5. Ta C'henoù a chaok an huan evit ar breur.

(Bez' out heñvel ouzh) ar wenanenn a nij er gwez-pin ; ar mel a red er breur. Diwarnañ e sav ar ouenn.

6. Ar mor a daol ar barr-amzer, taolet (d'an traoñ) ar gwez-pin, (hogen) nijal a ra ar wenanenn, (er goudor ema) ar mel edan ar rusk (tre ma)'z a an c'hwil-nep en tir(ion), beuzet d'an donn (anezhañ).

7. Galv ar breur ! An den bouzar, huch en e skouarn !

(Lavar dezho:) “An tan pounner, e vroud a deuz ar garreg.”

8. Bez' e kouezh an tan pounner (e/)ar beg houarn edan ar mor. Gwentiñ ar mor a ra an tan (evel) ar plouz; sec'hiñ a ra ar mor (evel) an c'hwez.

9. Ma c'hwezh (hepken) a lazh an tan.

10. Ganit ema Ma C'hwezh.

(Pa vez) ta c'hlin o plegiñ (gant ar skuizhder), Ma Dorn a(/az ad)sav.

11. Hir(a) ta vrec'h, (laka) ta zorn edan Ma Zroad ! (Ken) eeun out (evel) un nervenn !

Chabistr VI :

Lakaet eo **test** Ares gant ar C'hrouer dindan **amprouadur ar marv hag ar bed arall** (titl a rer gantañ gwezhavez evit ar Ch. VI). Ur wezh disoc'het gant an amproenn-hont e kav d'an test bout distro war un douar “teñval, trist, ha hirisus zoken goude ur gouel gouloù, tan ha nerzhioù.” Amañ e tanevell ar C'hrouour e-unan ar pezh zo bet bevet gant **Mikal** (Mikael pe Michel Potay, **den Mikael** en Aviel Roet e Ares). An **test** na vo ket evit lavaret hag eñ a oa padet e zezougerezh en hollved divent div vunutenn pe div eurvezh, soñj kaer a-walc'h en devo neoazh ne rae van ebet, evel digizidik a-grenn e vize bet, ouzh “an uheldizh, ar gouleier, ar nerzhioù-tan hag an uhelwaskoù a ren eno ken-ha-ken na c'heller ket ijiniñ.” Komz a ray ivez eus ur “pikol govel ramzel.” Ar pezh a skoo ar muiañ e spered eo ar fed na chom ket **an ene** (V. 17 ha 18) pe **an ha** (XXX/5-11) eus an hini **n'ev ket ken an aer** (n'anal ket mui, an hini marv) o hentiñ tir mab-den, daoust d'ar pezh a gont kredennoù poblel, ha ne zeu nemet dibaot a wezh warnañ, pa vez graet atav, dre m'ema douar ar **pec'hed** hag an **droug** evitañ, **du (glaou)**, garv ha digevannezus (en enep bev d'ur **bod**), hag e vano mod-se keit na vo **cheñchet ar bed** (28/7).

## Eil Teofaniezh

D'an 9 a viz Here 1977

Diouzh an abardaez d'an 8 a viz Here 1977, ema **Mikal**, an **test**, o ober un tamm digros d'e zivhar war traezhenn Ares goude un devezhiad labour en e vurev. Ne ouez ket c'hoazh anezhañ e vo ag un deofaniezh arre e kreiz an noz. War an draezhenn a vez digenvez liesañ e miz Here, e wel a-daol-trumm “ur boud brav-kenañ o vousec'hoarzhin outañ... a-vent gant un boutin... (met) ur c'haer a liv okr melenwenn dezhañ ha blev sklaeroc'h.” Un ael eo, ha eñ lavaret dezhañ : “Bet az peus bet gwalc'h ta galon o laouenaat gant joaiou an douar. Pell zo ema ar Mestr-Holl ouzh ta glask. Achapet az peus dezhañ, diwar-vremañ avat emaout en e Zorn hag az talc'h ervat ha start ennañ.” (Danevelloù, Notennoù ha Prederiadennoù an Test, emb. 1985, 1987 ha 1995).

**Jezuz nand eo nemet un den ha Mikal kevatal dezhañ**

**XIII/**1. An nor (a gas) war lerc'h an nor, troiñ a raont.

2. Mesaour, Ma Brec'h zo ganit.

3. (Perak ema) ta vrec'h (evel) marv dirak an Hini Mat ?

4. (Lavaret a rez ennout e-unan :) “Evel al luc'hedenn e kouezh an Hini Mat.”

5. Gwir (eo) Yeushou, bihan (eo) e gorzailhenn (avat), c'hwezhiñ a ra.

6. An Hini Mat a ro ar Gomz e trouz.

7. (Bez' ema) Yeushou (en) traoñ ; bez' Emaon (el) laez.

8. Ar Gomz, un nervenn ez penn.
9. Tremenn a ra an Hini Mat, (leuskel a ra e) halv war ta zorn ; perak (e vize) marv ta vrec'h ?
10. Tarav ta zorn ! Ema Roue (en) traoñ/tnaou an Hini Mat ;
11. Sellet a ra (hogen) e lagad (eo) an vi marv.
12. Nijal a ra a gav dit ? (Ne ra ket,) e kerzh an Hini Mat (evel ma) kerzh ar gevridenn.
13. Gwir e komz an Hini Mat (koulskoude).
14. Ema roue ar bobl (d'an) traoñ a-dal d'ar mor, etre an tir hag ar wezenn.
15. Mouhamad (eo) ar vouezh a-dal d'ar Gouloù-Deiz.
16. Lagad Mouhamad (zo) Dour (an Neñv) e-leizh ennañ.
17. Bountiñ war an noz a ra an Hini Mat ;  
Mouhamad a zalc'h an heol war penn Yeushou.
18. (Hogen eus) genoù Yeushou (hag eus) genoù Mouhamad, (e teuez-)te (evel) an tan.
19. Pignat a rez war ar(o) skouarn.
20. Ar roue gwenn, c'hwezhiñ a rez (diouzh roud) e gammedoù ; ar feizad(/idi) na wel(ont) ket mui (kammedoù ar roue gwenn).
21. Ar roue a zalc'h barv Moshe,  
ar roue a zalc'h barv Yeushou,  
ar roue a zalc'h barv Mouhamad,
22. e loer zo an toull(où) dezhi, serr (a ra) e c'har, (heñvel ouzh) an naer (az) klask a ra.
23. Kuzh ta zremm ! (Pa zeui da vezout evel) al lêr, (e lezi) ar roue gwenn a wel(/gwelet) ta lagad.

### **Nac'het e vez ar Gomz krouer dalc'hmat gant mibion Adam...**

- XIV/**1. Adam a sko gwezenn ar Gomz. (Gloaz) digor !
2. Gwad a ouel ar wezenn.  
(Strimpiñ a ra) ar gwad war ar penn, ar vorzhed (eus Adam zo) ruz.
  3. Ruz ! Gwenn On (evel) an Dour.
  4. Ruz (int eus) Adam ar mab ha(g ar v/)mibion ha(g ar v/)mibion,
  5. (betek) Yeushou toullet zoken ;

### **...tec'hel a reas diouto Mahomed ha eñ digor un hent.**

6. (hogen) Mouhamad a vann an houarn.

### **Hañval-mik ouzh an diouganerion e vo da c'houzañv gwallioù-reuz ivez gant Mikal**

7. Te, azezet (out) war an enez sec'h, lec'h (ma) Cha'oul(= Paol) a ev ar glav, a we (anezhi gant) an naon.
8. Roiñ ar Gomz a ra Cha'oul e trouz an trouz.
9. Bouzar (e tro ganti) an enez(iz),  
droug (o devez d')ar skouarn, bountiñ a ra(ont) Cha'oul er mor.
10. (Mar bes) kaset kuit d'an enez sec'h gant (re) ar goad, azez ar Gomz eno !
11. Enor (a ra dit an eneziz) ! An enezenn, e tro Ma Lagad tro-dro.

### **Adkaset e vez dibaouez ar Gomz d'an denion avat**

12. Dindan ar meud (e tistremen) lagad Yeushou ;  
Mouhamad (e) lagad leun a Zour.

13. Ta lagad (zo) an tan (gantañ) ;  
an den (az heuli) a wel an Enez C'hilaz (er) pell.

### **Brezel Afghanistan kemennet daou vloaz en a-raok**

**XV/1.** Kabou(l) drailhet !

2. (Lec'h ma) kousk an erer e kousk breu(de)r Mouhamad.  
(Gant) ar maen a(/e) stank(ont) ar geol a daran ; diarbenn (a raont) ar gurun  
(evel) ar c'hrog.
3. Brec'hioù zo Ganin evit evit breu(de)r Mouhamad.  
Unan(/ur Vrec'h) a ro ar fulor, unan(/ur Vrec'h) a ro ar bara, unan(/ur Vrec'h)  
a lemm al lavn, unan(/ur Vrec'h) a c'holo ar bugel.
4. Gwelet a Ran ar rouaned azezet war o daouarn ; (emaint) en arvell.
5. Galv a ra(/dre ma c'halv) ta vreuder an Anv, e lez ar rouaned ar moked (eus ar brezel)  
poazhiñ ar brik evit ar piler.

### **Diougan trec'h ar gredourion war an URSS**

6. (Dre Ma) le, (e Lakan) breu(de)r Mouhamad (en tu) Dehou Din.  
Bez' ez(/pelec'h bennak ma) ev(ont), ar froud nad eo ket (aet da) sec'h.
7. Ar voger a gouezh ; adsevel a ra(ont) ar mas'ji(= moske).
8. Ar graban en drañnienn/dnaouienn a dro an olk(= parkeier, trevadou), a had an holen. Ma Zeod  
a(/er g)walc'h. Hadiñ a Ran ar graoñenn/gnaouenn, sevel a ra an delienn (evel) an evn.

### **Ar feiz hag ar spi skrapet gant tud a vicher**

**XVI/1.** An c'hoarzh(erezh) a c'hwiban : “Gervel an Anv (eus Doue) a ra an hini foll !”

2. An(/r re z/)doueel ar(/o f/)penn er moked hag er(/n aezhenn g/)c'houmin,  
ar(/o) c'hein a(/g)wisk(et gant) an askell-c'haouzan,
3. an(/r re z/)doueel o c'hein loued, a zoug al levrou (evel) ar  
pennoù-bazh,
4. a youc'h gant an hini gwariet : “Gervel an Anv (eus Doue) a ra an hini foll.  
Hual, dramm evit an hini foll (a zalc'h) pell ar marc'hadour, an tron, e(/dre ma)  
ro (dezhañ) al Levr ar bara hag ar glav.”
5. Ar c'h(e)roubi(n) ? An(/r re z/)doueel hag an hini gwariet – e valgudenn skarlek – a  
goulm (dezho) ar c'holier.

### **Dreist ar Gomz hag an aelez e kav gantañ mab-den bout**

6. “Stou ta c'houzoug !” (a c'hourc'hemennont dezhañ.) “Sell ! Ar vezenn houarn a lazh ar vouezh  
houarn. (Estlamm dirak mab-den ;) banniñ a ra al luc'hedenn, ar c'har houarn, al linenn a besketa  
(a-)dreist ar mor.
7. Uhel mab-den, dindan e c'hlin (ema) an arnev ! (Eñ) a vann an houarn enep an  
Anv, (Ar-)Mil-Vrec'h a ven al linad (hag) an c'hwil-karab dinerzh.  
Ar menez-tan (zoken n)a losk (eus mab-den ken namet) an ivin.”
8. Pevar hent zo d'an noz evit an den a zebr e empenn,
9. (hogen) Ma Dorn (eo) a zalc'h an dorn (eus an den klañv, evel)  
ar vamm glebiet (a zaerou) poull he c'halon.
10. Kribenn war tal an den, ar yar a yud. (Ema) Ma Dorn e Neizh.  
Plegiñ a ra Ma Biz (evit) moulliñ an viou (eus ar vaouez) ; ar beg (eus  
an den, Ma Biz) a ra ar bleud-bleuñv (anezhañ). Roue eo al linad, (mar be)

glebiet ar vleuñvenn gant Ma Daer.

11. Lammat a ra mab-den dreist ar wagenn. (Hogen mar) Lavarin : “(A-vremañ) pounner eo an aer (a oa skañv) !”, e kouezh ar vag (evel) ar c'harv er ganienn serzh.
12. Kousket a ra an den yost ; (mar) C'hwezhin er goad, redeg a ra ; (mar) Tennin e valvenn, (da d/traezh (e tro) ar goad. (Yostoc'h eget) ar gelionenn (e vez) an den na gousk ket.

### **Bez' ema ar bed-mañ o ouelediñ e-barzh un diboellerezh marvus**

13. (Mar) gourvezo ar vezenn-houarn Mikal war e led, e kousk-eñ hep malvenn. (Diwar) e javed e kresk ar wezenn (he) begenn c'hlaz bepred.
14. Ar vreuder zo o dorn (ouzh) krec'h/knec'h, (war-zu) an arouezinti. (du-se) ema ar falc'hun o neizhiñ (war-laez), an evezhour na gousk ket.
15. (Pa vez) debret ar wezenn gant ar rusk, (pa zeu da vezout) du ar geot, (pa vez) lazhet ar yer gant ar c'hilhegi evit man, ar falc'hun a lazh ar c'hilhegi, bev eo.
16. An heol (zo a-walc'h da boazhiñ) ar pri, kalet eo ; loskiñ a ra an eoul ar(/n di)vrec'h. An c'hwez (eus mab-den) na sall ket ar mor. Ur pod (m)a verv ar roz-moc'h (ennañ eo) ar penn.

### **Lec'h ma ren ar *Mad* ema ar Jeruzalem wirion**

17. Azezet, ar breur a wel ar vleuñvenn a/(o) c'hoëñv(iñ hag) ar mergl (o krouiñ), (klevout a ra) e askorn (aet) tort ; (neuze en) e benn ez a ar bigell (evit gounit) al liorz na c'hoëñv ket.
18. Ar breur a wel sklaer a ya er-maez (eus) e benn, a sav Em Dorn. E benn (a zeu da vezout) aour entanet (evel) an heol, e halv a skuilh ar glav, ema goloet e c'har gant ar goadeg.
19. Ta letern eeun (eo) an tour (ag an neveziñ), Yeouroushim en he sav.
20. Dindan al letern e kan ta vreur.

### **Ar galv d'ar vreuder deol, fur, ampart ha her**

- XVII/**1. Dindan ta droad (ema) gourlen an aod (heñvel ouzh) al laouer-doaz ; (e) lipat a ra ar c'hizhier, leun eo ar(/o b/)voc'h (anezhañ), debriñ a ra an dañvad ta droad lart (evel ma ra ouzh) ar beotez.
2. (Ma ne ve) ar skouarn (ken nemet un) toull en traezh, serr ta vouezh ! Lonkiñ an(/r vouezh) houarn (hag) an Dour a ra an traezh.
  3. Laka ta droad da baouez, laka ta lagad da bariñ (war ar) pell(où) ! Dont a ra ar breur(/vreuder), (ar re zo) al liorz er(/n o f/)penn (lec'h ma/e sav an Dour (evel) er wezenn, (e/)ar vleuñvenn.
  4. Ar(/o) skouarn (zo dezhi) an nervenn, an(/o) arzell (zo dezhi) glin ar marc'h-kefel, an arzorn a zalc'h ar skou(e)d ; komz a ra(ont) en dorikell.
  5. Digor a ra(ont) an dorn evidout.
  6. Kant mouezh houarn a ra ar(/o) skevent. Kreniñ a ra ar roue(ed) hag an(/o z/)daol(iadoù) (evel) ar bleizi a glev al liñs.

### **Relijion ha politik a laka ar bed da droiñ diot**

7. Ar roue(ed) a zebr an empenn (eus o) danterion, ar c'hon dilagad a lemm an(/o) dent, ar(/o) skilfoù ; an(/o) ilin a sko

ar chadennoù.

8. Betek an enez e pignez.
9. (Mar bes ur c'h/ki glebiet, e stlapez an nozioù er mor ; ar mor a gas an nozioù (gantañ er) pell.

### **An den mat ha gwir a chomo bev hag adsavo Eden**

10. Dalc'h sklaer (dit), ta vrec'h entanet war an enezenn.
11. Lec'h ma we (anezhi) Cha'oul (gant) an naon, (dit-)te an aer a (ze)gas al liñsel, ar greun. An Avel a gas ta askell wenn (Gantañ).
12. An nozioù, e chomez (an) den sklaer (ha) gwenn, (evel ma/)ez On gwenn.
13. Heolioù ha heolioù (a achu er) moked, (dre m' emaint) gwenn e teu (dezhe-)int an du.
14. Setu (ma teu) ta benn, ta groc'hen (da vezout) an Ti !
15. Breuder Yeushou a ya ez penn (a zo) an Ti (eus an Tad) war an enezenn.

### **Emdroüs-bev ar vuhez eo ar Wironez ha neket dogmatek difiñv-mik ar marv**

**XVIII/** 1. Tri biz zo d'an hini du : tad, mab (ha) moked ; peuriñ an Avel a ra e zant.

2. (Mar be) skopet an Anv gant an hini du, e(-)kroug an Anv pounner (ouzh) e voj (evel) ar c'hran-ruilh.
3. Hegeuz, e chaok (ha dichaok) an hini du an Anv, (e) ruilhal a ra en e zant.

### **Perak e vez bac'het atav an Tad en un idol ?**

(D'an(/r sav-) heol, e lavar (dezhañ) : “Sarsoushtratam(= Zoroastr) !”

(D'al loar lart, (e lavar dezhi) : “An-houadez-he-morzhed-a-zov-aour.”

(D'ar sterenn, (e lavar dezhi) : “Yeushou.”

4. Ouzh Moshe e komz an hini du : “ Komz an Anv a ya (evel) paz ar razh, (hogen kel ledan eget) troad ar c'hañval eo ma c'homz(-me).”
5. (Breuder) Moshe a glev an hini du. (Te avat,) serr ta skouarn !
6. Chom azezet, selaou (Ganin) !  
Mab-den a son (evel) ar gas(= kloge, paelon), e benn zo ar plom dezhañ. (Ouzh son) ar gas (hag) ar plom e kan an hini du.

### **Prederiañ eo e vez graet gant ar feiz wirion, na baterat geriennoù**

7. Bez' ema an nervenn ez skouarn. (En em) stigniñ a ra unnek deiz, (ha neuze) e taol pe e kemer.
8. Ruilhal ar maen a ra an hini du war ta droad, (hogen) ta droad a ziskenn er Votez(-heuz).
9. Mab-den, (ema) e fri war ar bouc'h, “Al Loubane !” (eme) an hini du (dezhañ avat).
10. Ma Biz (a) hir(aat) e lagad an Du ; ha eñ kouezhel (en ul lamm) hep sont.  
Mab-den a gas (d'an Du) ar groll(= bran-frav), (ema) e gein an dibr (eus an hini du), e gaoc'h a skarzh al lagad (eus an hini du).

### **Arc'hant ha likentez a laka penn mab-den da vont e belbi**

11. Brec'h an Du (a c'hronn) mab-den ; ar c'hof (eus an Du) a skuilh er c'hof



(eus mab-den).

Hoalerezh, ar speg (e flemm) a hej mab-den ; e weuz a zigor (evel) an arc'h.

12. Aezhenn blom ! “Men ema ar Glaz ?” eme mab-den.

C'hwezhiñ a ra ar yenizion, kouezhiñ a ra ar plom ; plegiñ a ra e eskern dindan (ar plom), toulliñ (a raont) an douar.

### **En aner e vez ar maouezed o klask o c'hened kollet**

13. Ar (m/)vaouez(ed), e kouezh al(/o) lagad (e) lufr (en ul lezel goulo) ar c'havioù ; A-fonn e verv bugalez an Du (enno).

Ar (m/)vaouez(ed), e kouezh ar(/o) c'hroc'hen, ar(/o) blev ; skoiñ a ra(ont o divjod gant) al loa-blat.

### **Ouzh an eeunder e rer puritanelezh kriz anezhañ**

**XIX**/<sub>1</sub> Ar (re) fall a hoch (dit) : “Sachiñ a rez (war) ar blev, ar c'hroc'hen ; stoubiñ a rez ar yalc'h, ta voged a denn an daer !”

Ta vagudenn (gant) na guzho ket ta lagad !

2.(Mar) skedo an eoul (war) ta weuz,

3. (mar) ta vrec'h a droio (diwar) da gein, aet (en)kamm anezhi. Hir(a) da vrec'h, sko ! (Ema) ar ronkell gant an trouz.

4. Mir ta galon ! Ar (re) fall a gas (dit) ar vaouez ; digor a ra he brozh a-dal dit.

5. (Evel) ar vorzhed-kig a boazh-hi ; ag he c'hof e sav an tan en he zeod (evel) ar binim.

6. Nend eo ket ar peoc'h ez torn.

### **Prezeg ar mad a zalc'h penn ouzh prezeg an droug**

7. Komz (a-)is al lagad ; na gomz ket (a-)us al lagad.

8. (Heñvel eo) ar c'hevren (ouzh) ar razh a riñv ar vur.

9. A-raok an Avel e nij ar gomz (eus mab-den),

10. (pe) e pun (evel) ar c'houlm.

An hudra(= aerouant seizh penn), (kevren ha komz mab-den),

11. ar c'hoad a (van war-)neuñv (hag) a vrein ; (er) boutiñ a ra ar roue(ed) e(n o) raok.

An tufa(= korz, raoskl) a vrein (neuze).

12. D'ar mor e teu ar c'hoad (avat). Ar roue(ed) na neuñv(ont) ket a-benn d'an Dour, setu(-int) beuzet gant ar mor.

### **Relijon ha politik a glask mont diouzh ar gomz-mañ**

13. Teod ar roue(ed) a son evel) ar fleüt.

14. Spiiñ a ra (ar roueed) da deod, (e lavaront outo o-unan :) “Mikal, an daledenn war ar penn (e vehe) e deod. Gwalc'hiñ ar(/he) c'hein a ra ar fleüt, sae Mikal a wisk (an ankounac'h). Bez' ema ar rouanez (kempennet) a-nevez.”

15. An heol, (troet eo) e gazeg (d')ar jarl(-kañv) flaerius.

16. Kreniñ a ra ar roue(ed) en e(/o m/)vilgin ; an(/o z/)troad (a ramp) er fank.

### **An aezhenn kent Goulou-deiz eo Mikal**

17. An houarn ruz zo deuet sec'hed dezhañ ivez, (hogen) ta benn troc'het a gresk (adarre).

18. An aezhenn kent Goulou-deiz out. Lagad ar roue(ed) na(/'he g)wel ket (c'hoazh, met)

ar gelionenn a ev enni (abenn-bremañ).

19. Ta vizied a(/en em) astenn (evel) ar c'hoad tuma(= tin) a sav (dre) fri an den ;  
kuñv(aat a ra an den), e gostenn(où) a zigor.

### **Memes an hini fall kriz ha goapaus-ki e vez tu dezhañ mont war wellaat...**

20. An hini kriz (zoken a laka) e benn war ta askre (evel ouzh hini)  
ar vamm.

21. An drez(enn) a lez an drein(enn), an hini marv a zeu (en-dro), ar javed a zistenn,  
sklaer (eo) ar goad (a-nevez).

22. An den(ion) a zeu (da vezout) ar vreuder, (dont a ra ar bed da vezout) ar goumoulenn  
aour a(/ma) vriata ar broadoù (enni, lec'h) na werzh ket ar breur ar bara (hag)  
ar gloan.

### **... ha bout trec'h war an droug hag ar marv zoken**

23. Diarbenn ar (re) fall hep aon ! Ma Dorn (eo) ta zorn. Ar(/o) skop (hag eñ) a losk  
ta viz ? Peurvat e vez (dalc'hmat) Ma Dorn. Skoulmiñ a raont ar c'holier  
(e kerc'henn ta c'houzoug), hogen Ma Dorn a ra an iliav frondus (ag ar c'holier),  
brec'h(iad) an eost.

24. (E-barzh) ar c'hleuz e Tiskenna(/i)n (evel) an Dour war an drez(eg). Te, (emaout)  
Ma Dour a-benn bremañ dindan ar plouz, (emaout) ar roue en e sav hep ar skourjez,  
hep ar c'hreñv(lec'h)ioù. Ar falc'hun na vez ket (ezhomm) gantañ (a) lezenn ar razh(ed).

### **Ar Vuhez en he barr – Eden – zo tu dezhi dasorc'hiñ**

25. Gward an Dour, emaout (al) lec'h uhel, ar c'horn pevar skor ;  
(emaout) ar weuz, al lagad, ar skouarn, an dorn serret war Ma C'homz.  
Bennigiñ Mikal a ra ar breur.

26. Roiñ a rez ar Vuhez.

### **Ar pezh a vez divizet gant an nabi (profed) a vez divizet gant an Tad**

**XX/**1. Nabi, e(/pa) skrivez, e troc'hez ta ivin.

2. Skriv ar gwir !

3. (Ned eus nemet) Va Ivin a reg ; ta vouezh zo Va Ivin ganti.

4. Ne vountez ket war ta vreur (e-doare) ar menez a vount war ar wazh ;

5. Torret eo ouzh ar roc'h ; (e) evet a ra ar boultrenn.

Ar breur zo e benn (tu) kleiz, ar breur zo e zorn (tu) dehou.

6. Derc'hel a rez ar walenn ; krennet dit (honnen) hir (pe v/)berr.

7. Lavaret a rez : “Tri deiz (pe d/)tregont deiz. Teir c'hammed (pe d/)tregont kammed.”

### **Awenour ha bleinour ur mision bras divent**

8. Nabi, ta askre a ziver an c'hwezenn (anezhi) ; e talc'h an c'hwezenn (enni) !

Ar feunteun a red (eo) Mikal ; ne (zi)fontez ket an draoñienn/dnaouienn.

9. (Ra chomo) ta zorn hep troiñ(-distroiñ) en toaz ! Koll a rez (sont dindan) ta droad ;  
(ema) ta benn er veol. Ouzh traoñ/tnaou e sell ta lagad.

10. Ar breur e vrec'h kreñv, ar breur ar(/n neudenn b/)plom e ividig e benn,  
(ez eo) ar breur a zalc'h ar wareg, ar bal, ar falc'h.

11. Ta lagad (a chom paret) war ar breur(/vreuder) evit na roio(/roint) ket ar bara  
gant ar pik(où, nag) an Dour gant ar glaour.

12. Ar breur(/vreuder), ne Gomzan ket (outo) ; komz a rez (outo).

### **Ned eo ket ar profed ur penn renour, met ar Wirionez hag ar Vuhez**

13. An Avel na sav ket ta vlevenn (evel) ar gurunenn.

14. An nak(a)r a Lakan war ta viz ; ne gravez ket ar vouden.

15. Mikal zo e viz (ker) kreñv e(/ma) sav sterenn Moshe ha Yeushou, (an hini) a gousk en noz.

E zorn (evel) an(/r wialenn) haleg a foet (ar sterenn evel) ar marc'h ; (ad)kemer a ra ar gazeg (evit Doue).

### **Tud a feiz dizingal bras o liveoù speredel...**

16. (Evit) breur Mouhamad (ema) ar sekst(= ec'hoaz) war an diwezh ; ema e varc'h o redek (war) an arzell (ag ar gazeg).

17. Ma Dorn a olev mab-den (get) an alamandez, a olev mab-den (get) ar c'hraoñ/c'hnaou, a olev mab-den (gant) ar fro ;

Ma oar (perak) ; ne oar ket mab-den.

### **...met galvet holl razh hep ober diforc'hioù etreze na re lakaet gwel eget re all.**

18. Tri fenn, teir dor evit an Avel.

19. Ganit-te ema an Avel a c'hwezh e Duna(= Danav) (ha) Pourat(= Euftrat), (ha war) ar c'hu(ku)bal(= bokedoù-an-teureg, koulourdr) er gwinizh(egi) (hag) er (g)winieg(i).

20. (Mar) debro ta zant an alamandezenn (kevret gant) ar graoñenn/gnaouenn, e torr.

21. (Mar) tro-distroio ta zorn en toaz, faezh eo ; kouezh a ra ta benn er fro ; ta vrec'h nad eo ket ar bal, e pleg (anezhi).

22. Na daolo ket Mikal an heol (evel) regez-tan.

### **Ar wirionez na c'heller ket he bihanaat da skiant spered mab-den**

**XXI**/1. Na zigori ket kof mab-den (evel ma vez en) digoret (gant) ar roue(ed), ar(/o) chas-kon (hag) ar(/o) c'houkouged.

2. Digor eo ar c'hof,

“Ema ar preñv(ed) er c'hof (emezo), mab-preñv(ed) eo mab-den (neuze).”

3. “Marvet mab-den (eme-int c'hoazh), e vez(-eñ) debret gant ar preñv(ed), bara ar preñv(ed) eo mab-den.”

4. (Int a lavar c'hoazh :) “ Gwiadiñ glaour a ra ar preñv, gwiadiñ a ra mab-den, mestr mab-den eo ar preñv (neuze).”

### **Anien douel mab-den, skeudenn ar C'hrouour**

5. Ned eo ket mab-den mab d'ar preñv ; mab aezhenn Ma Genoù eo mab-den.

6. (Dre-holl a) Ma Dorn (kleiz) da Ma Dorn (dehou n'eus nemet) mab-den a c'hwezh (war) an tan.

7. (Mar Ben galvet gant) mab-den, e Walc'han ar saotr el lagad, e Tistokan an dent (eus mab-den).

8. An Avel tomm a ya war an avel yen.

9. Mikal a c'hwezh (war) ar bara, ar gwin (hag) an olev ; skañv (e teuont da vezout).

## **Biskoazh sklêrijenn ker kreñv n'he deus resevet an denelezh**

10. Laes ! Ro (ar Gomz) da vibion ta vreuder (evit) n'harzo ket al(/o) lagad ar Sklêrizion ;  
poazhiñ a ra (ar Sklêrizion) ar(/o) bara, gwaskiñ a ra ar(/o) gwin, an(/o) olev.
11. Mor don ma (ne) welez (ket pelloc'h eget) ta zorn.
12. (Koulskoude) ar Mor a ya ez c'hwezhigell.

Chabistr XV :

Diouganet e vez e Diskuliadur Ares un nebeud darvoudoù da c'hoarvezout en dazont tost.

Gwelet eo bet dija en Aviel Roet e Ares, pemzek vloaz en a-raok, diougan dismantr ar bloc'had komunour soviedel (28/20, 31/5), ha faltazius da vat an degouezh-hont neoazh e 1974. Gwelet e vo ivez pellikoc'h (XXV/4-9) kemenn ag ar peoc'h etre Israel hag Egipt, met amañ avat (chabistr XV), ez eo diwarbenn kemenn ag ur brezel na oa anad ebet anezhañ naket ouzhpenn daou vloaz en e-raok, etre URSS hag ar feizidi Afghan ha trec'h ar re-mañ war al lu soviedat, hini kreñvañ ar bed en ampoent-se.

Chabistr XVII :

Da c'houde XVII/7 (pe marteze XVI/20), e tavas ar C'hrouer. Neuze e krog ur brosesion brofeted da zibuniñ dirak daoulagad an test. Kouskerion pe varved, liv boull gouloù-koar dezhe" a dremen war un dro gant trouzioù ar "stirlink arme eus an diavaez hag ar strakadennoù eus ar framm-koad... Bez' emaint war o c'hostez, war o c'hof, war o c'hein" e-giz ma vident astennet war gravazhioù etre daouarn dougerion diwelus... Rev pe seks ebet dezhe... tamm blevenn naket anez o fennad blev... "An diouganourion !" eme ur vouezh. Tremen a raont, kouskerion o c'hortoz an dasorc'hidigezh... Ar vouezh arre o lâret : "Brasat da zoujiñ tonkad an diouganourion !" (Danevelloù, Notennoù ha Prederadennoù an Test, emb. 1984, 1987, 1995).

## **Trede Teofaniezh**

**D'an 19 a viz Here 1977**

### **Beli distabil bras galloudoù an douar**

**XXII/1.** Ar c'haran tri fav a gousk e ti Nero(n), (he deus dalc'het evel)

an eor en Avel Kreñv,

2.(hogen) ar c'haran zo tri banos(= askell) dezhi a(/hag e k/)gouezh.

3. (Mar) ar c'haran he zri figos a dorr(o) troad(/treid) Mikal, (ez a) kamm-digamm war an(/e) askorn, (hogen) an Avel a sav e c'har.

4.Trotal a ra ta vreuder war an(/o) askorn ;

an Avel a sav (ivez) ta vreuder ;

5. ar vreuder, an egalac'h(= mederezh) zo dezhañ ar stern a droc'h ar(/o) c'hroc'hen ;

6. war ta seul(ioù) ez a ar vreuder a chaok Ma Rañjenn, a gousk war stamp ta droad.

7. Breuder Mikal a dro Em Lagad ; ar pennbazzh d'o arzorn (eo)

Gouloù Ma Lagad.

8. Pokat a ra ar breur d'Am Gweuz a(/pa) bok da weuz mab-den, ar weuz a zeu al lin (pe) ar preñv (anezhi kerkoulz hag) ar weuz a guzh an higenn ; pokat a ra ar breur (dezho)

9. (rak) an teil a zeu al liorz (anezhañ).

### **Ema an dister a Vikal dindan paeroniezh an Hollc'halloudeg bras-divent**

10. Ma Lagad na wel ket Ma Zroad ;

(a) Ma Dorn d'Am Zorn e Redan ;

11. Uzet e vez mil menez gant an avel, ne Zeuan ket c'hoazh en-dro ; kas a Ran Mikal (Ganin).

**Kement tra-holl a c'hall ar c'hrouer, nemet salviñ ar bed...**

12. (An deiz ma vo distrewet) an heol (evel) pluñv pavo(d)(= paun)  
e Redan (c'hoazh, hag) e Ran mil heol (nevez e-keit-se).

13. Ma Dorn a dremen, a vig an heoleier, (o zro da) fank ;  
(Ma Dorn a laka) a(/da) skuilh gouleier (an neñv evel) skant.

### **...hep asant koustiañs mab-den**

14. Ma Dorn a c'holo ar breur a ya emskiantek(-holl) ;  
(eñ) a vount war an heol, ar gouleier (eus an neñv kerkoulz ha re e spered), (e-giz ma vez)  
bountet (a-raok) an azenn gant ar vrec'h(ad) spern.

15. (A-dal d')ar marv (hag) an naon ez a a-ispilh teod an den,  
e kren e elgezh ;

16. (hogen evel) ar veprell(= askell-groc'hen) e talc'h (ouzh) Ma Gweuz, (e teu da vezout) ar breur,  
e ev an Dour Druz – na sec'h ket (Anezhañ) – , e nij uhel  
(dreist bez) ar foz.

### **Red eo adkavout ar feiz oberiant, a spered-krouiñ**

17. Ta vrec'h a vriata ta benn ;  
huanad ta votez a(/en em) vesk (gant) ta anal.  
Bez' out ar wezenn (hag) ar wrizienn hag ar vleuñvenn (eus ar wezenn).

18. Plat (eo) ar gredeg er foz, (intampius) e ruilh an nozioù (warnezhañ).  
Kamm-digamm ez ez, (hogen) ta c'har a dremen (dreist) an heol.

### **Dieub diouzh an droug mab-den na zouj ket ken ar galloudoù**

19. (Eus) ta weuz a(/di)lam an drouskenn !  
Gwalc'h ta deod ! Ganit ema Ma C'homz.  
20. C'hwiban d'ar c'haran ! Tri figos a red a-raok ; tri fav a red (evel) an tour,  
(ha hi) kouezh. Tri banos n'he sav ket.  
Gres (er) peoc'h (e tle bezout) Mikal.

### **Glac'harusat kenoaz etre ar C'hrouour hag ar c'hrouadur**

**XXIII/** 1. (Flastret eo) Ma Gweuz dindan ta droad pounner.

2. (Hogen) pounner eo Ma Seul (ivez).
3. Ned eo ket ar maen mab d'an tan ; ar maen-teuz (eo a zo).
4. An eskap(= kolonenn) (e-giz) ar garvan a bil (war) ta skouarn (ha) ta lagad.
5. Faoutet eo an eskap gant al levenez (e-doare) ar c'henn ; laosket (eo an eskap)  
gant al lagad (bliv) a lugern (a levenez) ; pilet (eo) gant (treid) an dro-zañs ;  
an Avel eus ta weuz a(/he) skign (evel hue/huan).
6. Ar mous(= moj), sko(-eñ) ! Font(et en o foull e b/)pevar faz(= pav) (evel) ar vont(enn).

### **Red eo dihuniñ ar reiz speredel pe spered-a-galon**

7. Komz a rez, c'hoarziñ a rez, kreñv(oc'h eo) ta skop.
8. Ma Genoù a ro (dat-te) ar bara (hag) ar glav.
9. Prepus Mi'al(= beskenn amdroc'h) (eo) ta anv, (dre) na za ket ta skop  
(diwar-d/)traoñ/tnaou, ema (roet diwar-)laez.
10. Ta vreur a wel ar Gouloù, debriñ a ra Em Dorn ;
11. An den na wel ket ez korzailhenn ; debriñ a ra ta deod.

12. An den (eo evel) ar marc'h, a(/e t')zebr men e van e droad.
13. Ar frouezhenn nand eo ket ar wezenn ; te (eo a zo) ar frouezhenn. (Mar bes) aet (en hent), na zistroez ket.

### **Ne c'heller ket bout e servij ar Wirionez hag ar gaou war un dro**

#### **XXIV/**1. Bez unan ennout !

2. (Mar) krogo ta zant Em Gweuz, e talc'h.  
(Mar) krogo ta zant ez kweuz, bez' out daou.
3. (Mar) kleuzo ta gof (gant) an aon, bez' out dek.
4. Bez unan !
5. (hañval ouzh) tri bouzar (eo) ar penn a had (a-strew) en e zivskouarn(-eñ e-unan).

#### **Muioc'h a spered zo en ur maen...**

6. Krial a ra ar maen Em Skouarn. An den a gri en e skouarn na glev ket ar maen ; Klevet a Ran ar maen.
7. An den a serr ar sterenn dindan e valgudenn a zebr an trouz (evel) ar gaouledenn.
8. Troc'hiñ a ra (an den) e zorn, skriv a ra (en) e lagad, touziñ a ra c'hoarzh.

#### **...eget e empenn mab-den ; ret eo ma cheñcho**

9. Lakat ar sterenn Em Dorn a ra ar breur ; (neuze) e klev ar maen, redek a ra mil vloaz war e vrec'h.

### **Ra ray Egipt ar peoc'h gant Israel (1977) !**

#### **XXV/**1. (Krog e-barzh) ar beg(= kreion) ! Kas a Ran ta lagad (men e v/)brezel ar blev tev.

2. Sarbal (ha) Moussa (= menezioù eus Sinai) a glaou Yeouroushlim(= Jeruzalem), e(/a) ouel ar(/he) muriou.
3. Gervel (a ront) : “Al !” (= Doue) ;  
al lagad a wel al lagad, (pep unan a gav dezhañ bezout) Em Dour (ha youc'hal) :  
“Gwall evit) gwall !”
4. (Kent ma) tremeno Ma Seul, (ha ma) lezo ludu, dave an askell wenn :
5. “Ar paro(= faraon) a(/Ra) gomz(o evel-se) ouzh Israel :  
“Serr ar c'hlaou ez torn”!”

#### **Ar brezel, un euzhadenn spontus ha na ziskoulm tra ebet a-holl-viskoazh**

6. Dave a rez an askell wenn d'ar paro.
7. Oblad(ed), hegi(/ot Ouzhin) c'hoazh,  
(hag) ar Vrec'h a stur ar gouloù-deiz a vanna ar safr(= safir, arm nevez) ;
8. mont a ra (ar safr) er fron, salliñ a ra ar goad, e vig an nervenn (ginviet) en he sav.
9. Ar peoc'h a sav eneb ar Sant a gouezh (ag) ar gouloù-deiz d'an diskar (war serr-noz).
10. An dent du zo al(/o) levrou ganto a strebot.

### **Ne sikour An Tad (ar Sant) nemet d'adsevel ar peoc'h**

11. Ar Sant, (evit ur viken e vez) plantet E Beoc'h ;  
(hogen) ar peoc'h zo ar rusk (tanav) gantañ, (en) debriñ a ra an dent.

### **Ar bed-mañ, dezhañ e lezennoù hag e gontoù, a ya d'an argoll**

**XXVI/**1. Riñviat ar bouloù a ra an dent du (evel) kon kozh.

2. An den a gont (zo) plat e c'houzoug, laset e deod,
3. derc'hel a ra (war) e rann a-dreñv e lagad, e c'henoù.
4. Marv (eo) ar breur (pa vez) serret e zorn.
5. (Adal ma ra) Ma Rann diouer (d'an den he nac'h), (e ra diouer) ta zorn (dezhañ) ivez ;
6. (ne vern pegen) ruz (e vez) ta dal (o roiñ bec'h), (serret e vez) ta zorn (evel) ur graoñenn.
7. (Ar) b'haer(= puñs), (eus ar) b'haer d'an den du (hag eus ar) b'haer Din un dour (nad eo ket) Ma Dour.  
(Dle eo dezhañ,) ar b'haer a zoug e rann (eus Ma Lod hag eus lod mab-den).

### **Keloù eus ur pezh mell enkadenn wall reuzus da zont**

8. (Aet) brein an aour ; (aet) mouget an tan ;  
(aet) yein an heol ; (aet) goullo ar gwinizh.
9. Dindan an den an troad ;  
ar mab d'an den (zo diarvar e/a graban.
10. (Ned eus ket) an dorn a(/d'en em) gemer (evit) an troad ; ar mab d'an den, ur ouel (vresk eo) e zorn.
11. C'hoarzhin a ra ar preñv (neuze), lart (eo) ar preñv er fank kalet.

### **Red eo cheñj ar bed, adkavout skeudenn ar Mad**

12. Eurvad (gant) an den a graban ar fank, a zebr ar preñv.
13. Torriñ a rez gar(/divharoù) ar vistri,
14. migiñ a rez an heolioù a (vez pa) deuz an houarn (hag) ar flat gwenn(= gremm galloudus bras, nerzh kreñv kenan).
15. Ta rann (eo) Ma Rann.
16. Briata a rez ar c'har wad,
17. (hogen) ar c'harr a goroll war an tan, he zorrez.

### **Oberourez spis he spered ha nerzh bras an dazont : ar vaouez**

**XXVII/**1. (Troñ a ra) an vi er vaouez (da g/)kroc'hen sec'h.

2. Ar vaouez, n'ev ket he morzhed an dour filar(= sper) ;  
evet a ra ar gwin a hej ar c'hof.
3. Ar bugel na gousk ket war ar vronn ; eno e kousk an den.
4. (Gant) an aer (hag) ar glav (e vo trec'h) an den du.  
Kouezh a ra an den a gont, ar yar he lagad kazh
5. (Ema) e vrec'h a-ispilh (gantañ) an den du.
6. Pignat a ra den ar wenodenn, den ar riz, (den) an tubra(= taouarc'h?, torzhell?) ;
7. Leuniet (eo) ar vaouez gantañ.
8. Da vreur (eo).
9. Ar vaouez a droc'h, a droc'h ar penn,  
a zigor he morzhed d'an hini kreñv.

10. Dirak an nor ar bugel, paot (a vugalez) ; krial a ra ar bugel (gant al levenez).
  11. Gant ar glav, an aer e steuz an den du.
  12. Blev tev zo d'ar vaouez, digor a ra he dorn d'ar breur, he dant a grog er glaou-bev (hag) a ra an neud.
  13. Ar peoc'h (zo gant) ar vaouez. Skuilh a ra ar Gomz a-dre an dent (eus ar vaouez), dinaou a ra an heol eus he bronn.
- Toull he gouzoug a gomz, al lagad a serr al lagad.

### **Pazennoù istorel ar bignidigezh speredel**

**XXVIII/**1. Ar vaouez, (ema) dorn an Hini Mat en he dorn.

2. Kreniñ a ra Yeushou, bez' e kren ar vaouez ;  
Goueliñ a ra Yeushou, bez' e ouel ar vaouez.
3. Chomel a rez er vann en Avel (evel) an evn ledan ;
4. (hañval ouzh eskern) Yeushou (ha) Mouhamad e tarzha ta eskern,  
(o) difrae a ra pell an Avel.
5. Bez' ez On an Nerzh ;  
ema an Nerzh er breur (kerkoulz hag) en den fall.
6. (Bez' ema) an Nerzh e Yeushou, (e) Mouhamad, (hag ivez) en hini du,  
en draen ;  
(bez' ema) e skouarn ar breur (hag ivez) er c'horn (eus ar bual).
7. Abraham, ar glazard (eo) e vreur, a gerzh (war) e gof.
8. Moshe a(/Am g)wel, a zebr Em Dorn (evel) ar chazh ;  
ar c'hazh (zo) ar glazard dindan e gof.
9. Yeushou, ar maout (eo) e vreur ; dindan e gof (e tremen) ar c'hazh.
10. Ar marc'h (eo) breur Mouhamad ; dindan e gof (e tremen) ar maout.
11. Mikal a(/Am g)wel, a zebr Em Dorn ; kel ledan (hag) uhel (eo) e vreur  
(hag) an erer.

### **Kement den ha eñ fall, a wel ar Gouloù mar fell dezhañ**

12. Troiñ a ra an hini du evit ar Gouloù ; hadiñ a ra an halen (da welet) sklêr.
13. Plat eo ta dal, tri zu zo d'az skouarn ; skoiñ a rez gant ta skevent  
(evel ma rer ouzh) koad kleuz. (Koulskoude) ema ar Gouloù ganit.

### **Marzhusat ur burzhud eus an den o adkavout e Grouour**

14. Sko gant ta skevent, an Avel a zeu er-maez (anezhi) !
15. Digor ta wazhienn ! Ar Gwad a zeu er-maez, nijal a ra (kuit ha hañval ouzh) ar goumoulenn  
(e red tro an douar).
16. Sko ta dal (ouzh al leur-mañ ! Ledet (eo ta dal evel) ar mor,  
dre-holl e red ta weuz.
17. Pevar zu houarn zo d'an den kreñv,  
bez' e vergl dindan Ma Daer (avat).

### **Mont en tu all da blanedenn loenel ar bout-evitañ-e-unan hag ar gwall donkadur**

18. Ar marmouz, (gant e z/)daou zorn a(/e t/)zebr.  
An den (a vez) gantañ un dorn a zebr, un dorn a ro.  
Ma Daouorn(-Me) a ro.
19. “(Bez' on) ar maen, eme an den (en em gav) kreñv, e(/mar d/)teu an Avel,  
ne gas ket an Avel ar maen (gantañ).” An Avel a (zo gwell dezhañ, e te)gas



(gantañ) an evn (a nij) diwar toull ta c'houzoug.

20. An den (en em gav) kreñv, blod (eo) e lagad (evel) ar c'hankr a zeu diwar e askorn ;  
(e v/)blaziñ a ra an hini du.

### Profedegezh Mikal, kadarnaet eo an test...

21. Roiñ a Ran ar Gomz da Vikal. (Ra he) mir(o) !  
(Te, bez' e vi) kreñv er Gwir ; al Liorzh az peus da hêrezh.  
22. Bez' Emaon o teviñ (evel) Liorzh Moshe.

### ...met ret e vo dezhañ trec'hiñ war e wander denel !

23. (Mar) sachi ar(/ta v/)barv dirak al(/ta) lagad, e Lakan (da redek) ur froudad skorn  
dindan ta sae.  
24. (Laka) ta lagad dirak ar sterenn ; hir(a) ta vrec'h !  
Bez' ema ta vrec'h o teviñ (evel) ar gloan, e(n az) Sachan (Ganin).

### Graet eo mab-den evit ar beurbadelezh, ned eo ket reizh dezhañ mervel

25. Sell ! Ta eskern a van (ouzh-)traoñ/tnaou.  
26. Mir ar Gomz ; ere(-hi ouzh) ta arzorn !  
Komz ouzh ar vreuder, (da-c'houde) e komz ar vreuder (ouzh an dud).  
27. Bes azezet Em Zi (ha) kae war an hent !  
Kousk, war evezh (e vez) ar (v/)breu(de)r ; bez' e tigor al lagad, e vezez evezhour  
ar (v/)breu(de)r.  
28. Mab-den a bok ouzh stamp ta seul.

Chabistr XXV :

D'ar 25 a viz Here 1977 e c'houllenn ar C'hrouour digant an **test** skriv da bPrezidant Egipt Anwar el-Sadat ha da gKentañ Ministr Israel Menahem Begin a-benn o fediñ d'ober ar **peoc'h**. Tel-Aviv na ray van outi gant skrid-degemer ebet. En-enep, kannati Egipt Pariz, abred tre beure d'an 9 a viz Du 1977, a bellgomzo da **vMikal** e aruo Anwar el-Sadat e Israel edan-berr. Douariñ a reas karr-nij Prezidant Egipt e Tel-Aviv d'enderv-noz end-eeun an deiz-hont.

Chabistr XXVI :

Kollet zo dezhañ e **ene** Mab-den, dre gavout gantañ en devout gwel e eürüsted e dalc'h e **zorn** (XXVI/10) en ur bellaat diouzh ardoù-devot ar garantez hag an esperañs, met un douelladenn e oa avat (**ur ouel vresk**).  
Kredenn an holl-danvez hepken pe danvezelouriezh gros he deus lakaet da zistroiñ warr-c'horre nerzhioù gouez kentidik : **lart ar preñv er fank kalet**, a zo diaz loenel, kriz, **mestronius den ar skeud** (VII/2) a zismant hep arsav kement tra zo, betek e reizhiad dezhañ e-unan zoken. Brezelioù, barradoù-reuz ha gwalleurioù a bep-sort a vo an denelezh dindan o bec'h ken na **cheñcho** (28/7) ket anezhi dre dremen ag ur vuhez danvezel a-grenn (**houarn ha flat gwenn** = an holl-energiezh) d'ar vuhez speredel.  
Danvez zo eus mab-den sur a-walc'h (**ar c'har wad**) hag ar C'hrouer en deus el lakaet **mestr** war an danvez-holl (**ta rann eo Ma Rann**), met mestroniet e vez ervat hennen gañtañ pa vez-eñ evit en em vestroniañ e-unan (18/1-3) razh a-bezh, da lâret eo mar krou a-nevez e **ene** (e **gorf gwirion**, 17/3) hag adkav galvedigezh e anien speredel.

Chabistr XXVIII/25 :

An **test**, tennet er vann a-daol trumm, a chom en amzer da dri metrad a uhelder etre al leur ha framm an doenn. Avaze e **wel e eskern** a zo a-ispilh dioute e gig aet da vreintez, e gelan dezhañ-eñ e-unan azezet **en traoñ** war ar vrich m'ema o paouez kuitaat. Dre an amprou-hont e fell d'ar C'hrouer kas soñj dezhañ mar bez ken euzhus d'an den ar gwel ag e **varv** eo en arbenn ma vez ar verventez denel un dra direizh, un amreishted kaset gant ar **pec'hed** a ren a-zrebi gwall choaz **Adam** (2/5). Met mar be ul lodenn ag an denelezh (ar **vreuder**, ar **restadig**) o tiwall (**evezhour**) diouzh an droug a vez ouzh he c'hriñnat hag he lazhiñ, o vont pervezh war **stamp** seulioù **test** Ares, e vo cheñchet ar bed ganti hag e trec'ho war ar **marv** war un dro.

## Pevare Teofaniezh D'an 19 a viz Du 1977

A-zivout ar pevare Teofaniezh **Mikal** en deus skrivet : “Gourdrouz a ra **Mouezh** Doue. Kompren a ran e klaskan c'hoazh d'an iliz digarezioù bezout anezhi, pa vezant - splann eo gant Doue - gwashoc'h eget arvarus” (Notennoù ha Prederadennoù an Test, emb. 1989 ha 1995). Ur wezh c'hoazh e tislavar ar C'hrouour, dogmoù an drinded ha daspren ar pec'hedoù dre ar **groaz**, soñjoù barzhionel hag a zo deuet diwarne ar gristeniezh a iliz hag he esperañsoù gaou, dre na vezer salvet namet dre ar **mad** lakaet e pleustr, evel m'en degas da soñj Diskuliadur Ares. **Jezuz** (an Hini **Mat**) **nad eo ket Doue** ; ar **C'hrist eo an Hini zo** (32/2), **skeudenn** ar C'hrouour eo kement den ar **mad** anezhañ (Geneliezh 1/27), ha hi drouglazet ouzh ar **groaz** a

sav an **droug** dibaouez war ar bed.

### **Klasket e vo gant ar relijion tenniñ he mad ag an Diskuliadur-mañ...**

- XXIX/**1. Trec'het, ema ar roue gwenn o tont er-maez, e zorn (astennet) e(n e/)-raok.
2. Troiñ a ra an dorn an troad(/treid) diwarnañ evel ar fi(g)ez, gar (ar feizad) a-ispilh.
3. Troc'het ar gouzoug (eus ar roue gant) ar skourjez a droc'h (ganti) ar gouzoug(où).
4. Komz a ra ar roue gwenn, an avel zo dezhañ ar skouarn (eus ar feizidi) ; (hogen) an avel (a ya) a(-)dreuz(-da-dreuz dre) ar(/o) c'hostoù.

### **...met ne vo nemet pompadoù fougeüs anezhi, ober van tra ken...**

5. Kouezho ar stered (? “Ema Ma) aezhenn o takenniñ(, eme ar roue gwenn).”
6. Gwiskiñ a ra maneg Moizez.
7. Komz a ra ar roue gwenn, (hogen) an(/r) hini(/re g/)krouget (a gomz outo n'eus) ket ar skouarn (dezho).

### **...peogwir e savo ar *Vuhez* a-nevez diwar ar vadelezh ha neket pedennoù**

8. Kouezh a ra an troad, ar vorzhed (ag ar re grouget) : gouloù en douar !
9. Arat (ar glenn) a ra ar roue du, (war un dro) kroc'hen (ha) douar.

### **Ar marv speredel a fonn d'ar bed disakr**

10. (Huchal a ra d'ar roue gwenn :) “Sach (c'hoazh) !”
11. Teil (eo) mab ar roue gwenn.
12. Ar roue gwenn, e gof (a gav gantañ bezout a g/)koad glaz.  
Ha eñ debriñ, breugeudiñ, ur broñs (a sav dezhañ).
13. Mikal a droc'h ar broñs.
14. Kerzhed a ra ar roue gwenn, e treizh an dour, e gomz (a sourr evel) ur sardonenn.
15. (Hogen) ne ra (ken) nemet kemer sun ar (re v/)marv ;  
sachiñ a ra war an troad a-raok (hag) a-dreñv, an troad a gouezh.
16. (Nag ar roue gwenn da grial :) “Nijal a ra ma mab !  
(Peogwir) e vez o nijal ma mab, e pok e weuz ouzh an heoleier.”
17. An evn zo kerniel dezhañ a gas ar weuz d'an(/e) neizh.
18. Ar roue gwenn, ema e vab e-kroug (evel) ur sac'h.

### ***Mikal*, nag un douelladenn nag ur c'hrouadur eus ar galloudoù**

- XXX/**1. Bez' Emaon o komz ouzh Mikal, neket ar sac'h.
2. Morzhed mab-den, ned eo ket ar sterenn he c'hadoer.
3. Goullo (eo) e vorzhed.  
En e sav (e van) mab-den (met e-giz unan) krouget.

### **Fideled ar relijionoù : gwerz an dud krouget**

4. “Az korrean, eme ar roue gwenn (d'ar c'hredennour).  
Holen ar stered a beg (ouzh) da vlev.”

5. Gorroet (eo) an hini krouget (gant ar roue gwenn).

### **Relijion ebet ken, met youl digabestr da vout mat**

6. Ne C'horrean ket (dre heg). Ma Brec'h (a c'hortoz) e penn brec'h an den ;  
(mar fell dezhañ e tap krog Enni).

7. (Mar) dalc'ho Ma Dorn hag e zorn ar bigell (a-gevret),  
mil bloaz eo an den, (ha) dantiñ a ra c'hoazh.

8. (Ar breur,) skuilhiñ a ra e wad, dindan e groc'hen (avat e red) Ma Halv.

9. Ar c'hog(= keginour) gwenn a servij (poazhet e/)an c'hwez ar marc'h gwenn aet faezh.

### **A lignez Izaia (Bibl) ema diouganour Ares**

10. Ar-Restad-a-Zeu-(En-dro eo) Mikal,  
e vrec'h a sav uhel(oc'h eget lindag) ar pej.

11. Ne Lasan ket ar vrec'h (eus an hini a zouj d')an emglev ;

12. e(n er) C'hasan (d'an) Uhel (men) e steuz an aour er Mor a zebr(er evel)  
ar bara tener.

### **Ne c'houlenn Mikal nemet ar pezh a c'houlenn an Tad**

13. (Klemm a ra) mousig Mikal :

“Ar-C'hein-a-Zoug-ar-Mor a voustr (war) ma lagad, (drezañ) e tailh (din ar C'hrouour evel)  
al lard ;

14. (ker) kalet (eo) E Deod (hag) an troad.”

15. Lavar d'az moused :) “A lein ema Ar-C'hein-a-Zoug-ar-Mor.

16. “Ned eus ket daou vlaz din. An nervenn besk (eo a laka Doue) em genoù ;  
ar fouas(= bara-kan) a van (d'ar re grouget).

17. “Dispennet (on) Gantañ, kaset e vez ma daouarn, ma divhar (d'ar) pell(où Gantañ).  
Kemeret e vez ma gwreg Gantañ evit E Labour, faoutet (er gêr) dor ma zi (Gantañ).”

### **Ar vreuder pe Pirc'hirined Ares, abostoled ar bed...**

18. Sko gant ar(/o) glin, (ma) plego !

19. Gourvez war ar(/o) c'hlopenn, (ma) stoko (ouzh al leur en em ziskouez) Ma  
Zan !

Bez' e Taolan (neuze) Ma Dorn (warnezh).

### **...gant sikour Tad an Hollved**

20. (Hogen) ar breur zo an Tan ennañ (a-benn bremañ pa vez) ar berv en e galon,  
an etev (eus ar Gomz) en e vel.

21. Ar breur a sav (d')e gambr a sav (gant) Ma Lez.

22. (Amañ lec'h m')Emaon o komz (hag) e komzez evit an deizioù (hag) an deizioù,  
an den (e) lagad tarzhet a dap nerzh dezhañ ;

23. ha eñ da ziskar ar gwariour, (ar) riban(= alouber), youlaet Ma Zan gantañ er beure-mañ.

24. Benniget eo Mikal gant Youou(= Yahweh, Yhwh, Jehovah).

### **Nend eo ket marv Jezuz a-benn daspreniñ ar pec'hedoù**

**XXXI**/1. Kroaz an Hini Mat, ruilhal a ra ar gwad diouzh ar groaz.

2. Ar vrec'h (eus ar c'hruisfiet ned eo) ket pav ar c'hi e trap ar pej.

3. Kemer a ra an douar gwad an Hini Mat, gouloù-douar (evel) kroc'hen ar groug(adenn).
4. Sevel a ra ar pouez (eus ar marv) e graban, e pign an Hini Mat, kof goulo (eo) ar c'hav, dalbez (e vez) naonek ar c'hof.
5. Diouzh ar beure, diouzh an abardaez, (diouzh sour) e stambouc'h ar marv an douar.
6. Yeushou a huch e anv war ar roue gwenn a zebr e vara, (a dremen) e benn en e sae.
7. Gwerzhiñ a ra (ar roue gwenn) an daouarn (hag) an treid (eus Yeushou), e talc'h ar c'hrog skourriñ.

### **Ret eo da dest Ares dispenn touelladur saouzanus an dogmoù**

8. Gwalc'hiñ a rez ar gwad (eus Yeushou), e tinaou an dour el liorz (druz), e waskez (ar pri anezhañ da sevel) an tour, e C'hwezhan, (er) Poazh(an).
9. Gwelet a rez Ma Biz a ya (eus) kaledenn ta droad (da) Ma Lagad a dro an heoleier (Ennañ).
10. Ta gomz (eo) Ma C'homz. Reishted den reizh.
11. Ta gof na zigor ket, ta lagad a red tro-ha-tro (dezhañ). Kousk, e red (choazh) tro-ha-tro (dezhañ).

### **Sikouret e vez Mikal gant an Neñv, daoust na vez enep e youl-eñ**

12. Ta fri (hag eñ) a skarr ? (Ta v/)mogediñ a ra ar roue gwenn, ar roue du.
13. Agela(=ael, aelez) a sko ta zorn a(/mar t/)zalc'h an naer-wiber, (met mar) evi al likor a voged, ar pich(=peg) (eo) ta zorn.

### **Skoazell ar C'hrouer grataet d'e dest**

14. Ar barr-amzer a gousk war ta droad (evel) ur c'hazh ; (huch dezhañ :) “War-sav !”, maliñ a ra. Ned eus ket kerse gant Ma Emglev.
15. Unan (hepken) a sach Ma Brec'h.
16. Digor a Ran ta lagad (evel) ar gouloù-deiz, ta gerc'henn (eo evel) an haleg, (hogen eus) ta gorzailhenn a red ar Gomz diouti, bez' e c'hallez (komz Em Anv).
17. (Evit) un dant torret (dezhañ) e Roan daou (da Vikal) ; (gant) daou zant (e/)a youc'h Mikal.
18. Heuilh an Dour ! Pevar oad e vez d'az kar. Ar Sant na vount ket (er-maez) an c'hwibaner a gan ganit.

### **Kent mont da goll e klasko ar roue gwenn (ar relijionoù)...**

- XXXII/** 1. Ar roue gwenn, e vab a sol e gorf en dour du.
2. War lagad an hini krouget e red ar gelionenn, (evel) lèr morlivet (eo) e weuz ;
  3. ar marv a stard ar fri (eus ar v/)mibion unvan.
  4. (Bez) war ziwall ! Lonket e vez an Aer gant ar roue gwenn, e taol an Aer er-maez (ac'hanout-)te.

### **...troiñ komz Ares war e du-eñ...**

5. (Diwar da) lagad argas ar gelionenn !
6. Temz an dorn, ar c'har !
7. Gwri ar ouel, gwri ar ouel (warnout) !
8. Trouz mab-den : yhoudi, mouselemi, kristan.

9. Trouz pounner (ar c'h/kig, ar c'hig (zo) ar gwad dezhañ !  
Goulo (eo) ar gwad.

### **...met ne vo nemet Mikal aet a du gant an Avel**

10. Kouezhiñ a ra ar c'haouled (evel) mein an oabr : afar(= poultrenn, huan).
11. Glav a ra (argoll pa vez) gourvezet an Avel.
12. Ma Halv (eo an Avel) !
13. Bez' e Kouezhan (a-zrebi) an Neñvoù d'az tremm.

### **Youliñ lubaniñ an diouganour eo youliñ lubaniñ Doue**

14. Er-maez ag ar voger ar re grud(= re griz) a c'hourvez ar maouezi, ar(/o) rozell-forn a denn an arc'hant,  
debriñ (a raont) dienn an tir ;  
golojiñ (a raont) Ma Dorn (evel) an c'hwil-kloreg, (E) flastriñ (a raont) ;  
sterniañ (a raont ar bobl evel) ar c'hon.

### **Pasianted e vo gant an den mat a-dal d'an drougiezh**

**XXXIII**/1. Ur skourjez a Lakan ez kenou, ur voger (eo) Ma Dorn ouzh da askre.  
2. An houarn (a ya) ez askre (evel) Em Dorn.  
3. Mikal a sav er basianted ; gwaskiñ a Ran war ar wazhienn-vras, marv ez a an enebourion, war an eur hag an eur.  
4. Ar gorzailhenn (a vez o wrac'hiñ) war ta c'hrozmol a dremen ar skoaz ; (an hini a vez e/ar gorzailhenn o chaokat ta deod a las an tilh(= kouarc'h, ere) (en-dro dezhi), flaer zo gantañ ar beure-mañ.  
5. (Mar be) brechataet da c'hlin gantañ, (mar be) gouelet gantañ, e Prestan Ma Mouezh (dezhañ),  
6. (met) an teod a ya er gorzailhenn a zebr gant al loen.  
7. Ar menez war ta varv (hag ar menez) a gousk a-raok ta zor, ez ez etre(ze evel etre) ar pou(ennou).

### **An divinour a ya e skiant-vat digantañ, en e skiant ema-eñ an den mat**

8. Lenn a ra ar seb(= soav), ar goumoulenn, an naon (zoken) a gont gevier (d')e gof ; forbann(-eñ) !
9. Er Gouloù ez a ta lagad, e tenn Ma Dorn ta deod (evel) ar rolled, ar gwir a lenn ar breur (ennañ).
10. Ar breur, dave(-eñ) da lavaret (ar Pezh a Lavaran) !
11. (Dis)troiñ a ra ar Mad er breur.

### **Ar pezh a skriv Mikal a vez skrivet e anv an Tad**

12. Skriviñ a rez (evel) an Avel a riz ar Mor.
13. Skriviñ a rez, ar breur a gomz ; restaol a ra ar vurbuenn ag e c'henou, ez a an derzhienn (dioutañ), e teu ar galon (ennañ).
14. Mikal (eo) an(/o z)/tad,  
(a-zrebi penn) fin ar werin e sav ar breur(/vreuder),  
na stok(ont) ket (ouzh Mikal).

## **Gwin ha bara ar garantez ha neket re an oferenn**

15. Ar breur a ev ar gwin a ta c'henoù, debriñ a ra ar bara a-dal dit, skuilhiñ a ra an olev war ta benn.
16. Ar foll a azez (war) e vlev, kuruniñ a ra e droad ; ar roue gwenn a olev ar c'hestour a glev ket ha netra.
17. Ar sitron ouzh ta zant a lipez (c'hoazh), na(/'el) lip ket !
18. (Mar be) ar foll ennout, plant ar forc'h (ennañ) !
19. Gwele ar (c'h/)goukou(ed) eo ar c'holo.

## **Sol ar Soleier a sav war c'horre ar bed adarre**

**XXXIV**/1. Mikal a embann ar Gwir.

2. Ma Dorn a chourik dindan ar rusk (hag) en ilin ; ne(/'Er c'h/)glev ket mab-den.
3. Poueziñ a ra (Ma Dorn) an heol, (en) C'hwezh ; Ma Gweuz a zinaou ar font(où)(= feunteunioù, eien) (Anezhi).
4. Rivin (war) ar mestr na ro ket gwenneg ar Gwir !
5. Ar c'hlon na oar ket ar vamm (zo dezhañ).
6. Ma Lagad, eus Diaz an Diazoù e(/en em d/)tenn e Nerzh.
7. Tro(ioù) a-eilad an heol(eier) na gav(ont) ket an Diaz. Klask an Diaz a ra ta lagad, (ne welez) ket an Diaz, gwelet a rez an ivin (eus an troad), (ne welez) ket ar c'har.
9. Kemer a rez ta empenn, (e) debriñ a rez, ta lagad a zebr ta empenn, ta lagad (a) hir(a) an nervenn, (hogen) ne welez ket an Diaz.
10. (Em/)Ma Lagad (hag eñ a vo) miget an heoleier kent (n'arsav) an trouz (a lavaret) : “Ned eus ket an Diaz dezhañ” ?
11. Gwelet (e vez) an ivin gant Ma Lagad, (pa vez o) kouezh an ivin.
12. Mikal (zoken) na glask ket an Diaz. Digor ta wazhied ! Lavar(-Din) : “Deus tre !”
13. “Gaouiad !” eme-int. Din(ded), (ad)sav ta gein !

## **Ne bare ar skiant na d'ar sotoni na d'ar marv**

14. Ar minoc'h na bae ket gobr ar marc'h ; marc'h Mouchamad na wisk ket al lèr.
15. Ned eus ket ag ar valvenn d'an den du.
16. Lipat ar stal a ra an den du, e(n he) skub e valgudenn.
17. (Mar) pare ar bubon(= burbu, gwerbl), e sav (war) ar goabrenn.
18. (Ne vez ken) en e sav (nemet) ur beure goude beure ar marv.
19. Gourvezet (e vez) ar marv e mab-den. E-raok (pe) goude e sav ar marv.

## **Nend eo ket gant ar politik e vo salvet ar bed diouzh an droug**

**XXXV**/1. Sened ar re varv, diskenn a ra ar sened (e douar).

2. El(/n hevelep) lost buoc'h a vlej e krog ar sened da heul.
3. Breur Mikal, ne vez ket e zorn gant ar sened.
4. Mestr an harozed out, (o) gervel a rez.

## **Dont a ray an eurusted gant harozed ar vuhez speredel**

5. Kuitaat gouel ar re varv a ra an harozed.  
Gouel hêr(ed) an hêr(ed).
6. Ar gouel a ganer tefilot(= kantikoù, kanennoù iliz) ennañ en ur skuilhiñ daeroù yen.
7. Breur skleur ar gouloù-deiz, (ema) da vreur azezet war e dal skañv.
8. Ar winienn c'hlaz a sav (betek) e benn.
9. Ar chug, e ro ar bobl (ag) an teod (ennañ).
10. Ema an harozed o c'hortoz.
11. Ta vrec'h a sav (a-zorn) kleiz (a-benn Ma diskouez).
12. Sevel a ra an harozed, diskenn a ra ar marv dindan an inizi.
13. Ne gouskont ket (anezhe). Bez'(/pa) vezez e ged, e kouskont (d'o zro).

### **Neuzioù kentelius ha largantezus e vez d'an droug**

14. An den du a ouez diouzh e doull kuzh.
15. (Hogen) breuder Mikal a faout ar c'hein(où), ar c'hein(où) a guzh an aour, an dour a voged (hag) a gomz, an houarn tort.
16. Al loar a dañva ar goabrenn ; bouzar (e vez) ar vibion unvan.

### **Kement mammenn wirion eus ar Mad a vez er Grouidigezh**

17. Ar Min (hag) an Dour On.
18. War an yen e C'halvan an tan, (ha war) an c'hwez e C'hwezhan.
19. Ez a Adam (neuze evel) an houl (ag) an dorn da Ma Dorn.
20. War e soul e verv ar mel, e plant ar c'har (ad)arre, e wisk ar flamm ar c'hroc'hen.

### **Daoust d'e neuz gwall zister e trec'ho ar mad war an droug galloudus**

- XXXVI/** 1. Ma Dorn, E Lakan er faout ;  
ne serr ket (ar faout), ta skoaz a ya.
2. Ar roue gwenn, las (dezhañ) an te(s)t(= kell, tezh) !  
Ar blogorned-ejen, sec'h (eo) tarzhell al(/o) lañchenn.
  3. Er gaoued (ema) ar garz kreñv ha kaer. Piv a wel ar gaoued ?  
Lagad ar roue gwenn a las (e c'hronn war) ar garz ; gouzout a ra ar roue gwenn ar garz nad eus ket dezhañ an vi.
  4. Lakaat a Ran ar skourjez ez torn.
  5. Golc'h ta benn, sav ta vrec'h ! Embann ! Nac'h (ar pezh) a Nac'han !
  6. An enebour, e kouezh an euzh (warnezhañ).

### **An diouganour, micherour mouller ar Gomz**

7. (Da v/)Mikal e Roan an troad-houarn a ya war ar paper (hag) ar vreuder a zoug tres Ma Roud (a-nes-da-nes) ;  
Ma Biz (eo) a zigor al Levr.
8. Ma Fortun (eo) ta vas
9. (Graet eo) ta wele diwar (un) inkard, (hogen) kousket a rez Em Dorn ;  
c'hweziñ a rez (ouzh) an durgnell, (hogen) an Avel a(/he z/)dro.
10. Ganit (ema) an ael(ez) kata(= a-dreñv, dindan, dre-holl).

### **Ned eus sevenadur erbet perc'henn war ar Gomz**

11. Derc'hel a rez kreñv al Levr. Bez'(/pa) vezez o komz, e vez al Levr o komz.
12. An hini unvan (out), al lagad a zigor (hag) al lagad a serr, an hini kejet, ar weuz velen (hag) ar weuz zu, ar glav (hag) ar c'hazarc'h.
13. Tu araog (ha) tu gin (out), mab tad (denel ha) mab kof, (ha neoazh) mab d'Am Brec'h (ha) d'Am C'homz.
14. Diouzh ar sav (war) ta c'har, klev (ha) komz !

### **Chal trubuilhoù an diouganour a enor ar C'hrouour**

15. Faoutiñ a rez an tal (kalet evel) ar voger.
16. Ma Enor (out)
17. An hini fall a c'hoarzh : “Moged, mibin an hini !”  
Debr ta vara (e peoc'h) ; ta vara az peus.
18. Mogediñ a ra ar roue bras (evel) kafor(= kañfr) (ha) eoul, (hogen) Mikal a chom dindan ar Fron.
19. (Ez a) eeun ta gammed Em Sandalenn.

### **An uvel a Vikal brasoc'h eget pennoù-bras ar bed-mañ**

20. Misi(= ministred, kannaded) (ha) houarn (a ra ar gurunenn) ; e-kroug ema ar roue (ouzh) ar gurunenn(-hont).
21. Kreñv (eo) an an dorn, ar rod.
22. Nag ar far(= forn, govel) (a red) war-lerc'h an heoleier ?  
Devet (eo) ar far gant an heol (eus ta justis) a ro daou zorn.
23. Ta bant(pant = torr, kof) a dalv (muioc'h eget) ar mirdi(où).

## **Pempet Teofaniezh**

### **D'an 22 a viz Du 1977**

Dihunet eo Michel Potay evel ma voe c'hoazh seul taol da bep teofaniezh a-c'houde an daou a viz Here (Gouel-Mikael). Er-maez, ema karg-barr amzer an noz get an hevelep luc'hed ha stokoù houarnaj ha war ar mogerioù e wel an hevelep diveradurioù gouloù (gwelet notennoù deroù an deofaniezh kentañ). Koulskoude e sav daou skoilh war an hent d'ar chapel, ne oa-eñ tamm en gortoz anezhe. Un dibunadeg c'horrek a “**spesoù** truek”, hirisus, a dreuz al liorz ag ur vur d'eben, eus a gornaoueg da reter. Pelloc'h ur yoc'had teñval, evel un tour a-skourr ouzh an noz, a vrasell difonn en ur hañval bezout o c'hortoz ma tremeno an **test** dindani evit er flastriñ. Treantet get an aon eo e treuz **Mikal** an dibunadeg-se a **spesoù** ha eñ tremen dindan an tour. Er chapel neoazh ema degemeret gant “an c'hwek c'hwezh bleuñv, ar frond frealzus-hont” klevet aze c'hoazh. “Ur fest a zeu ennon” a skriv-eñ (Notennoù ha Prederadennoù an Test, emb. 1989 da 1995). Neuze e krog an diwezhañ teofaniezh gant he c'heloù, a zo he c'hemennad ag ar re gaerañ-holl e Diskleriadur Ares.

### **Ar C'hrouour a goñfort ha broud an test nec'hañset**

**XXXVII**/1. Ta vouezh a son (d')ar C'hloc'h.

Glan, e son (ta vouezh).

2. Reishet profed, (kae) an daouarn a-raok !
3. Roiñ a ra (ta zaouarn), (met an) argoul(= argoll, argant pe diaoul) a gemer.
4. (Dis)taol an ezañs(! eñ) a losk.
5. (Ur c'h/)kan (war) ta deod (eo Ma C'homz sevenet) gant gred !
6. Komz a rez d'ar vreuder, komz a rez d'ar Sant ; ledet (eo) ta vouezh.
7. Nijal a ra an aer (evel) ur wagenn (betek Ennon) ; Ma Lagad a zigor.
8. An aer, mestr eo ta vouezh (warnezhañ) ; Dougen a ra an aer ta vouezh d'ar breur(/vreuder).
9. Ar breur(/vreuder) a gemer ta vouezh ; An Hini Mat a(/az) selaou ivez : “Ar gwirion out, eme-eñ, ar soñj reizh.”



10. Teodek (e vez) ar bouzar da noz ; ta vouezh na gomz ket da noz.
11. Eeun (ez a) ta vouezh war an deiz.
12. Divskouarnioù (d'Am c'hlevet) ha daouarnioù (d'Am servij az peus un) arme dirazout, azezet war an houarn. An daouarnioù (ra droio ar bed evel) ar pigelloù !  
An diweuzioù (ra embanno) Ma C'homz !
13. Lavaret a rez : “Kae !” An dorn a ya.
14. Ar roue gwenn, ar roue du, (un) hevelep morzhed. Ar bugel a zeu (anezhi), e tave ar roue gwenn (pe) ar roue du ar bugel davedout ; ha eñ lavaret : “Dalc'h (war) ta zorn !”
15. Hogen ta gein On, ta zivgestad (eo) Ma Divrec'hioù. Lavar : “Ma Dorn a ya war an trouz ; faoutiñ (a ra) an trouz (a laka) da vont bouzar.”

### **Heuliañ an Tad, ha neket an urisinerion hag alierion a-vicher**

**XXXVIII/** 1. Ar bpitia(= divinourez, darlavariadez) a ya dindan ar penn, a zivenn ar preñv, ha krial : “Bez' e troc'han ar penn, e troc'han ar preñv.”

2. (Te avat,) ez ez uhel, soñj reizh.
3. (Ema ar) Mad e kleuz ta deod.
4. Ta lagad a wel e kreiz an noz.
5. Goulenn a Ran kuzul digant ta vouezh. Respont !

### **Frankiz ha froudenn a ra eus mab-den ned eus ket da rakwelet anezhañ**

6. Eus Ma Dorn daou droad, pevar zroad a gouezh, an treid a red.
7. (Mar) lavari (Din) : “Troc'h an troad(/treid) !”, e Troc'han an troad(/treid).
8. (Met mar) lavari d'an troad(/treid) : “Kit (gant) an hent (a ziskouezan deoc'h) !”, ez aont (pe) ned aont ket. Ma Dorn na vount ket a-raok an troad(/treid).

### **Jezuz nad eo ket Doue anezhañ, met an Hini Mat peurvat eo**

9. Goulenn a Ran kuzul digant ta vouezh. Respont !
10. (Ouzh) traoñ/tnaou (ar glenn) out ; (ouzh) krec'h/knec'h (an neñv) On.
11. An Hini Mat a zalc'h (gant) an douar.
12. Gwenn-an-deiz, e Vezan (gantañ) ; an abardaez, e Vezan (gantañ), war an holl heoleier.

### **An ha (ene), pont distro mab-den da Zoue**

**XXXIX/** 1. Va Brec'h a red, na stok ket (anezhi ouzh bevenn erbet).

2. Respont ! Perak e wel Va Lagad ta lagad ?
3. Ta nervenn (eo) neudenn velen Va Nervenn.
4. (Hañval eo) an askorn (ouzh) ar c'hoad ; (diwar) koad e kresk koad ; a-raok tarzh ar gouloù-deiz ar c'hoad, a-dreñv an abardaez ar c'hoad (c'hoazh).
5. (Hogen) an ha, ne zeu ket an ha (eus) ar fri ; (an ha n'eo) ket er genoù, ket en dorn ;
6. (eus) ar vorzhed ne skuilh ket an ha er vaouez.
7. (N'ema) ket an ha en trouz.
8. (Evel ma tro) kaoulet al laezh, e tommez an Diaz (ennout), (hag) e kaouled an ha.
9. Tommiñ a rez (an ha), deviñ a rez an aour ; skoiñ a ra ta dal ar maen (lec'h ma'z a) Ma Faz ;
10. (A-neuze) e kaouled an ha, (e kaleta evel) ar maen, (ha padal) skañv(oc'h n'eus) mann.
11. Ar gwad (a ra) ar gwad (evel) ar glav (a ra) ar glav, (hogen) an ha nad eo ket mab

d'an ha.

### **Polonn, ene ar bobl, kendon unvaniezh an haou**

12. (Diwar) ar fank a(/e) skuilh ar polonn(= ene ar pobleù) ;  
(neuze ema) achu an noz, an deiz a doull an hent d'az koaf.
13. (Hep ha) ned eus ket d'an den korn ar grillh(an).  
(Diwar) ar c'horn (ag an den pec'hour) na skuilh ket (ar polonn).

### **Spered ha karantez, perzhioù anat eus ar Mad**

14. Ma Dorn a ziazez ar c'horn (mat) ez lagad (evel) ar wrizienn.
15. Pounner (eo) an Avel (ha) ne veuz ket an Dour.
16. Mikal, keneil ker .

### **Galv d'ar wirionded : Abostol ar Mad...**

#### **XL/1. Plant ta droad (amañ) !**

2. (Mar be) ta droad o vont (ha kantren), (mar be) milis ta zorn ouzh an dreitourion,  
gwrac'hellat a ra ta weuz, breiniñ a ra ta droad en douar.
3. (Amañ e) chom(ez) glan.
4. Goude ar moger(ioù) ar v**ballein**(= bannerez, bangounell).
5. Plant ta droad ! (amañ e kemer) ta gomz he lusk(, ez ay) lec'h ma wel mil lagad.  
Ta gomz (eo) Va C'homz.

#### **...n'eo na dienkorfet na aet da aezhenn anezhañ**

6. Ar **bpatell**(= pladenn, patenn) endan ta weuz, lorberezh ar roue (lakaet) war v**Mikal**.
7. (Kerkoulz dit) man(/menel) klazet ar(/ta) jod.
8. Gwelet a rez Ma Dorn, (Ema evel) ar forn.
9. Kazarc'h a ouel lagad an den.
10. Gouel(iñ ned eo ken nemet) bihan droug.
11. (Met mar) sav al lagad (a-benn Ma daeiñ), (mar) lez an dorn Ma Dorn,  
marvetoc'h (eget) ar marv (e kouezh an den).

#### **Ar marv, ur gwallzarvoud garv bras evit mab-den**

12. (Ur wezh) lonket al ludu, ne van nemet ar garm (d'an den kollet) ;  
redek a ra ar garm endan an douar.
13. (Pa vez) un deiz ar marv, (e tiskuizh) ar penn war vleuñv flour,  
“Mat ar marv, eme-eñ, frond c'hwek, hañv sklaer !”
14. Daou zeiz, garmal a rez : “ Pej, ar marv !” (Hañval ouzh) ar c'hevnid a(/e) sun ;  
e ev ar marv an dour el lagad.
15. Tri deiz, e red endan an douar ar garm a van c'hoazh ganit : “Men (ema) al lagad,  
men (ema) ar weuz, men (ema) an dorn ?” Goullo.

#### **Un dambeoc'h en gortoz d'an dasorc'hidigezh**

16. (Mar) dalc'h an dorn Ma Dorn, e (/daoust ma) ouel al lagad, e van an Dour el lagad.
17. An askorn (a dro e danvez) kleiz, (hogen an den salvet nad eo) ket ker marv (hag) ar marv.

#### **Ar birc'hirinded war al lec'h-se leuniet a-leizh gant ar gomz**

## **XLI/** 1. Bez' Emaon (amañ).

2. Bez' e teuez (amañ), e teu ar breur(/vreuder) (amañ).
3. Ar weuz a gemer an Tan Em Dorn.
4. Loskiñ a ra an tal.
5. An Tan a ya en den.

### **Pedet ar re vev gant ar C'hrouour da zont davetañ**

6. Ar c'hevnid hag eñ a sun(je) an Tan ?
7. Galv ar breur (/vreuder) (hag) ar breur (/vreuder) : “Deus da gemer an Tan !
8. (Pa z/)diskenn(o) ta droad, e nij(o) uhel ta c'harm.”

### **Dister a lec'h (40 kammed), met divent a ster**

9. Daou ugent kammed a skoulm Ma Nerzh (ha) Ma Madelezh lec'h ma sko an tal ar maen, lec'h ma ouel al lagad (evel ma/)e ouel ta lagad,
10. (lec'h ma/)e tarzh (an droug gant) ar broudoù (eus Ma Zan).

### **E nep lec'h all ne vezer ken tost ouzh ar C'hrouour**

11. Ma Dorn a c'hloaz an den, beviñ a ra an den.
12. E zorn ledan(aet) a bign (gant) Ma Brec'h. (Amañ) dorn mab-den a grog Em Dorn.

### **Er profed en em zastum nerzhioù ar Mad**

## **XLII/** 1. Michel, ez kostoù (e Tigoran) ur bae.

2. Paliat(= peuliat, pilochiñ) (a ra) ar breur e enezenn (ennañ), (ul lec'h) diogel.
3. Ar rae a gomz ar(/he) geol (a-z/)dindan, (e teu) ar rae (gant) ar wagenn a c'hlaour.
4. Troidellus, (ar rae) ; ned a ket an houarn (enni).
5. Er-maez (eus) ta gostenn (ema dalc'het) ar gounnar, (hogen) ar gounnar a (oar en em) gempenn (evel) an napeenn(= nimfenn, hoalourez).

### **Gouzout a ra an droug hoaliñ ha kendrec'hiñ gwell eget ar mad...**

6. Gourvez (a ra) er ɔpatell, ha lavar(et) : “Debr(-me) !”,
7. Bez'(/mar) tebrez (avat), ar rae a(/az) ev en avu.
8. Eeun ez a ta lez. (Gwarez) an avu ez lez !
9. Azeziñ a ra ar breur(/vreuder) (warnout evel) war ar pal(= peul) (e azez) an enezenn ; Ma Dorn a(/o) sach war grec'h/gnec'h.

### **...hogen e hoalerezh na ra tamm efed war breuder Mikal**

10. An avel a c'hlaour n'(/o g/)c'holo ket ; ar rae na lazh ket ar breur(/vreuder).
11. Eeun war ta lez (e chom) ar breur reizh.
12. Al Levr a zigor a-dal (d'ar vreuder).
13. Ez kostoù (e anal) Mouhamad, Yeushou, peder brec'h ledet (evel) Ma Mouezh ledet, ar gloan a nez(/Nezan) diskoulm.

## **Kement-se holl zo bet lavaret c'hoazh get Yehaia met ned eo ket bet miret pep tra**

14. Levr ar Vouezh ; Iyeushayeu a bil war ar skoulmoù,
15. Iyeushayeu a rann an deiz (diouzh) an noz.
16. Youc'her, ar c'hañval (eus Iyeushayeu eo) an heol (a dro) en-dro (da Yeushou, Mouhamad ha Mikal).

## **Da Vikal eo ema roet a-nevez ar Wirionez-holl...**

17. (Eus Mikal e) lavar (Iyeushayeu) : “Sell ta vrec'h tev, gronniñ a ra(-hi) ar rae, roltiñ a ra(-hi) he c'hroc'hen, al levr (a lavar) gaou.
18. Dislonk a ra ar beleg(/veleion an Dour o deus evet e gaou).”

## **...ha dre-se e vo taget an diskuliadur-man ken-ha-ken**

19. An houarn (a vuk) d'az penn (pe) ar geol a beur ta benn ; ur gaouad fulor (ruz) a grog er fri (eus ar rae).
20. Ar sent a wel (ar fulor-se), (int) a gren, (int) en em strew ;
21. Mikal a(/o g/)c'halv (en-dro), ar(/o) beg(où) a doull ar rae (evel) an erc'h.
22. Komz(et Am eus dre) Iyeushayeu : “Mikal a sav Ma Zi war Ma Zi, e Lakan Ma Zroad (warnezhañ).
23. Ma Lagad a serr war vMikal, e Ran breuder Mikal.”

## **Erbedennoù goulennet start digant Mikal**

### **XLIII/1. E Meilh Ma Dorn ema Mikal.**

2. Kroget, ar rae. Bez'(/mar) laoskez, toullet (out).
3. Meilh ta Zorn On, maliñ a rez (ar rae ;) un draezhennad (a rez anezhi).
4. Mouhamad a vac'h an draezhennad ; ar marc'h (eus Mouhamad er mac'h) dindan an troad.
5. Yeushou, an houarn tan, ar mor a verv ; gwer(aet) an draezhennad.
6. (E) mil (ha) mil bloaz (aet eo) kleret ar falz, (aet da) frut(= frost, dall) an houarn ;
7. (hogen) Mikal (a lako) ar galon (da droiñ) ruz (evel an houarn ruz) er glaou-bev.
8. An den breur a wel (Mikal), ez a an den breur (davetañ) ; (en em stagiñ a ra outañ evel ar) rusk d'ar galon ; (da) hoarn (lemm e tro) ar rusk.
9. Ur pont er yenijenn (savet ac'hanout-)te da Ma Dorn.

## **Nerzh ha gwirionez a zinaou diwar Dorn ar C'hrouour**

10. (Diwar) Ma Dorn e tinaou ar Mel(-askorn) ;
11. Ar c'hi du na zebr ket ta galon a zinaou ar Mel (enni).
12. (Evel gant) ar raz (e laka ar Mel da goazhiñ) lagad (ha) teod ar roue gwenn (e) bouilhenn.
13. Ar roue du, (e tro) e vrec'h (hañval gant) teod ar groug.
14. An Tan a sav en houarn (ruz), toull ar sol ; (adalek) an Diaz a(/e) sav (betek) e penn yen ar breur.
15. Redek a ra ar Mel hed an houarn (betek) penn yen ar breur. Komz a ra (sklêr) ar penn yen, (met evel) nav fenn eo ar penn tomm.

## Lusket eo get an avantur speredel vras

**XLIV**/<sub>1</sub>. Ar Menez a serr war an Diaz.

2. Mikal a(/en em) daol er-maez (war ar stegn).
3. Stuc'hennoù(-askell eo) ta zaouarn.
- Nijal a rez, (na bezout) e lezez ta droad en Douar.
4. Me zo (ha Me) zeu da gerc'hat ta droad.
- (M'er) stag (d') ta(/az k/)weuz.
5. An Arouez n'eo ket (roet c'hoazh).

## Diouganourion a-gent da skoazell an diouganour a-vremañ

6. Bez'(/pa) nij(o) Mikal (avat, e vo evel) an Avel tomm.
7. Ta c'henoù a led glaou-tan Yeushou ;  
ta vrec'h zo goaf Mouhamad ganti.
8. (Dre-)holl ema ar skorn (mestr war) an Dour.
9. Penn ar breur zo an Dour gantañ.
10. Nijal a rez, (neuze) Mouhamad a zeu e varc'h dindanout ; e voue (reunek)  
a nij (a-zorn) dehou (dit).
11. (A-zorn) kleiz dit e tro an Hini Mat tro-dro (d'an douar).
12. Mikal a nij.

## Kousiadur ha lañchennadoù a arsailh hag a dag *Mikal*

**XLV**/<sub>1</sub>. Meilh Ma Dorn a ziskar ar c'hi(/c'hon) e(/o) lost du.

2. Ar rakig (e ronkell zo) tri c'hant geol (dezhañ), mouezh kozh war-zinaou,
3. e kresk ar barv (war) e lagad (avat).
4. Nijal a rez,  
(hogen) ar rakig a(/na) wel (namet) e varvenn en e lagad, luc'hiñ a ra ar varvenn.
5. Hir (eo) ar pav (ag ar rakig, met) valk(= jilgamm, ezkamm/war-skuilh).  
Ar pav a ya, al lez a dro.
6. Troiñ a ra al lagad (ag ar rakig), ema al lagad (ag ar rakig) o c'hedal al lagad (ag an den)  
treantet dindan ar pav (gant an aon),
7. (hogen) al lagad (ag ar rakig) na wel ket Mikal Em Dorn.
8. Ema ar mergl gant e vrec'h ; enep dit (e kas) ar rae ;  
he houarn (az tag dre-z/)dindan.
9. Nijal a rez avat (dreist arvar an argoll).

## Ha trumm e tiruilho ar bagad *deol eus an esperañs dieubet*

10. Ar Menez (zo Dezhañ) ar pikernioù na wel ket ar (c'h/)gedour(ion) e(/o) lagad (ri)boul.
11. (Ema) ar penn(où)-tiern ar preñv (gantañ(/ganto)) en e(/o) lagad,  
(rak-se) o deus ar (c'h/)gedour(ion).
12. Ar genel a gomz (a lein ar Menez) :  
“(Hil) an Tarv a ya er vorzhed.”
13. Trumm e kouezh (ar g/)kenel zeol, he bronn en a-raok, kalet he bronn (evel) Meilh Ma Dorn  
a bil (war an douar) ;
14. ar falc'hun e bologed (zo) o c'hrabanou (dezho) ; (a-vostad) mil (ha) mil(où)  
a bil (war) an douar, (evel) ar bouc'haliou (int) a bil.

## Ur bobl speredel a sav a-nevez hag adc'hounez ar bed

15. (Diouzh) krec'h/knec'h e kouezh, gwenn(-kann evel) an Dour ; berviñ a ra (pa vez) é kouezh, e foet (evel) ar skourjez,
16. (diouzh) krec'h/knec'h e kouezh ar genel zeol, (tarzhiñ a ra evel) ar barrad-arnev ; an divskouarnioù a darzh.
17. Krial a ra (evel) an heskennoù. Nivlenn-vrum perlez(-glizh Dour an Neñv).
18. Ar (c'h)/gedour(ion), e(/o c'h)/gof a ya en e(/o c'h)/gein ; troc'hiñ a rez an divhar (hag) ar gouzoug eus ar penn(où)-bras (a vez) an aour e-skourr (outañ evel) al loupennoù(= gouzougad, pennsac'h).
19. Ma re unvan a ruilh an druzoni en dour (lous eus ar bed a droio d')an Dour a verv.

## Trec'h e vo ar mad war an droug evel ar falc'hun war droug an uhelioù

20. Ma re zeol a sav ta arouez, ar falc'hun dizaon.
21. (Ar falc'hun a nij dreist) ar wagenn a ra glaour (dre z/)dindan ; (he) gwelet a ra (ker bihan evel) ur bizenn.
22. Beuziñ a ra ar Mor ar rae hag ar (c'h)/gedour(ion).
23. Sevel a ra ar Mor ar vreuder (evel) ar foenn.
24. Ar roue gwenn, (lakaet eo) noazh ar roue (zo) pounner e groc'hen.
25. Ema Mikal ar Gwenn gantañ ; setu an Distro !
26. Nijal a ra Ma Falc'hun, (ha d'an diskuizh) e kousk e droad war Ma Dorn.

## Un nebeud alioù evit obidoù ar benedourion

- XLVI/** 1. Ta vreuder o brec'h(= kalc'h) (pe) o huegan(= ellig), kalz (e vo) ar c'hrez-kout serr(et warnezho).
2. Ar c'hrez-kout a c'hronn ar groazell (hag) an dorn ; (e/)ar vrec'h wenn a(/e) wri(er) ar penn ; an askorn a c'harzh er pleg(où).
  3. (E/)an doal, mantell ar breur – ar breur e droad karnek –, a(/e) wri(er) an troad.
  4. Ma Genoù (eo) ar gambr (eus ar breur marv, ar c'hrez-)kitoneth(= sae/krezenn, hebraek) ; Debriñ a ra ar breur war Ma Dant.

## A-benn an diwezh evelkent e vo trec'het dinerzh ha dilusk ar goustiañs

- XLVII/** 1. Bez' e Komzan (abaoe) mil (ha) mil bloaz ; serriñ a ra ar skouarn.
2. Yeuroushlim na zalc'h ket Em Dorn ; (gant) an trouz (ez On bet erlec'hiet) e Yeuroushlim.
  3. An eskemm, e(/er) Roan.
  4. Ar c'hlann (eus Ares), ar c'hlann zo dezhi an halen (a laker) er bara, ar glizh (eus Ares eo) ar gwin (a vez) golc'het teod ar breur gantañ.

## Ares, lec'h nevezadur (Hanouka) ar Gomz

5. (Ares ez eo) glenn Hanouka (a-)rez (gant ar mor), (lec'h) na lip ket ar breur ar c'hoad.
6. Hanouka-an-teod-naet, ar glenn benniget endan ta valvenn ledan.
7. An troad (tapet) en draezhennad ez eo gwrizienn varv (anezhañ).
8. Ar weuz (hag) an tal (a astenn) hir etrezek ar Forn ; (evel gant ur)

rabab(= rebed, violoñs) skañv e Klevan (o c'han).

### **Evel deus ur puñs e tenner deus *Mikal* an nerzh war grec'h d'ar silvidigezh**

9. Ha Mikal (ha eñ ker bresk evel) ar seiz, Mikal zo (toull) e c'houzoug ar feunteun (lec'h m'edi) Ma C'homz o neuñval, a sav (evel) an trowent ;
10. kalet (e tro Mikal evel) an Dour a bil war an douar.
11. Hogen nijal a ra ar breur (a-)dreist ganit.

### **Ar gomz pennañ-holl roet d'ar bed**

12. Ta dal (eo) ar morzhol war ar broadoù.
13. Golc'hiñ a Ran ta galon.

### **Lusk an deoliezh pemdeziek**

**XLVIII/**1. Ar (b/)vardell(où) (hag) an astell(où) a youc'h tra ma Komzan (dit).

2. Youc'hal a rez (Ma C'homz pa) ruz ar skeud ;  
(pa) stou an heol (tremazout), e youc'hez ;  
(pa z/)debr ta c'henoù an heol, e youc'hez ;  
an heol dindan ta droad, e youc'hez ;
3. youc'hal a rez : “Me (eo Neb a) Gomz !”
4. Galv ar breur, ar breur, ar breur !
5. Daou ugent (gwezh) seizh deiz, (ema) ar ouel war ma Fenn,  
ta droad el las ;
6. ta deod sec'h a red war ar ouel,  
(hogen) an eoul gwenn a sav (e-barzh) ar ouel (evel) an eoul er gwin.
7. Daouzek (gwezh) seizh deiz an Neñv (eo), e nij (kuit) ar ouel,  
e lagad ar breur ez a an eoul gwenn.
8. Dindan Ma Zroad ema e zorn ar breur, devañ a ra ar galedenn (eus e zorn),  
(e teu da vezout) e zorn (heñvel ouzh) ar seiz.
9. Ar breur, e weuz a gemer an Tan.
10. (Eus) daouzek (gwezh seizh deiz) div rann domm,  
(eus) daouzek (gwezh seizh deiz) ur rann yen.

### **Kement kredour a-feiz a vo abostol d'ar gouloù ha d'ar garantez**

**XLIX/**1. Ar Forn a boazh ar c'hleze.

2. Ma Brec'h (a ya) e gouzoug ar breur ; bountiñ a ra (Ma Brec'h) an Houarn  
en dorn (ag ar breur), an Houarn (a) zo kalet.
3. Faoutiñ a ra ar breur prederi ar broadoù ;
4. an Houarn a ziwall liorz Adam.
5. Komzour (eo) ar breur.

### **Degemer kerkoulz ha kas kuit a ouez an abostol**

6. Bez' e komz ar breur :  
“Al lagad zo an Dour sklaer ennañ, ruz (eo) an teod ; deus tre !”
7. (Anez e lavar :) “An tal (zo) un toull (ennañ), (evel) koar (eo) an teod,  
troiñ a ra ar vrec'h e-barzh (enni he-unan evel brec'h) ar moutia(= korf-balzamet, balzamegenn) ; Kae kuit !”

## Ar garantez hep klouarded laosk eo a drec'ho war an droug

8. Faoutiñ a ra an Houarn ar c'hleze (evel) ar graoñenn/gnaouenn.
9. Mil lu enep an Houarn, hogen ar Forn a boazh ar(/o) c'hleze(ier), (o laka) gwak.

## Prientet eo an test da vezout diouganour

- L**/1. Bez' e Walc'han ta galon,  
2. (ha te,) e walc'hez kalon ar breur.  
3. An Houarn, al(/e) lemm out.  
4. Bez' e C'hwezhan war ta vlevenn, (kouezh a ra diwar ta benn hañval ouzh) ar maen-tan(= maen-teuz) o redek,  
5. goloñ a ra an douar,  
6. digoriñ an dor(ioù eus ar bed) a ra (evel ma tigor) ar maen-tan (ar menez-tan, dor ar bed).

Chabistr XLIII/1 :

Ar gouloù – anvet “bzh c'houlou” gant an test – a zeu Mouezh ar C'hrouour anezhañ a ya war greñvaat betek bezout trellus-holl. Kontet gant an test : “Ar strakadegoù ha tarzhadegoù o tont eus framm an doenn a ya war washaat. Krenn douar ?... Penfolliñ a ran, teurel a ran ma divrec'h er vann, lusk didalvez evit lakaat an trouz da baouez... ha daou zorn berv loskus a grog em daou arzorn, a sach war ma divrec'h... Daouarn Doue ! Eus ma c'horf a-bezh e sav moged evel pa vize o teviñ. Ma chomje a-walc'h evel-se da virviken, dalc'het ma divrec'h en amzer en ur skuilhiñ daeroù a levenez.” (Notennoù ha Prederadennoù an Test, emb. 1987 da 1995). Ha neuze e tiskrog an daouarn diouzh an divrec'h hag e kemer en-dro an test e greion hag e baber evit skriviñ ar C'hemenn a grog gant e red adarre.

Chabistr L :

A pa achu an diwezhañ teofaniezh, dibradet eo an test en amzer hed un nebeud kentimetradoù diouzh e azezenn. Gant ar from ha eñ aet skuizh-divi, e tarzh trumm da zistag komzoù treñk : “Petra a Rez-Te ouzhin ? Petra am eus goulennet Diganit ?” hag e giz respont e resev ur flac'had distaget taer dezhañ hag a “darzh em fenn evel ul luc'hedenn... Seizet on, e tirollan da oueliñ.” (Notennoù ha Prederadennoù an Test, emb. 1987 da 1995).





